

BRUD

Niv. 4

NEVEZ-AMZER 1958

BRUD

ar Yez hag ar Vro

Kelaouenn lennegel drimizieg Emgleo Breiz

Bloavezh kenta - Niverenn 4
Nevez-Amzer 1958

Komananchou

Komanant-bloaz : 900 lur
Komanant-skoazell : 1.500 lur
An Niverenn 250 lur

Kas ar skridou, al liziri hag an arhant da :

BRUD - Revue littéraire d'Emgleo-Breiz
B. P. 17 Brest
C. C. P. 1921-04 Rennes

Niv. 4



Ar Yez hag ar Vro

TAOLENN

◆ J. TRICOIRE	Talvoudegez ar Brezoneg evel eil yez evid ar vachelouriez	5	
◆ Padrig HELLEN	Nevez-Amzer	10	
◆ MAB AN DIG	Kizier-Not Sant-Pabu	16	
◆ Per HELIAS	Yannig an Termaji	59	
◆ Urvan PERENNES	Ar Pab Inosant	64	
◆ Yan BREKILIEN	Ar Rod a dro	72	
◆ Danevellou YEUN AR GOW :			
	Teñzor lenn Meilb-ar-Roh	80	
	Yun ar Halvez	83	
	Eul laeradenn iskiz	86	
◆ BREHONEG BRO-GUENED.			
	Loeiz HERRIEU	Sonerion koh on bro. En daou vreur Flejaou	88
	Franséz KERLU	Strong a baotr	91
	Fillorez SANT-PIER	Er vuoh viban	94
◆ BREZONEG BEO AR BOBL.			
	Y.-Y. BIS	Psalm	95
	Y.-L. AN THEO	An-eboul kollet	96
	Roparz GOURMELON	Eur vuoh speredet	97
	M. DIVANACH	Per-Yann hag an diaoul	99

E KENVER BREIZ

E-kreiz an XX^{ved} kantved, én eur vro o klask kelenn ar poblou all, piou a zoñje ez eus tud « désket » o houzoud komz pe o kompren eur yéz heb beza bet gouést, gwech ebed, da skriva pe zokén da lenn anezi? E-giz-se ema kont gand milierou a Vretoned, koulskoude. Ha n'eo ket eur yéz? Ha n'eo ket poent-braz cheñch penn d'ar vaz?

Hag evid ar Vretoned yaouank na ouzont ket brezoneg, evel lod anezo, daoust hag-eñ n'int ket evel estrañjourien e-touesk anioiu tud o bro, anioiu peb tachenn, peb park, peb korn euz o bro? Hag ar re a zo a-du gand kelenn al latin da yaouankizou Frañs, dezo da intent gwelloc'h o orin, daoust hag-eñ ne dlefent ket beza a-du gand kelenn ar brezoneg, diouztu goude ar galleg hag a-raog al latin, da vugale Vreiz-Izel, a zo keltieg o orin dezo, ha n'eo ket latineg, evel lodenn vrasa Frañs? Poelleg e vefe, neketa?

E-KENVER BRO-HALL

N'on ket Breizad, ha koulskoude on deuet da vourra o komz hag o lenn brezoneg. A zo kaerroh, kalz Gallaoued a anavezan evel don. Perag kement-se? Perag, ma n'eo ket dre ma 'z eus ér brezoneg, muioc'h eged e meur a yéz all, boued yah ha fonnuz da vaga ar spered, ha peadra da lakaad ar galon da dridal. Ya, ha kalon eur Gall, war ar marhad! Eur Gall laouen-oll da zizolei eun tammig penaoz e komze e hourdadou ar Halianed. Gwad galian, dreist-oll, eo a red én e wazied, ha n'eo ket gwad latin. Rag, a-benn ar fin, ar Hallaoued n'int ket Latined: kaer am-eus komz saozneg, n'on ket Saoz evid se! Ar Halianed, kaer o-deus bet en-em-rei d'ar yéz latin, n'int ket deuet da veza Latined penn-kil-ha-troad: Kelted int chomet da genta-oll. Kement ha kén bihan ma vefe mad d'an oll Gallaoued déski brezoneg, na petra 'ta!

Pell ema ar galleg diouz ar brezoneg, evid sevel e 'frazennou, a lavarere. Kement-se a zo gwir evid pez a zell ouz ar galleg lenneg. Galleg ar bobl, avad, a zo gwall zisheñvel diouz galleg ar skoliou, hag e 'frazennou a zo heñvel-mik ouz re ar brezoneg, meur a wech:

Viens vite! ton père qui arrive! (... ho tad a zo oh erruoud!)
 Ton mouchoir que t'oubliais! (Ho mouchoer a ankouees!)
 Demain qu'on ira! (Warhoaz ez aim di!)
 Peut-être que vous viendrez. (Marteze e teuoh.)
 Avec quoi que vous faites ça? (Gand petra e rit an dra-ze?)

Skrivagnerien klasel Bro-Hall ne oant ket evid dégémér ar « qui » pe ar « que »-ze, a gavent re bounner; hag ar brezoneg e-neus muioc'h a jañs gand e « a » pe « e ». N'eus forz. An heveleb skwériou-frazenn a vije kavet e galleg hag e brezoneg, ma vije degemeret ér galleg lenneg doare komz pobl Bro-Hall. Ha koulskoude, ar galleg a zo gwall bell diouz al latin, hag ar brezoneg a zo kén pell all diouz ar heltieg koz: yézou o kemma dilost ar gériou e oa al latin hag ar heltieg. Perag, neuze, e vije deuet poblou Breiz-Izel ha Bro-Hall da drei o frazennou én eun doare heñvel-mik — pez na hoarvez ket gand poblou all an Europ — ma ne vije ket bet troet damheñvel spered tud an diou vro? O veza ma emaint poblou keltieg o-diou.

E leh enebi Breiz ouz Bro-Hall, klaskom unani. Komprenom ez eus amañ diou bobl keltieg, a-benn ar fin; hag e hallont ober labour vad asamblez, gand ma ne vo hini ebed anezo o klask ober fae war ebén, war yéz ebén.

E KENVER YEZOU BRAZ AN EUROPE

Ar brezoneg, kénkouz ha n'eus forz peseurt yéz indo-europeg, a hall lakaad an den da gompren gwelloc'h tra pe dra e gériadur pe e yézadur ar yézou all komzet én Europ hag er Reter-Tosta.

Daoust d'ar Hallaoued beza deuet da gomz eur yéz latin, meur a hér galianeg — da lavared eo keltieg — a zo chomet e galleg: ar brezoneg a ro alhwéz seurt komzou: « balai » (diwar balan, banal, dre ma vez greet ar skubellou gand balan, war ar mêt); « quai » (kae); « mine, minerai » (mên, mein), h. a... h. a...

Eul labour hir-hir e vefe keñveria peb tra a heller keñveria e brezoneg hag ér yézou indo-europeg: n'om ket evid henn ober amañ. Evelato, eun dra zo hag a heller ober gand ar brezoneg, ha na hallfed ket ober gand yéz all ebed (nemed eur yéz keltieg all e vefe): keñveria gériou o kregi gand eur gensonenn disheñvel ér yéz-mañ-yéz. Rag, kemmaduriou ar brezoneg a laka an dén gouést da gompren diouztu peseurt kerentiaj a zo etre seurt gériou: pa ouzom e vez lavaret e brezoneg « va dant », « e zant », « ho tant », ne vim ket souezet-braz pa gavim, evid ar gé « dant », dent » e galleg, « zahn » én Alamaneg, ha « tand » e holandeg. Eun daolenn a ziskouezo brao-tre kement-se:

T	D	Z, ts, th
ho tant	dant	e zant
tand (holandeg)	dent (galleg)	zahn (alam.)
tooth (saozneg)	odontos (greg.)	zoub (ruseg)
ho teg biz	deg biz	e zeg biz
ten (saozneg)	dix (galleg)	zehn (alam.)
tien (holandeg)	diesiat (ruseg)	
o tañsal ema	dañsal	
tanzen (alam)	danser (galleg)	
tantsovát (ruseg)	dansen (holandeg)	
tri breur	e dri breur	va zri breur
trois (galleg)	drei (alam.)	
tri (ruseg)	drie (hol.)	three (saozneg)
K	G	H
kalon	ar galon	he halon
cœur (galleg)		heart (saozneg)
cuore (ital.), etc..		herz (alam.), etc..
kaz	e gaz	ar haz
cat (saozneg), etc..	gato (spagnol)	

korn ar vuoh	daou gorn ar vuoh	he horn d'ar vuoh
corne (galleg)		horn (saozn.)
kant		tri hant
cent (gall.)		hundred (saoz.)
cto (ruseg), etc..		hundert (alam.), etc.

P	B	F, pf, v
pésk	e bésk	he 'fésk
pescado (spagn.)		fisk (sued.)
pesce (ital.)		fisch (alam.)
poisson (gall.) etc.		fish (saozn.), etc.
pedis (troad) (lat.)		foot (saozn.)
pied (galleg), etc.		fuss (alam.), etc.
plat (plên) (galleg), etc.		flat (saozn.), etc.
pour (evid) (galleg)		for (saozneg)
por, para (spagn), etc.		für (alam.), etc.
plantenn	e blantenn	he 'fiantenn
plante (galleg)		pflanze (alam.)
parrez	e barrez	he 'farrez
paroisse (gall.)		pfarrei (alam.)
peul	e beul	he 'feul
pile, pilier (gall.)		pfahl (alaman.)
	beva	o veva
	beo	
	biologie	vivre
	breur, breudeur	e vreur, e vreudeur
	brother (saozn.), bruder (alam.), h. a.	frater (lat.), frère (gall.), etc.

Gw, g'	W, v
gwin	e win
Guillaume (gall.)	William (saozn.)
Gauthier (gall.)	Wilhelm (alam.), h. a.
gages (gall.) : gopr	Walter (saozn.), h. a.
	wages (saozneg).

Trawalh evid hizio. Pajennou ha pajennou a hallfed karga e-giz-se.

A-benn ar fin, peseurt yéz a vije treh d'ar brezoneg, evel eil yéz vachelouriez, pa fell d'an eil yéz-se digeri spered ar re yaouank? Peseurt yéz a hallje, gwelloc'h egéd ar brezoneg, digeri hentchou an Europ a-béz? N'eus kén nemed an dud dizésk a gement a hallfe lavared ar hontrol.

Breiziz, ganeoh ema ar gwir penn-da-benn, pa houlennit ar brezoneg evel eil yéz. Hag ar gounid a yelo gand ar gwir, abred pe ziwezad; an abreta a vo ar gwella, avad!

J. TRICOIRE.

Diridiou 15 a viz mae 1958

Seizved

Devez ar Brezoneg

NEVEZ-AMZER

gand
Padrig Hellen

Rimodell ar Goukoug

[v — | v — | v — | v —]

Kan...

Pa gano-hi da Bask, c'hwi oar...
— Er stankenn hlaz da gala-mae,
D'he heul, an drask a gano gae
D'ar heure yen pa deuz al loar. —

... Vo klask d'ar bleoñ... Ni 'z ay d'o 'foar!
Ha gouel d'an heol e toull peb kae.
Pa gano-hi vo plan, c'hwi oar,
Er stankenn hlaz, da gala-mae!

Er pradou druz e-kreiz o gloar
Vo flour ar yeot da lez ho sae;
Ni 'z ay da glask bokedou glae
A zev 'n o zav 'vel goulou koar,
Pa gano hi da Bask, c'hwi oar!

... ha diskan

[v — | v — | v — | v —]
[— v | — v | — v | — v]

Pa gano hi da Bask? — Pez kaer!
Dao vo hada 'valou douar!
Hir an ero, pell an dalar...
Ha dao dre heg ma n'eo dre gaer.

Nag imor fall 'n or halon daer!
Larim neuze: « Pa vo mouar! »
Pa gano hi da Bask, pez kaer:
Dao vo hada 'valou douar!

Ar spernenn-wenn a vo 'n haer
Med or glinou leun a zouar,
C'hwez an teil en avel glouar
A deuy d'or heul war-nij en aer —
Pa gano hi da Bask ken kaer!...

Koulz ar Goantiri

[— v | — v | — v | — v]

'Hed ar girzier, na soniri
Giz ma vije ar bisigou
Ouz ar bizier kleierigou,
Badeziantou gand peb hini. —
Strobinellou!

Ar rouziged hag ar mouilhi
Pennklaouiged gleb er gludou,
Skiltr er girzier o haniri
Ken ma tride ar bisigou
Dreist ar hili.

Giz ma wigour rodou kirri,
Ar boh-ruzig gand e glemmou;
Gand ar pintig e gantikou,
Pich eur stivell war ar bili. —
Hud er girzier, poan ha dudi,
Ha koantiri.

Pa oa 'hanom bugaligou,
Stok or pennou, krog o c'hoari,
Pebez birvilh gand or homzou,
Vel gand evned al liorzou...
' Save 'wechou trouz fachiri,
Lintre daelou, skrije leñvou,
Dintent sklintin vel braoigou
Pa ziruilhont gand eun diri. —
Eledigou!

Bez 'z eus ato bugaligou,
Sard er perzier o safari...
(Pitilh ato er mintinou
Leiz ar girzier geiz an neizou!)
Bez 'mañ ganto or cholori,
Bez 'mañ ganto or regennou. —
Me daveto gand lipigou:
Int dinijal vel an dridi!...
— Lamponidi!

Nevez-Amzer

[— v | — v | — v | — v]

Reo a ziver diouz ar herez,
Gwenn ha tener. Seo ar broñsou
Beo-buhezeg er penngosou
'Fenn o frondou, kreñv ha nevez,
E goerez.

[v v — v]

Heol hag êzenn, meo ha mêvez,
Dreo o c'hoari, ' garg a bilhou
Neo ar foziou gand bleoñ kerez
Hag a 'floura kreñv an deliou,
Luskellerez.

Streo er gwasked, askell-êlez
Zav o hellid, teo o begou;
Kreiz o zoullad, keoiad spegou,
Eo e tiskenn a bimpavez
Dre gaouadou, bleoñ ar herez :
Ginivelez.

'Vel er bodou, seo zo ivez,
Kleo 'ta pôtrig, 'leiz da jodou;
'Leiz da galon, keo ' garantez,
Dreo he hasenn, verv ar vuhez,
Hag e loska yeo ar furnez. —
Meo out ivez gand da hoantou !
Sant o pignad seo ar hignez
(Eo 'ta, pôtrig!) gand da jodou:
Amzer nevez.

'Vel ar bodou beo out ivez,
Teo da vorzed, kreñv da bokou,
Puilh da bennad bleo garlantez,
Beo-buhezeg, 'vel eur werjez,
Eo da gorvig — ken ma virvez...
Dreo 'mañ warnout stumm da baskou. —
Gand ma bado eo, e ampez,
Reo ar glanded, liou ha frondou
Bleoñ ar herez.

Troicadenn miz ebrel

I

[v — v | v — v | v —]
[v — v | v — v | — v]

... « Bugale, m'ho kwelan er prad !
Ma kavan er yeot ho skasou,
Fregaset ar 'foenn a blasou :
Leusk hardis ! Po kerse d'ho stad..

« Gourdrouzal a ray hoh ael-mad
Ma dehit diouz hent e hrasou —
Rag pehed eo bale er prad :
Gand diaouled ez ay ho skasou.

« Hag amañ e kavoh ho tad :
E welim vo gleb ho poutou,
E klevim gand gwrez ho korvou
C'hwez eston miz ebrel 'n e vad...
Ken speguz c'hwez kegid ar prad ! »

II

[— v | — v | — v | — v]

— « O leusk hardiz ! Ni ziwallo :
Gand pëb dornig beb a votez. —
Ma 'z eus pehed vo da govez,
N'eo ket boutou on tamallo !

« Chê ! 'n oll aelez, trist, 'n em jalo
Dreñv ar glêdou ? — Hel lavarez !
Ma 'z eus diaouled, eo divalo
Kaoud anezo kreiz or parrez !

Koz sorhennou ! Den n'or gwelo. —
Mad e klevom trouz ar holvez,
Er ster-gwalhi zo gwalherez :
N'eo ket pikez on diskuilho. —
O leusk hardiz ! Ni ziwallo !... »

III

[v — | v — | v — | v —]
 [v — | v — v | v — v]

Bez' oam war aon, bez' oam dre laer,
 O vond da 'foar ar bokedou,
 D'ar yaou, dre hlazienn ar pradou
 Gand ode hlaz an nadoz-aer.

A-guz dre greiz eun trouhad kaer;
 D'ar red war weled d'ar glêdou;
 Ez êm war aon, ez êm dre laer,
 Da bell, da bark ar bokedou.

Er glizenn wenn eun ale sklaer
 Damalle deom or hammedou;
 Er 'foenn oa frêz or fehedou :
 E rênt d'or heul eur roudenn aer...
 Ha 'z êm war aon, ha 'z êm dre laer!

IV

[— v | — v | — v | — v]

Pegen marzuz pehed marvel
 Seurt yaouezioù ! — Piz zelaouem
 'N oll goukouged krog d'or hervel :
 Droug-speredou ve ken laouen ?

O hrougousad, eun durzunell
 Groñs hourdrouze, vel eur gaouenn :
 Ve an êlez ken spont-bugel ?
 Ve ken raouliet o hanaouenn ?

Ouz heoledi er yeot izel
 E flammine mil louzaouenn :
 Gand sklêrijenn ho koulaouenn,
 Tommheoligou, bleoñ dimezell,
 'Z êr d'an ivern da viz ebrel ?

V

[— v | — v | — v | — v]

Geiz lapoused leiz ar stankenn,
 Amouroused flour o douell :
 Petra larent 'n o rimodell ?
 N'ouiem dare joa pe anken!

Luh eun askell diouz peb brankenn,
 E tiboufent, 'n eur mouch avel,
 Tre dirazom, ha 'n em zouchent
 Tre ken souden en eur devel !

Med er waremm eur harzadenn,
 Med er garrhent eur garrigell :
 Ouz ar mouilhi oam-ni heñvel,
 Tre ker buan, 'n eur zoubladenn,
 'Touesk ar hegid en em vugem !

VI

[= v | = v | = v | = v]

Speg 'n or hrohenn c'hwez ar hegid,
 Red 'ta distrei bred-abredig,
 Deut d'ar voused aon reuzeudig,
 Beh d'on diouhar gwisk al lehid.

Heg rasailhe deom ar gegin,
 Goap rasailhe pok-ar-hoadig;
 Speg 'n on dilhad c'hwez ar hegid,
 Her ar strilhad 'benn-emberrig.

Bilou reem gand ar vilfid :
 Grêt or pehed, hag amgredig
 Stad on distro — peuz-goustadig !...
 Koun on droiad ken dihound
 Speg 'n on ene blaz he hegid.

VII

[— v | — v | — v | — v]

Che! Va Doue, Tad pinvidig,
 Touez ho tanvez a bourvezit
 Ken a leton, ken a lehid,
 Pa vo echu he zroiadig,

'Z ay davedoh, tra gizidig,
 Hi a vroude kreiz or brennid;
 'Z ay dirazoh, ar paour kêzig,
 Hi, on ene, a bourvezit.

Petra ganti vo da ginnig
 Nemed warni c'hwez ar hegid !
 Grêt he zroiad 'nez eur gounid ?
 Bod na boked na bokedig
 Euz ho cherdin, Mestr pinvidig?...

Padrig HELLEN.

MAB AN DIG

SANT-PABU

N'eus ket par dit
O Sant-Pabu
Neb tu !

Tra ! tra !

Baleet em-eus bremañg dre ar bed-oll. Gwelet em-eus koajou don an Alamagn. Beg an Enez, ar Hotailh a zo kaeroh egeto ! Gwelet em-eus traoniennou dispar menezioù Bro-Hall, med va halon n'he-deus ket tridet enno evel e Lesvinihi, e Meznaot, er Poullédan.

Ar mor a zo glaz er hreisteiz, glaz ha flour, oh astenn e vem-prou heñvel ouz re eun aerouant war aochou a beb liou. Ar mor, e Korn ar Gazel, e Treob, e Gagnog, a zo aliez droug-livet, o harzal evel eur hi, o sailha kounnaret war ar herreg, o karza war an aot gwenn bezin glaourenneg. Ar mor-ze a zo beo, hag egile maro. Ar mor-ze eo am lak da gana, da youhal, gand al levenez !

*
**

An dud dreist-oll eo a ra kaerder ar vro. A ! Kalonou Sant-Pabu ! Kalonou lintruz, splann evel feunteunioù, kalonou a zirlink evel ar hregin e-touez ar bili, kalonou a goroll wardiz d'am hini, evel ar fubu da zerr-noz, dindan skourr eur wezenn dero !

Va halon din-me a zo chomet eno, evel eur vernikenn stag ouz ar garreg.

— Na pebez toull, a lavare din ar beleg a deue d'am digas evid ar wech kenta d'ar presbital koz-Noe, heñvel ouz eur vag peñsailhet, jaret el lehid...

Seiteg vloaz goude, er gador brezeg, en eur grenn, daelou em daoulagad, eh embannen d'an oll, da dud Sant-Pabu, d'an dud all...

— Gouzoud a ran e kuitaan... baradoz an douar !

Ya ! Baradoz an douar... !

*
**

— E Sant-Pabu eo kaer beva en hañv, med er goañv, nag e tle beza inouüz, a lavared din. Paour kèz tudou !

Ar goañv a lak an dud da dostaad an eil ouz egile, evel bugaligou wardro d'an oaled evid en em domma.

A ! Beilhadennou Sant Pabu ! Nag int diskuizuz goude eun deiz labour ! Ar hartou a nij dre ma verv ar hafe, dre ma c'hoarz ar yaouankiz. An dominoù a strak. « Boud en daou benn ! Arhant er pod ! »

Peoh ! Ar hi o harzal. « Digor 'ta, Lomm ! Hast afo... kazarh a ra ! » Setu c'hweh pe zeiz lakepod euz ar penn all oh en em gaoud ive. An ti zo leun. War an daol, war an askomb, war ar gwele raez, dao, adarre da hoari, da gonta istorioù, ken a freuz ar horv o c'hoarzin,

Er gêr emao. Ya er gêr, e peb ti. E-leh ma 'z eus karantez emeur atao er gêr. Hag ar garantez eo ar vleunienn gaerra, a zispak he deliou koant e peb tiegez euz parrez Sant Pabu.

*
**

Beva gand tud evel-se a zo eur blijadur. Bevet em-eus ganto euz eur penn d'egile euz o buhez, en iliz da genta hag er skol, med ive en o labour pemdezieg, en o 'foanioù, en o enkreziou evel en o 'flijadurioù.

Bet on da weled kazeg Lorañs ar Bonig, kollet ganti he 'fenn, buoh Yann-Vari em-eus dalhet digor frank he stammiou evid he louzaoui ! Kemeret em-eus al langede da 'freuza kae Landegaiou evid ledannaad straed Kavel. Eet on en noz da weled Laou hag e wreg, evid o lakaad da werza eun ti. Hanter zivorfilet o-deus sinet. « Kre gal (1), c'hwi a oar paka lapined kousket avad » eme Laou d'an deiz war-lerh ! Keuz re ziwezad, Laou ! Ha merhed ar poull a hoarz !

Bebet em-eus ganto, nann evel eun estren, — hag e-neus traou all da zoñjal ha d'ober — med evel unan anezo, hag ar brasa enor a hellfe beza greet din eo va hemered evid unan euz Sant-Pabu !

*
**

Aliez, pell euz va bro, e teu d'am spered traou kaer am-eus gwelet em 'farrez.

Beteg fin va buhez em be tra-walh da gonta.

Hirio e kontin deoh eun istor souezuz, eun istor hag a zo padet pell, hini

(1) Kre gal : eun diverra euz « sacrée gast ».

KIZIER NOZ SANT PABU !

Ouz he lenn marteze tud diwardro, euz a Landeda pe euz a Witalmeze, o-do c'hoant, gand o zeod flemmuz, ober goap adarre ouz Sant-Pabu.

Evez ! Evez ! En o 'farrez ez eus bet ive istoriou sebezuz ha na reont ket dezo kalz a enor.

C'hoarzit. C'hoarzit paotred ha merhed, leiz ho korv. evel m'her greer e Sant-Pabu, heb kasoni na goaperez. A-hend-all gand eur bluenn-zir, e rankin lakaad deoh ar vreh, d'ho parea ! M'ho tesko !

Job al Lip

Teñval-zah e oa. An devez, koulskoude, a oa bet klouar, med goude ar gousperou, koumoul du a oa deuet d'ar red euz ar hornog. Ar glao n'emañ ket pell. Ar bed a zo sioul. An dud a gousk. Ar gouerenn a zirlink en tu all d'an hent braz. An avel a hoari gand an deliou a-raog o lakaad, er zizuniou a zeu, da hournijal ha da goueza d'an douar melen-beuz.

A... a... a ! C'hoant kousked ! Poent mond d'ar gwele, va 'faotreme ! Warhoaz eo dilun, hag abred, al louaj a ranko mond el limon !

Med, nag e ra vad aveli ar penn, tañva ar zioulder, evel ma ra ar pastor pa vez kousket e zeñved !

E liñser zu an noz eh huñvreen, med en eun taol krenn e rogas al liñser gand eur youbadenn skiltruz a reas din skrija, ya ! gwasob eged ma vije en em lakeet da vlejal harp ennon taro braz Landegarou !

— Ha 'ta Mari ! Eur hoar zadenn : A ! A ! A !

Hag adarre en eur gana :

*Hirio 'z eus daou
Warhoaz vo tri !*

Ha kercent war hent Porz en Eskob e tirollas eur ganaouenn, gouest da zihuna Bi Vouzar, a lakaas da nijal spontet an dridi a gouske e gwez ar presbital, ha chas Kerginou da harzal, fuloret :

*Paotred Treglonou, o 'ferson
A zo laeron,
A zo laeron.*

*Paotred Treglonou, o 'ferson
A zo laeron
A beb feson !*

*Pêet em-eus deg gwenneg re
'Vid eur banne,
'Vid eur banne;*

*Pêet em-eus deg gwenneg re
'Vid eur banne
Koz hini kreñv !*

Riñset eo bet va godellou
Gand servichou
Gand servichou;
Riñset eo bet va godellou
Gand servichou
Eizvetechou

Laerez a reont e va hevell
An dud santel,
An dud santel,
Laerez a reont e va hevell
An dud santel,
Ya, peb gouel !

M'hoh anavez tud Treglonou
Ruz o 'friou,
Ruz o 'friou;
M'hoh anavez tud Treglonou
Ruz o 'friou,
C'hwì zo gagnou !

Biskoaz n'am-oa klevet eur seurt kanaouenn. War an hent, en eur ziskenn wardu ar vered, e kleved o strakal paz ar reder-noz a zone gwasoh hoaz gand hekleo an tiez.

Ha me dao dezañ !

— Pennad ! C'hwì zo greet ganeoh ?

— An aotrou Kure !

Na piou ? Job al Lip, evn den fur koulskoude, eun den sioul, ne glaske trabas ouz den.

— Dirollet... pe... strobinellet... Job ?

— A ! Aotrou Kure ! N'oun dare ! E Treglonou on bet... evet em-eus eur banne. Eur banne ne ra ket a zroug beb an amzer, aotrou Kure ! A-hend-all eo re drist ar vuhez ! Eur banne, aotrou Kure, a ra hillig d'am divesker. Bresa a rankan. Bresa... dañsal. Eun dro zañs, aotrou Kure ! N'eo ket dañsou a hiz nevez, dañsou gwechall, dañsou hag a vane ar horv a-bez ! Reolennou ? Reolennou ! N'eus ket ezomm a reolennou ! Dañsal... evel e Sant-Pabu ! La !

Bazoulenn ! Bazoulenn ! Bazoulenn !
Bazoulenn sorset,
Bazoulenn zaonet !

Ha Job da zistaga lammou, e-kreiz an hent braz, evel ma vije bet krog an tan en e dreid !

— Job ! Job ! emeve, evelato, greet ganeoh ; an dud onest a zo, oll, d'an eur-mañ en o gwele.

— Oll, nemedom-ni on-daou, aotrou Kure !

Ma ! 'ta Mari.
Hirio 'z eus daou
Warhoaz vo tri !

emezañ adarre en eur youhadenn.

— P'am-bevez bet eur banne, me, aotrou Kure, a deu eur reoriad traou e va 'fenn. Me n'on ket eur genaoueg ! Er skol me zeske ar pezh a garen... ar pezh a garen ! En dian-heol, an istor santel, an overenn, an oll draou... en dian-heol, aotrou Kure ! Tost on bet da vond d'ar skolaj ! Med va mamm, n'he-doa ket arhant a-walh da bêa din eur chichonou. A-hend-all, aotrou Kure, m'em-bije bet desker en dian-heol, latin, gregaj ha saozneg !

Pa vezan hanter gazeg, o, nag a draou 'a vound aze e va 'fenn-me ! Peb tra a zañs war va zro. Me gav din beza gand ar goulou-red, ar strobinelletou e-kreiz ar prajou ha ganto e tañsan ! N'on ket sod abanon ! Me a zav kanaouennou, toniou dañs, din va-unan !

Me zo heñvel ouz va zad-kuñv, aotrou Kure, va 'faour kêz tad-kuñv, Doue d'e bardono ! Hennez, aotrou Kure, er pardonieu, er frikojou, a bigne war an daol, hag a zave kerkent, euz e benn e-unan, kanaouennou. Pa deuas er vro ar rochedou hag an hivizou kenta, e savas houmañ.

Hag eñ adarre o tihagni :

Kemener ! Kemener ! Kemener !
Da Janig ha da Ber
Eur sabig sipilier
Pim ! paoñ ! Hag o reor er zah !
Pim, paoñ, hag o reor er zah !

Ouf ! Gleb-dour-teil on o hwezi.

— Allo ! Job ! Allo ! Job, eur vez eo ! D'ar gêr, Job !

— A ! skuiz maro on, aotrou Kure ! Poan gov, poan gein, poan benn ; eur frapad kousked, aze, er 'foz !

— Allo ! Allo ! Deus ! Me da gaso eun tammig !

Me a grogas en e vreh. Hag eñ kerkent d'ar paz, en eur youhal adarre a-bouez penn :

'Maint o vond
'Maint o vond
Da eureuji, 'maint o vond.

Pebez enor greet din-me.
Kazel-ha-kazel,
Pennad gal !

*Kazel-ha-kazel,
Pennad gal !*

*Pebez enor greet din-me
Kaset on gand ar hure
Da eureuji,
Da eureuji
Heb dale !*

Me ive a hweze. « Poseve eo kousket va 'ferson ! Ma teufe da 'zelled en e brenestr, petra zoñje euz e gure !

Hag an dud ? Penaoz n'eus deuet den ebed hoaz da weled petra a zigouez ? Chas ar barrez a-bez a zo o harzal. Kilhog Penn-ar-Vered a zo en em lakët da gana, eur gazeg a hourrij !

— Allo Job... kerz bremañ da-unan, ha serr da glapez, pennad gal !

— Ya ! ya, ya, aotrou Kure, bremañ on tost d'ar gêr !

*

**

Trouz ar paziou a deuz dizale en noz teñval. Ar sioulder a deu en-dro. Me ya buan wardu va log, ken a glevan o tregerni tiez Toull-Ran ha Kerdangi :

*Paotred Lanbaol, war o meno
A gav brennig,
A gav brennig.
Paotred Lanbaol war o meno
A gav brennig
E Roservo!*

*Gevier beb taol
Paotred Lanbaol!
Gevier beb taol!*

Ar ganaouenn a gendalh, med ne hellan ket mui heulia mad ar homzou.

Biskoaz kemend-all!

Piou en-divije lavaret e ve Job al Lip eun den evel-se? Lod euz an dud o-deus eun êr hanter gousket, med pa zihunont, ar pez a zigouez ganto eun nebeud troiou en o buhez, dreist-oll pa vez kousket ar re all, n'eus ket par dezo, evid ar freuz, ar jolori.

*

**

Kousket fall em-eus. D'an deiz war-lerh ez eus leun a gaoz er poull, en tiez, euz ar zafar a zo bet e-pad an noz.

Me, êz deoh gouzoud, n'am-eus gwelet na klevet netra. Re a zoujañs am-eus evid brud vad an dud, ha d'ober petra lakaad freuz en tiegeziou ? Mari he-dije kemeret ar valaenn, ha roet eur zaead d'he « loudour daonet », en-dije goloet a vez, evid pemzeg-teiz, e familh a-bez, mired ouz he bugale d'ober o 'fortun ha me oar-me!

Gwell eo rei peob, atao pa heller!

*

**

D'ar pardaez on lakeet nehet. Job al Lip a zo er presbital hag a houlen komz ganin.

— Deh, emezañ, em-oa evet eur banne a re! Petra 'fell deoh! N'eo ket aliez, med kanet em-eus traou ha ne blijent ket deoh.

— To! ro, Job. Med nann, Job!

— Eo! eo, gouzoud a ran! Ne dlee ket din ober goap ouz paotred Lanbaol.

— Alo 'ta Job! Alo 'ta! Lezit an dra-ze!

— Lezel an dra-ze, aotrou Kure! Job a zell ouzin, hag e lennan evel ar spont en e zaoulagad.

— Med petra ' hoari ganeoh, Job ?

— Petra ' hoari ganin ! C'hwï oar a-walh ! Ar pez ho-peus.

greet a ra poan din. Dre gounnar eo, douetuz braz, med re bell oh eet.

— Me! Job! Petra!

Hag e soñjen ennon va-unan. Hemañ a zo greet krig gantañ; kollet e-neus e skiant vad.

— Klevet em-oa e ree ar veleien « termaji » da zorsi an dud !

— Termaji da zorsi an dud?

— O ya ! aotrou Kure; c'hwï oar a-walh petra ho-peus greet din deh da noz, p'on eet kuit diouzoh. Taolet ho-peus war-non galloud ho stol.

— Galloud va stol? Oh huñvreal emao, paour kêz Job!

— Nann! Nann! M'em-eus klevet tonton Bi o konta edo me-vel gand Julo, ar strobïneller, en eun tiegez braz. Eun nozvez, Julo, karget gantañ re e gorr an deiz a-raog, a zistage klakadennou gand e 'feskennou en eur youhal : « Pêa ar gwin diwar ar wastell farz, a lavaran ! Pêa ar gwin diwar ar wastell farz, a lavaran ! »

Tonton Bi, d'an deiz war-lerh, evid ober goap ouz Julo, a lope ive war e 'feskennou hag a youhe en eur hoarzin: « Pêa ar gwin diwar ar wastell farz a lavaran! »...

— Te bêo ar gwinn diwar ar wastell farz, din-me da vihanna, mehiég, eme dezañ Julo.

E-pad eiz-teiz, tonton Bi a oa klañv da vervel. Renta a rê diouz an daou benn. A-veh ma hellas derbel e vouzellou!

A-raog deh, me ne greden ket an istor! Deh da noz em-eus bet eun tamm skol ganeoh!

— Ganin-me, Job?

— Ya! O, n'on ket eur bugel ha n'eo ket greet ganin. Tomm oa din, med n'oan ket mezo-dall, ha kavet em-bije va-unan hent va gwele, ma n'ho-pije ket degaset d'am diambroug ar sperejou.

— Ar sperejou!

— E Penn-ar-Prad edon. Kana reen. En eun taol, e klevan traou o sourral: « Rou rou rou ». Me gav din emañ va 'fenn o voudinella. Ha soubla a ran! Rou rou rou... atao! Mond a ran e toull ar hae! Med dond a reont adarre. « Rou rou rou », emezo. Unan a deu tostoh. Me a zant evel eun askell war va choug. Me a zigor va genou, eun dra bennag a bik va 'fri. Spontet e kouezan astennet. Disteurel a ran evel Tonton Bi... ya, zoken e va bragou, aotrou Kure! Rou rou rou!... emezo atao! Unan a deu, e skilfou a skrab va 'fenn, hag e nij kuit gand va boned... Va boned a hellfeh renta din, mar plij, Aotrou kure?

— Ho poned! Med me n'on ket eul laer! Petra rafen-me gand ho poned?

— Nag a 'freuz, abalamour d'ar boned-se... eur boned nevez prenet e foar ziweza Gwitalmeze! N'eus peoh ebed en ti abalamour d'ar boned-se! Distrei d'ar gêr, gand liou ar maro, n'eo netra. « Mad a zo greet dit, troideller daonet, lonker! Med eur boned nevez! Koll eur boned, na pebez reoriad a dlee beza ganez! E helli termi da gaoud eun all. » O! en an' Doue, rentit din va boned, Aotrou Kure!

— Me n'am-eus ket ho poned, Job. Me a roio deoh eun all!

— Nann; va hini eo a rankan kaoud.

— Marteze emañ e foz an hent braz?

— To! to! to! Re denn eo bet ar gentel! Kenavo, aotrou Kure!

Hag e kerz kuit, an dour en e zaoulagad.

Me ivez a deu an dour em re. Paour kêz Job al Lip! N'eo ket e voned kebken e-neus kollet, med e benn!

Janig Lalla

Piou e Sant-Pabu hag er hanton a-bez na anaveze ket Janig Lalla!

Eur skañv-benn a blah yaouank n'oa den evid he suia! Er par-doniou, er foariou, e veze atao war he zro eur vandenn lakepoted. Ha Jani a hoarze, fog enni, o weled kemend a 'friou savet war-du he hini...

Forth oa! Ar baotred yaouank a blij dezo ar firhier, beteg ma teu ar mare da zibab eur pried. Neuze e lezont da vergli ar firhier.

Hag evel-se Janig Lalla, bet greet dezi kemend a dro youpala, evel eur bapa, a jomas da goza.

Piou e-nije bet ezomm ouz an anell-ze, na ouie ober netra, nemed lonka arhant he zud, evel ma lonke gwinn gwenn hag a-wechou gwinn ardent?

He herent n'o-doa ket gelllet rei dezi kalz a skiant-vad. Den n'hell rei ar pez n'e-neus ket e-unan! E-pad ma torrent o horv er parkeier diwardro, pe e mêzeier Kerverien hag ar Bouz, o tenna panez dindan ar barrou kazarth, Janig Lalla, ar bennherez, a oa wardro an ti... ya, war e dro, rag ne veze ket aliez e-barz.

An arreburi a oa loudour pest, ha Minoud ar haz koz a lakee evez peleh teurel e dreid gand aon d'o labeza.

Ar gwriad kevnid a holoe ar grignolou, ar gweleou kloz, ha pol-tred braz ar vamm-goz. Traou merenn ha mern-vihan a jome da dorta, da arrelachi e korn an daol, kelien braz ha du a zerede, abalamour ma kavent eno bevañs magusoh eged war ar bern-teil e-kichen.

Ma karfent — arhant o-doa —, o-dije gelllet renevezi an tiegez, evel m'ber gra, dre braz Doue, kemend a dud en deiz a hizio, d'ober anezañ evel eur manerig, c'hweg beva ennañ.

Nann! Ar hiz koz, atao ar hiz koz. A-wechou e kaver bleuniou en tiez koz, en tiez soul zoken, bleuniou plijuz, a deu paotred yaouank da zastum evid o lakaad da skedi muioh hoaz, en eur horn kaer euz eun draonienn.

Janig Lalla ne oa ket eur vleunienn, pell ahano, ha bremaïg edo, en desped d'he leve, o vond da veza lakeet e-touez an traou koz... gand ar gwriad kevnid.

— N'eus ket a 'fall votez na gavfe ket he 'farez, eme on tud koz.

Janig Lalla a glaske hoaz he hini ha diouz an noz, diskuiz he horv, e rede war-lerh ar strobinnellou.

N'oa ket spontig tamm ebed anezi, avad.

**

Ar goañv a dostee. Dre ar prenestr e weled el liorz deliou melen ar wezenn zero, o troidellad en êr, a-raog dond da goueza el leur. Koumoul du a zerede, euz a-drezeg Gwitalmeze.

— Mond a ran kuit, eme Jef goz, rag poent eo aoza koan.

— Ya! Eme groñs Janig Lalla.

An amezegez goz a gemeras hent ar gêr.

— Po! eme Janig, en eur glask ar bleud gwiniz du d'ober kaod. Na pebez rimadell! Kuzuliou! Atao kuzuliou! Daoust ha me emeus ezomm euz a guzuliou ar vagn-ze! Ne garan ket kaoud tud koz atao war va zro!... Re gal! Ne jom ket kalz a vleud mui... He! A-walh a vo... E tebrint nebeutoh! Na pebez micher! Me ' zo skuiz en ti-mañ! Atao heñvel... ar valaen... ar gontel da zrailha boued... al loa gog... hag ar zah-farz! Da zutal brulu ahalen! O vond da zimezi emañ Soazig ha Rozig. Oll ez eont! Ha me a jom e toull ar hae. N'em-eus mui lizer ebed digand Job! E Bourdell eo nevez en em gavet e lestr, a leverer! Eur martolod a genwerz... dister... dister! Ha lonker war ar marhad! Med ne ran ket a 'forz, unan, n'eus forz piou, gand ma vo gantañ eul lavreg... d'am zenna euz an ivern-mañ, ha d'am lakaad da redeg bro!

Hag e troe, gand tiz, al loa er haod, ken a strinke war an daol, an askomb, ha war he zavañcher louz!

**

— Ar zah farz? E peleh emañ ar zah farz?

Ar zizun dremenet, ar vamm he-doa kavet unan chomet da vrei-na en armel vihan, hag he-doa koeñvet eun tammig! Eun all a jom, ha Janig Lalla, goude beza rafourchet en daol, en tiretennou, e-touez an neud gloan, an alhweziou, ar berniel koz, ar bontonou, ar hoefou roster, he-deus e gavet e strad an askomb, e-touez lostennou ha lavregou peñseliet he mamm, he zad hag he zud koz!

Ha kaod er zah!...

Allaz, setu m'en em lak da staotaad al loudour!

— Traou distrantell, pennad gal!

Farz a ranker ober koulskoude. Janig Lalla a glask neud, eun nadoz!

Ne weler ket mui sklêr, hag eh enaou ar hleuzeurig luch a zo en ti!

An neud a rinkl war ar haod chomet stag ouz ar zah hag ouz he bizied.

N'eo ket kantikou eo a deu ganti er-mêz, med litanioù a valloziou, war an dud, war he buhez a verzerez.

Dreset eo koulskoude ar zah! Dreset divalo evel lerou Per Hagn, med dreset eo beteg warhoaz. Ar vamm a ray gweloh da houde.

Daoust ha bervi a ra ar zoubenn? Janig a denn ar goulher. An êzenn a zav a-benn-herr war huzil du ar ziminal. Ha kerkerent eur zourradenn avel spontuz! Ar prenestr a zigor a-flao, ar goulou a zo lazet ha laboused gwenn braz a nij war benn Janig.

— Rourou, rourou! emezo, teir pe beder gwech.

Spontet mik, ar plahig a strink ar goulher war pod ar zoubenn, a vransigell, a gouez war e henou, e-pad ma red d'an daoulammou er-mêz beteg ti Jef goz!

En eur grenn, en eur ouela, e kont an darvoud sebezuz... Jef a zoñj:

— Houmañ ' zo kollet ganti he 'fenn. Paour kêz merh, med n'eo ket souezuz!

Jef, eur vaouez vad, a lakeas Janig en he gwele.

— Mond a reas da weled an dismantr. An oaled a oa goloet a garotez ruz, a bour, a gaol, ha digor e henou o selled outo, ar pod soubenn!

Jef a lakeas dour adarre da virvi, a gempennas legumaj, med pa deuas ar poent da lakaad ar haod er zah, ne gavas, kaer oa dezi rafourchal, sah ebed.

Dizrei a reas da gaoud Janig Lalla.

— Ar zah farz! Ar zah farz, emezi, me am-eus e zreset... war an daol... edo, ar zah farz!

Hag e-pad an noz, en he zerienn, Janig Lalla, digor braz he daoulagad ne ree nemed youhal:

— Rou rou rou! Hag ar zah farz en o genou!

Fañch Pilad

Pebez ano drol a zen a zoñjo lod!

E Sant-Pabu, ouspenn an ano roet dezo heb goulenn ali gand o zad, ar halz euz an dud a bak war ar marhad eul lezano. A-wechou dre eritaj, a-wechou dre eun istor en em gavet er skol, er hantekiz. Lod a gemer ano eur vuoh, eur gazeg, eur gêriadenn, pe ano bihan o gwreg, en eur zimezi. An anoiou war ribl ar mor a zo kalz anezo heñvel. Evid o anaoud an eil diouz egile, al lezanoiou a zo red. Paotr al liziri avad a vez lakeet nebet e benn, p'en em gav nevez e gasketenn e Sant-Pabu. Bez ez eus tud ha n'int ket anavezet nemed dre o lezano. A-veh ma ouzont o-unan o ano! An dro genta ma weljen Fañch, e lavaras din: « Me eo Fañch Pilad ». Morse n'am-eus gouezet e ano gwirion. Eun deiz evid eur vadiziant, eun tad koz e-noa c'hoant lakaad evel ano badeziant d'e vab bihan e lezano! Lod, e leh all, a ya droug enno pa vezont lezanvet. E Sant-Pabu, ne hellob ket ober muiob a blijadur d'an dud eged o lavared dezo uhel en eur rei dezo gand ho torn evel eun taol golvaz war o skoaz: « Ha 'ta, Bizañ, ha 'ta Sant Poti, ha 'ta Job Billion! Ha 'ta Mari Pikiolo! Ha 'ta Bidoñv! Ha 'ta Bijer! Ha 'ta Lomm ar Bourz! Ha 'ta Saik Siko! »

Sevel a reont o 'fenn, fouge enno, hag e lavaront:

— Setu aze eun den, hag a anavez an dud, eun den evel ma vije euz ar gêr, eun den ha ne hoari ket e aotrou, eur hamalad koz... Deuit 'ta en ti da gemered eur banne.

Ha d'o zro e reont deoh, ken kreñv war ho skoaz, evel eun taol golvaz.

Kalonou aour a dud, hag o-deus bet poan en o buhez, strinket ha distrinket euz eun tu d'egile, med chomet eun, drant, karantezuz evel bugaligou.

N'emaint ket oll da veza lakeet war roll ar zent, êz deoh gouzoud, med an Aotrou Doue a gar an dud didro, n'eo ket kamm-digamm o heñchou. War eeun ez eont d'ar Baradoz, kalonou aour Sant-Pabu!

*

**

Fañch Pilad a oa chomet paotr yaouank koz. N'oa ket dre e 'faot. Edo hoaz er skol pa zavas en e galonig eur garantez heb muzul

evid Soazig, eur verbig euz ar gêriadenn a gichen; Soazig, euz he zu, a blije dezi kenañ Fañch Pilad.

— Sell, da zouz, a lavare dezi ar merhed all!

— Ya, emezi, hag eur hanfard eo. C'hwi n'ho-po ket unan ken kaer!

Med kalon Soazig a grogas enni abred kleñved an amzer hirio, a ra d'ar merhed kemered heg ouz al labour douar, ha klask eur pried a ray dezo beva heb netra d'ober.

Fañch Pilad a blije dezañ an douar. E diegez n'oa ket braz, med tro e-noa da veva war e êz, eñ hag e 'familh. Ma vije bet dimezet gand Soazig e-nije greet dezi zoken eun ti kaer a hiz nevez. E zoñj oa hag henn displeget e-noa dezi.

Med netra d'ober! Ar garantez a wehall a varvas e kalon Soazig, evel ma varv aliez e kalon ar merhed, hag e fortunias gand eur marhadour braoigou euz a Vrest.

Fañch Pilad a jomas pell-kenañ goullet, rannet e galon, ha ne glaskas hini all ebed.

E-unan e veve en e di. Diou vuoh e-noa, ha tri 'fennmoh.

Eul louaj labour oa. An ti a oa kempenn, gwenn kann e vogeriou, an arrebeuri, hag en e barkeier ne oa ket a louzou.

Lenn a ree kalz, ha ne oa ket dezañ evid displega d'an dud doareou nevez al labour douar.

Pa zave kaoz diwar benn politikerez ar vro, an dud a houlenne digantañ e ali. M'em-eus sonj eun deiz e houlenne digantañ dirazon petra zoñje dirag an dizurz e peb leh, hag en eur denna eur bomm moged euz e gorn, e respontas:

— Ar vro! Ar vro! Ne lavarin ket deoh ema-hi war he genou... med war he hostez avad ema-hi!

Ya, eur spered lemm a zen e oa Fañch Pilad!

E-unan en e di hag en e barkeier, e teue dezañ a-wechou soñjou eun tammig iskiz.

Eun deiz e teuas d'am haoud. C'hoant e-noa da zével melhoued! Ar hleñved-se a vagas ive eun all, eur hamalad din; souezuz e ve bet savet ar zoñj-se da zaou euz Sant-Pabu en heveleb amzer. Med traou souezusoh a weled hoaz a-wechou e Sant-Pabu. Eun deiz e teuas da zaou ive, en heveleb pardaez, ar hoant d'ober aon an eil d'egile, en eur vond beteg o zi en noz gand eul liñser wenn dispaket war o hein. O-daou, oh en em gaoud an eil gand egile e oant spontet mik, êz deoh gouzoud!

Mad! Daou velhoueder a zavas ive en heveleb amzer e va 'farrez, ha peogwir ne ouient netra war ar melhoued, piou mond da

weled, nemed ar hure. Me a glaskas leoriou e peb leh, me a redas bro d'o haoud. An hini gwella a gavis e oe en eul levraoueg e Limoj.

P'am-oa goulennet eul leor war ar melhoued e oe c'hoarzet din, med o weled e talhen penn, e oe lavaret din :

— Kemerit ar skeul ha gwelit !

Eiz deiz... bemdez euz ar beure d'ar pardaez, war ar skeul, em-eus klasket melhoued, ha d'ar zadorn da noz, me zaoulamme d'ar gêr, kavet ganin peadra da skoazella va hamalad ha Fañch Pilad.

D'ar zul e teuas da weled va hamalad tud euz a Landeda. En o zouez e oa eur plabig ha n'oa ket mez he gweled. Va hamalad a gomzas dezi euz ar melhoued, hag, en em gollet o-daouig en tevennou, e teujont da azeza, en eur gichen, harp e Rohell ar Had. Eno 'z eus melhoued dreist hag o-deus kemeret o brohen liou an trêz.

— Sell, eme va hamalad da blabig Landeda, na pebez diou gaer oh en em dourtal.

— Allo, Bi, eme dezañ plabig koant Landeda, e-leh melhoued, ma kerez, e teui d'am hêr-me hag az-po saout d'en em dourtal !

Ha greet ar stal ouz va hamalad. Gwell a ze evitañ, rag eüruz eo... Gwellob eo sevel bugale eged sevel melhoued !

*
**

Ne jome mui war ar roll nemed Fañch Pilad. Me a zisplegas dezañ an oll draou am-oa desket.

— N'eo ket ken êz ha ma soñjen, emezañ. Ne hellin ket dond a-benn euz al labour-ze va-unan.

— Mad, emeve, klaskit eur vaouez d'ho sikour.

Eiz deiz goude e rede ar gaouz edo Fañch Pilad o vond da zimezi gand eun intañvez euz a Borsall.

Med eur wrah goz, eur hagn a deod, unan euz a Witalmeze, c'hoant dezi, douetuz braz, derhel an eritaj d'he bugale vihan, a deuas gand he 'flipadennoù vilimuz da lakaad freuz taol.

Ha Fañch Pilad a rankas ive dilezel ar melhoued.

A ! Tudou ! Gwelit pegen drol ar vuhez ! Va hamalad a zilezas ar melhoued abalamour ma timezas. Ha Fañch Pilad o dilezas abalamour ma na zimezas ket.

Me avad a oar bremañ leun a draou diwar-benn ar melhoued. Gelloud a rafen komz deoh diwar o 'fenn beteg fin ar zizun.

War an tousegi ive; med an dra-mañ ' zo eun istor all, am-eus ranket eun deiz pleustri warni. An dra souezusa em-eus kavet diwar o 'fenn eo n'eus nemed eun dousegez evid eur mil a dousegi. A-

wechou e leverer ez eus re a verbed er bed-mañ; koulskoude ma ne vije e-touez an dud nemed eun dousegez evid kant dousenn a dousegi, e yafe hoaz falloh an traou war an douar, a gav din-me !

Med pennad, da beleh ez an-me da redeg gand va haoziou? Bremañ on deuet da veza ken bidanell ha person koz Lanbaol (ne gomzan ket euz an hini bremañ, rag hennez a oar atao da beleh ez a).

A ! paour kêz tudou ! P'en em lakeer da varvailhad ! Euz ar Ruellou da Gervasdour ez eus a-veh eur hardeur bale ! Me 'm-eus soñj eun deiz em-oa lakeet eun hanter dervez d'ober ar veaj-se.

Er Ruellou e oa deuet da va haoud eun Amerikan, da houlenn diganin peleh e oa ar Hazino ! Me her hasas da Bont ar Roudouz, e-leh m'e-noa savet Yann ar Marichal eur varakenn goad da ober e hovel. Ezomm em-oa da lavared eur ger d'ar Bi. Me a gavas Mari, med Mari a oa bouzar pud.

— E peleh emañ ar Bi, Mari ? emeve en eur vlej-al.

— Warhoaz vintin, eme Vari !

It da glask ho rest !

Neuze e teuas d'am haoud unan hag a oa droug ennañ :

— Ya, lavaret em-oa deoh rei ar wialenn d'ar paotr ma ne labourje ket. Med deh eo deuet d'ar gêr du-pod e 'feskennou ha Jef he-deus galvet an oll amezeien :

— Deuit 'ta da weled penaoz emañ reor hemañ !

Janig, marmouzenn frizet, a deu da houlenn diganin priz an eured kenta klas. Abaoe 'z eus pell, ha n'eo ket hoaz dimezet.

Eur Vari all he-doa c'hoant e klaskfen dour dezi diouste en he liorz ! Eun hanter eur a dremenan o heja va montr koz ha ne gavan ket eur siseurt.

— Mad, eme Vari. M'ho-pije klasket gwellob, marteze ho-pije kavet.

Job eo a zo klañv e vuob. Mond a rankan d'he gweled.

E-kichen ti Berrien e tegouez ganin eur mignon euz a Witalmeze, rag me 'm-eus mignoned dre eno ! Tud Gwitalmeze n'int ket oll tud fall, arabad deoh soñjal. Hiniennou zoken a zo tud zrest, tud a galon vad, tud a spered, ha meur a dro am-eus bet ezomm euz o huzulioù fur. Marvailhad ha c'hoarzin a reom beteg ma teu d'am haoud unan hag e-neus c'hoant e rafen dezañ diouste paper da vond er porz.

Ha setu Soaz. Ne hell ket mui, emezi, chom gand he mamm-gaer, eur verzerenti. Mond a ran da glask lakaad ar peob, med an tan eo a lakaan, hag eur volenn strinket ouz penn Soaz, gand dorn distreset he mamm-gaer, a ya da vruzuna gwer ar prenestr. Me a zo kignet din va daouarn ha beg va fri.

— E peleh oh bet, aotrou Kure... leun wad ho taouarn hag ho fri ?

— Ma, petra 'fell deoh, Ivona, n'edon ket o selled ouz va hent... hag er wenojenn ez eus leun a zrez !

— Me 'm-oa ezomm da gomz ganeoh eun tammig diwar-benn va hini koz, na zegas mui d'ar gêr na kelou nag arhant. Ha dao, adarre !

*
**

N'oh ket inouet ? Me kennebeud !

Fañch Pilad a oa eun den mad, eun den fur.

Diou pe deir gwech er bloaz hebken ez ê e breskin, evel ar zaout !
Petra 'fell deoh !

Eva 'ree eur bannig dreist ar muzul ha pa zegoueze en e diig e-unan, eh en em lakee da varvailhad, da hoarzin, evel ma vije bet eur weladenn en e gêr.

Evid gweled ha lampr e chome hoaz e izili, e hoarie batati e-unan war leur an ti.

Lakaad a ree eur valaenn en he zav, hag e lamme dreizti, uhel, tost d'an treuziou, en eur youhal :

« Santig Bidouch ! »

Ne anaveze ket buhez ar zantig muioh egedon-me, eur henderv, douetuz, da Zant Alar, a lak ar hezeg da lammad, rag eñ a ra heñvel d'an dud.

Hag e c'hoarze Fañch Pilad !

Eun deiz e falvezas gantañ ober eul lamm euz eun askomb d'eben dreist an daol.

Ar wech kenta ez eas mad an abadenn, med d'an eil tro, eur strakadenn ! Ar golher a dorras, hag ar pacur kêz Fañch Pilad a zistresas e droad dehou en eur goueza war e benn a-dreñv, en askomb e-touez ar bolennou hag ar plajou, a zirapas gand ar stroñs euz ar weselier.

*
**

Hirio edo al lun, Fañch Pilad a oa bet e foar Witalmeze. N'ea noa netra nemed amann da werza ha netra da brena. Eet oa koulskoude da weled priz ar chatal. Kamaladed e-noa kavet. An dud vad a gav kamaladed e peb leh.

Tomm oa dezañ eun tammig oh en em gaoud er gêr, med n'edo ket a-walh e-barz, evid c'hoari batati, evel d'ar goueliou braz.

Greet e-noa e zervij, debret d'e goan farz buan, gand eur bannig gwin, hag edo eet d'ober podad.

El lab vihan harp en ti eo e veze greet ar podadou.

Ar ziminal braz a oa du-pod gand an huzil. War an treuziou, ar rastell aot, ar hoadennou a oa evel liammer etrezo gand gwiad kevnid. En eur horn e oa eur bern rabez, en e gichen daou pe dri boutog, ha daou zailh, chomet brenn stag outo.

An nor a oa serr kloz, ha gand e vaz, Fañch Pilad a lakee dindan ar pod braz raden ha lann. An tan a lugerne ruz, beteg ar vantell zu. Tridal, strakal a ree, laouen.

Kalon Fañch Pilad ive a oa laouen. Euz e gorn e tenne maged. Pegen brao beza sioul en dommder ! Hag e huñvree Fañch Pilad en e barkeier, en e jatal, en istoriou e-noa klevet e foar Witalmeze.

Sell, setu an êzenn o tond, en eur zutal, hag o teurel evel ker-niel a beb tu d'ar pod braz.

Fañch Pilad e-neus greet eur moustra d'ar goulher.

Bremañ arabad ober mui tan braz. Daou pe dri zamm taouarh er hlaouiadenn ha warhoaz e vo dreist ar gweilhenn.

— Alo, eme 'Fañch, eur horniad all a-raog mond d'al log.

*Deom da gousked, eme ar housker
Chomom hoaz, eme an tommer,
Hic an noz, eme ar foeret !*

Hag e c'hoarz Fañch Pilad !

*
**

Ar glaouiadenn a goll a nebeudou he sked. Er mêz e klevet an avel o sourral. Sin brao ! An deñvalijenn a zo deuet.

An tan er horn a zo ive war e dremenvan.

Fañch a zav evid ober eur moustra all d'ar golher.

A-veh m'eo savet en e zav, ma tiroll eur zafar spontuz, ar zailhou en em lak da vralla. E voned a gouez en tan. Eskell a nij harp d'e benn, d'e joug. Laboused gwenn, o daoulagad lugernuz evel leterniou a nij; unan a denn e gorn euz e henou. Hag evel ma vije en em gavet eun dornerez el lab :

— Rou rou ! Rou rou ! emezi.

Fañch Pilad a strink pell dioutañ e votou, ha d'ar red-tan, en ti... Prennet an nor, ha d'e wele heb tenna e zilhad !

Setu ar pezh a gontas din an deiz war-lerh en eur grenn, rag klañv braz e oa, hag e oan bet galvet d'e weled.

Job Pipo

Ha paour kêz Job Pipo ! Eur merzer, paour kêz tudou !

D'e bemp vloaz warn-ugent edo dimezet d'e Vari : eur vaouez distrantell a vatee evel ma vije bet hualet, eur penn rouz-gad, eur fri tort, eur hoof melen beuz !

Daoulagad du, ha du-pod.

Bez ez eus daoulagad du hag a zo kaer. Me 'm-eus soñj, p'edon paotr yaouank, e plijas din kalz eun deiz lagadouigou eur plahig euz a Borsall.

O ! Heñvel oant ouz daou bistrakig o kana en eur bod bleuniou. Tener edont evel voulouz, kouezet warnañ diveradennou gliz euz ar beure.

Evel c'hoari a reent an eil gand egile en o logig. « Poch », eme an hini debou d'an hini kleiz. « Poch » emezo o-daou din-me, oh en em gloza, lamponouigou, en o hrogennig roz evel bigorned an tevenniou.

O ! Daoulagad du plahig Porsall, evel daou labousig o tridal war moushoarz touelluz ar muzellou ken flour !

Labousedigou hag a ra evel an neg ouzoh, a lak ho kalon da lammad gand ar c'hoant d'o 'faka. Gweled a rit frêz ne houlennot ket gwel eged dond da veza doñv. Eur pokig a ve a-walh evid o 'faka, al labousedigou du, ha perlez gliz ar beure a deu da veza enno teñval evel daelou, pa wel al lagadouigou du ne hellont ket en em staga ouz ho re. Paour kêz lagadouigou du am-eus karet kemend !

Med bez ez eus du ha du.

Re Vari a oa du kriz. Enno ne lenned netra, nemed ar c'hoant da ren ha da vresa ar re na zoubfent ket dirazo.

Netra blijuz e Mari.

— Med bez e oa ! evel ma lavar Job, en eur zevel e zorn en êr, hag o vanea e viz meud gand eun all, evel ma ve o tirilha eur penn gwiniz :

N'eo ket ar goantiri

A lak ar pod da vervi !

Tra Job ! Med ar re goz a lavare ive :

Gwell eo karantez leiz an dozn

Eged aour melen leiz ar 'forn.

Petra eo eur vuhez heb karantez ? Kalon an dud, koulz ha kalon peb aneval, ber hlask kerkent ha ma teu war an douar. Lêz ha karantez, n'he-deus ezomm netra all, med o-daou o-deus kemend a briz eviti.

Hag e kresko mab den ! Ha gand e gorr e kresko e ourgouilh.

— Re gal, pebez gwaz on-me ! Nag em-eus divreh, ha stomog ! Ha nag a spered ! Re gal, n'eus ket din !

Brall da glob, va 'faotr-me !

Eun darvoud, eur hleñved, ha greet ar stal ouzit. Emaout adarre astennet evel en da gavell.

— O va mamm ! Deuit da gichen ho pugelig ! Deuit va mamm da rei din eur pok !

Al labour a blij deom, evid lod e teu da veza evel eur hleñved. Dihagni noz deiz a 'fell dezo, Med kaer o-do ober, al labour, anezañ e-unan ne roio ket dezo an eürusted.

An den n'eo ket eul loen.

Ha daoust hag eul loen a hell beza eüruz hebken gand al labour ? An arhant kennebeud ne ro ket an eürusted.

Nag a dud pinvidig maleüruz ki ! Evel ar paour kêz den santel Job war e vern teil gwechall, e youhont hirio war o berniou arhant.

— Doue, ho pet truez ouzom !

Red eo kaoud arhant a-walh evid beva. Med an arhant ne hell maga nag ar spered nag ar galon.

Ar galon n'eo ket maget ne hell ket kana. Hirvoudi a ra hebken.

Bale 'hello an den war an hent paveet gand peziou arhant a zirlinko dindan e votou.

Hirvoudi a raio e-pad ma kano war e dro kalonou all, o kerzed er pri, en drez hag er spenn.

**

Bez e oa. Ha bez ez eus. Job Pipo ! Paour kêz Job Pipo !

Hag ez i pell gand an dra-ze ?

A-veh dimezet e teuez da veza evel ar hi, evel ar marh louaj.

C'hoant az peus bet da lakaad da grabanou war an teñzor o timezi gand Mari.

Med gand Mati eo emañ an teñzor. Te n'out nemed eur mevel karget da greski an teñzor !

— Labour ! Dihagn, noz deiz en da bark hag en da vag.

— Me, eme Vari, a zastumo. Seul-vui am-bo, seul-vui em-bo c'hoant da gaud. D'in-me an teñzor ! Din-me e ziwall, evel ar glo-

chenn he viou ! Alo ! D'al labour, Job Pipo ! D'az mern, az-pezo patatez krohen digrohen gand lêz tourgouilh... D'az koan, soubenn ar bitonig' pe pouloud !... Gwin ? Gwin en ti-mañ ! Re ger ar gwin ha ne ra nemed droug !

Ouz an daol, er gwele, n'eus gand Mari nemed kaoz arhant.

Euz a betra e hellfe kaozeal a-hend-all, ar paour kêz merh ! A-veh ma oar lenn, ha ne gompren ket eur siseurt, nemed trouz an arhant.

D'ar zul da vihanna, ma ve roet da Job eur gwenneg bennag da vond da hoari haloj, da hoari boullou, ha da eva eur bannig !

Pemzeg lur a vez roet dezañ gand Mari evid e zulvez ! Pemzeg lur ! Arhant eur banne...

Med n'eus ket eun den, nemed mezvier e ve, da gemered eur banne e-unan e parrez Sant-Pabu ! An dud a oar beva a ya atao da eva gand eur hamalad da vihanna.

Med it da zisplega an dra-ze da Vari. Kenkoulz eo deoh komz gand eun torgos !

— N'az-peus d'ober nemed arrelachi !

Ha Job Pipo, evel dre guz, en em zil a-hed ar haieiu beteg an iliz, a ra heñvel da zond d'ar gêr, ha goude merenn a ya gand e zaout wardu ar gwaremmiou, evel an anevaled gouez.

Ped gwech eno, eo eet e kounnar, beteg rei taoliou botou d'ar rabez, d'ar haol, d'ar gwez.

— Pennad ! Ar vuhez-mañ ne hell ket padoud. N'eus den ken truezuz e stal ha va hini e Sant-Pabu ! Nann, echu, emberr e vo gwelet !

Med diouz an noz an daoulagad du a blant warnañ evel re eun naer-wiber war eul labousig, ha ne gred ket zoken grozmolad.

*
**

Med kaer ober d'ar zaout, o fennaska, o suia, eun deiz ken a vezont gwelet fuloret, evel kollet ganto o 'fenn, o terri peb stag, o tiroll, o sevel en êr o lost uhel, o strinka diouto o hagat, hag o tizoud d'an daoulammou dreist an torgenn.

N'eo ket hebken ar zaout a ya e breskin. Ar hezeg a ra ive evelto a-wechou, hag ar chas 'ta ! Beb an amzer ez eont kuit, den ne oar da beleh, ha pa zizroont mezeg, leun bri, o lost evel eur valaenn etre o divesker, e hellit rei dezo eur zaead, eun deiz bennag e tistagint adarre, evel ma lavare Mona goz, e krogo adarre « an diaoul en o reor ».

Da bep aneval an tiegez e teu beb an amzer evel doñjer euz e stad a sklavour, euz e westell, e gabestr, e jadenn.

Ma rit eur sklavour euz eun den, arabad deoh beza souezet e teufe beb an amzer da zourral en e greiz avel ar frankiz hel lakay da derri e zugellou ha da vond ive e breskin.

Diou pe deir gwech oa en em gavet an dra-ze gand Job Pipo. N'en-doa ket roet da Vari an oll arhant e-noa bet evid eul loen.

Ar sklavour a rank, siwaz ! lavared gevier evid en em zivenn, ha kaoud eun tammig frankiz !

En em gavet pa er gêr, en noz, leun bri, den ne oar na da bed eur na penaoz.

Eyn tortad a oa gantañ !

An nor avad a jomas prennet, kaer oa bet dezañ youbal, hag er hraou kezeg e kouskas war eur guchenn golo.

D'an deiz war-lerh e oe dibunet gand taoliou baz ha litanioù solanel e glochenn.

*
**

Pell amzer a oa abaoe ar barr arne diweza.

Mari a lavare dezañ arrelachi e arhant; med ouspenn arhant eb arrelache Job !

Ma ne zigorit ket al lenn beb an amzer, an dour eun deiz a yelo gantañ ar mên stank, hag ar vogez a-bez.

Pell zo n'oa ket bet digoret al lenn, hag ennañ e oa leun a imor fall arrelachet.

*
**

Miz mae a oa deuet; ha gantañ ar mor e-noa kemeret evel dilhad nevez, glaz flour, hag an douar eur vantell varellet. Gwenn oa an traoñ anezi gand trêz an tevenniou, med goude oa glaz gand ar gwiniou o sevel, gand ar melchon, ar peuri, melen gand ar haead lann, en o breiz bleuniou a beb seurt liou. E-touez ar gwez spenn hag ar gwez hogin e tirlinke ar feunteuniou, ar gouerrennou evel ma vije bet hanter vezo an dour e-unan.

Peb tra a gane e Sant-Pabu, kalonou an dud, ar gwez uhel leun a biged oh ober o neiziu, an tiez en disheol, ar parkeier karget a ganiri.

Job a oa bet gand e verenn er gêr, ha bremañ ez ee da hwennad da Lezvenihî. Lezvenihî, ar horn kaerra euz eur barrez ken kaer.

Edo en em gavet e Brezehen, e-kichen ar strêd a zav a-uz d'an dour, pa glevas eur vouez flour evel hini an eienenn ouz e hervel :

— Tonton Job !

Eur verbig vihan, azezet war eur mên poull, he zreid diarhen en dour eo her galve. He bleo a oa hir-kenañ, renket klok. He herent n'oa ket falvezet ganto o zroha, ar bleo dudiuz warno liou ar gwiniz krazet el leuriou. Evel en eur hoari e-touez deliou ar gwez braz, an heol a deue da denna anezo evel skilfennoù tan aour.

Job n'e-noa ket bet amzer da lavared grik, edo etre e zivreh en eul lamm, ouz e vriata, ar bleo dudiuz oh ober hillig d'e joug, e nizezig koant Annig.

*
**

A ! Sant-Pabu, kaer eo da vleuniou gwenn ha ruz, kaer ar bokedou bezin, ar bokedou pioka, en da voriou, etrezeg Treoh hag ar Honter-Ludu, kaer bokedou an tevenn, ar re a deu hag 'z a, gwenn, ruz ha gwer, gand tiz an dour en da ouerennoù, med ar haerra bleuniou, hadet ennout gand Doue, o Sant-Pabu ! eo kalonou burzuduz da verhedigou.

E-touez da baotredigou em-eus gwelet o lintra kalonou splann, hag eun, kalonou drant leun a garantez. Med da verhedigou, redet em-eus ar bed, e neb leh, n'em-eus kavet par dezo.

Gwelet em-eus hag a oa re gaer evid an douar. E Ruzulan, e Kermertien, an Elez a zo deuet d'o hutuilh evid an Neñv.

Med ar re all a jom ken glan, ken sebezuz, ma n'ez eus ket evito er bed-mañ.

Eur beleg du a brezegas eun deiz d'ar pardaez en iliz. Goudeze e roas e vennoz d'ar vugale. Unan vihan eiz vloaz he-doa bet eur vrochenn a dalvoudegez gand he mamm-goz euz a Lourd, an devez a-raog. He distaga a reas kerkent evid he rei d'ar beleg du.

Mil skwer a hellfen rei euz ar garantez divuzul a ruilh euz kalonouigoù da verhedigou bihan. o Sant-Pabu !

N'eus ket koantoh bleuniou egeto er bed, ha beva bellin kant vloaz, war va zro e hoürnijo bepred, evel evned d'am frealzi, kalonou karantezuz da verhedigou.

Lod en em roio da Zoue, med lod all a jomo, hag abalamour dezo, dreizo, e savo tiegeziou dudiushoaz hoaz eged ar re am-eus anavezet ha karet, hag e vezi da virviken eur baradozig benniget, abalamour da galonou da verhedigou.

*
**

Annig !

— Deus d'azeza ganin eun tachadig, tonton Job, amañ en disheol e-kichen ar poull. Re domm eo da vond da hwennad.

Job a zent ouz ar verbig, evel ma senten-me outo, evel ma rank senti peb den e-neus eun tammig kalon, ouz merhedigou koant Sant-Pabu.

Hag e sell outi.

— Arhant 'zo e va zi. Med gwell eo bleo alaouret eur verbig eged arhant hag aour an armeliou.

— Tonton Job, emezi, en eur deurel he divreh bihan, roz ha tomm, war-dro d'e benn. Pell 'zo n'am-oa ket da welet. Perag ne deuez ket a-wechou da veilha ?

— N'em-eus ket amzer...

— O, tonton Job, ma karfez e teufez. An aotrou Person a deu a-wechou. Te ne deuez ket. An aotrou Kure a vez aliesoh hoaz. Eur hamalad braz eo da bapa, ha din-me 'ta ! Nen goz he-deus avi eun tammig hag an deiz all e lavare : « Bremañ eo êz mond d'ar baradoz. War varlenn ar hure ! » Perag te ne deuez ket, tonton Job, da welet da nizezig vihan ?

Job a glaskas trei ar gaoz.

— N'az-peus ket aon e yafe da zaout aze e breskin.

— O, evel ma kirint ! Ne dal ket ar fret redeg war o lerb pa 'z eont e breskin. Pa vezont skuiz e teuont d'ar gêr o-unan. Minoud a zo eur vuoh vad. Hounnez a blij din. Ar Ruz a zo koz. Brendu a zell a gorn. Hounnez ne blij ket din. O, tonton Job, war ar hae aze ez eus bleuniou kaer ne hellan ket o 'faka ! Deus d'o hutuilh din.

Ha Job da zastum bleuniou.

— Emberr, eme Annig, me o haso d'an iliz hag o lakay evidout war aoter ar Werbez.

Annig a lammas adarre stard etre e zivreh. Eñ a gemeras he daoudroadig bihan ken flour en e zaouarn du kaledet.

— Na te zo mignon, tonton Job ! emezi en eur bokad dezañ.

Job a zantas evel eun houlen-vor o sevel euz e greiz, o stanka e houzoug. Gand tiz e lakeas Annig war an douar, hag ez eas d'ar red e strêd Lezvinihi, heb trei e benn, en eur ouela evel ma n'e-noa grêt morse en e vuhez.

*
**

C'hwennad ! C'hwennad ! Ober an neuz da c'hwennad ! An heol a zo tomm bero. Diou had a red an eil war-lerh eben, hag a ra batati dreist ar hae.

— Ha 'ta, Job ! Tomm eo dit ?

Unan hag a ra an neuz ive da labourad er porz eo a zo en e gichen, eur gontell en e zorn, o klask dibennatuz, emezañ.

— Ya, birvi ra !

— Deus 'ta da bont ar Roudouz da eva eur banne.

Ma vije bet eun devez evel ar re all, Job, den fur, en-devije lavaret nann, med hirio eo fallgalonet, e-neus heg ouz ar vuhez a ren, heg ouz e sklavaj yen skorn, hag e lavar ya.

Lezel a ra e vroch en douar, e voutou en e gichen, hag ez a wardu Pont ar Roudouz, en eur lavared koulskoude :

— Me n'eus gwenneg ebed em godell.

— An dra-ze ne ra netra, eme egile; e va hini din-me ez eus forz pegement.

Kemered a reont eul litrad hag eun all. E Pont ar Roudouz n'ez eus tavarn ebed, med peb ti a zo deuet hizio da veza eun davarn.

Eun all a zigouez, unan o tond euz an Aotrij. Eñ a bê eul litrad all.

Da zerr noz edont pemp pe c'hweh en em vodet, evel ma vije bet sonet ar horn boud d'an dud vag diwar dro. Da zeg eur edont oll hanter gazeg.

— Poent serra, eme ar batronez, leun he yalh.

Job ne darde tamm e henou. Ne lavare koulz lavared grik pa veze diabaf, med p'en-deveze bet eur banne, ve ket bet kavet eur mañsoner gouest da stanka dezañ e doull.

Hirio, reverzi vraz a oa gantañ.

*

**

War al leur-gêr edont. En eun taol, al labourer er porz a zavas e benn, souezet :

— Peoh 'ta, emezañ. Na glevit ket unan bennag o rohad en iliz ?

An oll a davas. N'oa ket re vezo paotr ar porz. Gwir a lavare. Evel eur voutadenn a deu diouz ar sakristiri: Rou... rou. Rou... rou!

— Re gal avad, eme Job. Deom da weled. Me n'am-eus aon rag netra. Deom da weled.

Hag i er vered.

Rou, rou, rou. Sklêrrob-sklêrra e klevet ar roher.

Piou an istrimant-se, eme Job, hag a zo eet da gousked en iliz? Alato ! Morse n'eus bet klevet eur seurt istor. M'ho tesko, va faotr-me !

War ar prenestr, e tu an hent braz, ez eus barrenier houarn.

Tri pe bevar a glaskas o lohad. Netra d'ober. Unan neuze a lavaras :
« En tu all ez eus eur prenestr bihan. »

Teñval-zah oa an noz, ha daou a gouezas a-stroñs korv gand o ziz e-touez ar beziou.

Job, avad, a jomas sonn war e gilhorou.

— Rou; rou, rou, rou, eme atao ar roher.

— Da gousked en iliz ! Ma n'eo ket eur vez ! eme Job. Alo, paotred, deom dezañ !

Pignad a reas war skoaziou daou gamalad; sevel a reas ar prenestrig a zigore war an doenn. Dre braz Doue n'oa ket prenet med a-hend-all, evid divenn ti an Aotrou Doue e-nije e dorret, petra 'fell deoh ! Paotr ar porz a reas eur voutadenn war e benn-da-dreñv. Hop !

Tolompi strafuilhuz eur horv o koueza war goad o strakal, ha mui netra nemed... « rou, rou... rou, rou » ar roher daonet !

*

**

Daou euz ar ganfarded er-mêz o-doa daoulammet kuit... med dizrei a rejont. Ar re all a oa en em astennet etre ar beziou da guzad eur pennad.

Ne oa enaouet goulou ebed nag er presbital, nag en tiez diwar-dro.

Harp en nor, bremañ oll pep hini d'e dro, e halvont, heb sevel re o mouez :

— Job ! Job !

Grig, Petra d'ober ?

Dihuna ar veleien ? Ya, med ar hure, pa ya droug en e goukoug, eo gwellob beza pell dioutañ. En deiz all prest e-noa torret e benn da unan e Landeda.

— Job ! Job ! Respont ta, pennad gal. Netra... netra... nemed « rourou » ar roher.

Neuze ! Neuze, setu war o 'fennou evel eur skleur wenn, diou houlaouenn lintruz, pluñv en o bleo !

Hag oll dipadapa dreist ar voger, krog an tan en o zeulioù.

*

**

An aotrou Person a zave da genta. E gure a jome en e wele bemdez d'ober e gousk mintin.

Strafuilhet e oa ive ar paour-kêz person !

Er sakristiri e oa astennet unan euz e barrezioniz, eun den fur ma oa unan, e benn war dapiz kenta klas an eureujou, n'he-doa ket bet amzer da blega an deiz a-raog ar gloherez.

Hag e rohe, hag e rohe !

Digeri a reas an nor ar paour-kêz person, hag harp enni e kavas e-touez ar beziou tri re votou.

— Job ! Job ! eme ar person.

— Aevñ ? eme Job en eur zivorfila. Badinnet oa bet, douetuz braz. Hag e tigoraz braz e henou.

— Aotrou... Person, aotrou Person, emezañ dioustu goude, penaoz eo greet ar spered santel ?

— Ar spered santel ? eme an aotrou Person.

— Ya, aotrou Person, penaoz eo greet ar spered santel ? Daoust ha gwenn eo ? Daoust ha kana a ra « rourou, rourou », en eur ober hillig d'an dud en o choug, gand e eskell ? O nag eo kaer ar spered santel !

— Allo ! allo ! eme groñs an aotrou Person, savit buan ahaleze a-raog ma teuio tud, ha d'ar gêr war-eeun ! Goude-ze, e vezo gwelet pa vezot diabaf.

— O, diabaf on bremañ, aotrou Person. Ar haerra nozvez euz va buhez ! eme Job dre ma strake an nor, a-dreñv e gein, gand ar Person.

An Torfed Euzuz

Hed an deiz, va aotrou Person, — a ! eur person, m'hel lavar deoh, ar gwella euz ar bed, n'oa ken nemed kalon, va 'ferson ! Ober vad d'an dud, plijadur atao pa helle d'e gure, atao laouen, eur Person euz an dibab e-noa digaset an Aotrou 'n Eskob d'eur barrez euz an dibab, — va aotrou Person a oa teñval e benn. Respont a ree pa houlened digantañ eun dra bennag, med gweled a reed mad edo e spered e leh all.

Eur beleg, eur person dreist-oll a dle aliez dougen e zamm e-unan. Aliez e rank rei peoh zoken d'e gure, heb gelloud goulenn digantañ e ali evid dibuna istoriou rostet krenn.

Me avad a gave diêz gweled va 'ferson er stad-se. Konta reen dezañ traou fentuz, med ne ree ket a van.

Da beder eur, goude ar skol, e lavaraz din : « Me 'm-eus c'hoant komz ganez eur pennad. » Ha me a zoñjas dioustu : « Eun darvoud braz bennag a zo digouezet er barrez. »

— Nehet maro on lakeet, eme va aotrou Person ! Te n'az-peus klevet netra zouezuz ?

— Traou souezuz ! Me a reas nao zro d'am zeod em genou, rag arabad kennebeud d'eur hure beza prest da gonta peb tra d'e berson, goude ha ma ve ar gwella euz ar bed. Evez, evez atao ouz brud an dud ! Koulskoude, heb ober droug da zen eo mad a-wechou d'ar re a ren eur barrez, gweled etrezo petra ne ya ket mad en-dro, evid lakaad ar harr da vale gwelloc'h goude-ze.

— Traou souezuz ? Eo, aotrou Person, istor Janig Lalla, hini Fañch Pilad...

— Hag hini Job Pipo o kousket er sakristiri, eme va 'ferson. Med re all a zo. Leun a dud a glev beb seurt traou. Al leanez goz zoken, deh da noz, a zo bet spontet en iliz ! Ar plah, na hell ket kousket gand ar boan-gov, pe ar boan-gein, a zavas eun nozvez ; sklêr oa al loar, hag he-deus gwelet, emezi, an bent braz leun a razed, a hozed, a logod, o vond oll d'ar red etrezeg ar vered. Hag a-uz dezo en êr... sperejou gwenn ! Te n'az-peus gwelet na klevet netra ?

— Me ? Aotrou Person, netra an oll. Ne gredan ket er strobinnellou, ha n'ez an ket hoaz da redeg warlerh ar morilhoned.

— Lod zoken, eme ar Person, a glev ar hleier o seni goustadig.

Ma vijent tud vezo, diempennet, ne rafen ket a van, med tud o 'fenn divrall war o skoaziou eo hel lavar... Maouez ar hloher, kaer eo dezi kempenn ar hadoriou, ar balustrou, a gav atao warno, emezi, kaoh laboused ! Me 'm-eus soñjet oa marteze kizier-noz eo a lakee an dud da vond war o hemend-all, med ar hizier-noz a zo du...

— Hañ ! Ya, avad, aotrou Person, ar hizier-noz a zo du hag hiniennou eun tammig rouz. Me 'm-eus desket an dra-ze er skolaj e Lesneven, hag ar hizier-noz am-eus gwelet en deiz, — rak en noz n'o gweler ket — a oa atao du.

— Hag an dud a gav dezo gweled laboused gwenn ! Pebez kredenn ! Eet on en iliz diou pe deir gwech goude koan da weled ha ne deue ket a laboused da loja enni. Netra ! Hag e-biou peleh e hellfent dond ? Toull ebed ! Koulskoude eur wech ez eus kouezet eun tamm lipig gwenn war va breh. Euz a beleh ? N'ouzon ket...

— N'eus nemed al laboused hag a rafe en êr, aotrou Person. Gwir eo ez eus tud, a leverer, hag o-deus c'hoant brammed ubelloh eged...

— Ro peoh ! Brichinog ! Nehet, nehet on !... Red eo gweled sklêr en istor-ze.

Paour-kêz aotrou Person ! D'ar zul araog e-noa distaget eur brezegenn diwar-benn an Dreinded santel. E-pad tri hard- eur e-noa komzet. Ar pemp munut kenta ar bure hebken a hellas e heulia. Goude edo pignet d'ar Baradoz, hag e tisplegas, komprenet hebken gantañ e-unan, pezh a wele. Eur zant a berson, evel ma lavaren deoh ! Hag eun den speredeg ! Piou ahanoh-c'hwiz zo gouest da gaouezal tri hard- eur diwar-benn mister an Dreinded ?

Hag eur person evel hennez a oa lakeet nehete-maro ken a skrabe e benn noz-deiz, o klask gouzoud euz a beleh e oa kouezet evel eur pezig arhant flêriuz war e vreh.

**

Unan a lopus war an nor hag a drohas ar gaouez... Aotrou Person Lambaol ! D'ober petra e teue da Zant-Pabu d'an eur-ze ? Piou oar ! Ar haoziou a nij buan, euz a Gerbrah d'ar Poulledan, hag euz ar Poulledan dreist gouer ar Ribl d'ar Harbont; ha seul-vui ma 'z eont, eh en em gav ganto ar pezh a zigouez gand ar bodou askol a zistag an avel-vor euz trêz an tevenniou. En eur rodella e kemeront re all, skilt, gwirizjioù, peuri seh, glaoued. Ar volotenn vihan a deu da veza eur voull divuzul, a ra aon d'ar vugale ha d'ar chatal, beteg ma 'z a, rouz-gad war an aot gwenn, d'ober he lamm evid en em veuz er mor glaz.

Bez' ez eus tud hag a rank fourra o 'fri garlot e peb leh. Ya !

Ha goude ma rankfent e lakaad e toull-flêr eur haz, gand ma hellint gouzoud ar pezh a dremen e ti an amezeg, evid ober goap, êz deoh gouzoud !

— Miond a ra mad ? eme ar Person, gand eun tammig glaouenn goapauz e korn e vuzellou.

— Ya, emeve. Pep hini a guz war e dud. An aotrou Person a oa o lavared din e kave re zioul e barrez, hag edo poent ober eur gouel bennag da lakaad buhez enni. Hag e Lanbaol ? Ar zaout a gav atao mad an dour benniget ?

**

Goude koan me a rankas mond d'eun ti euz traoñ ar barrez, d'ober paperiou. Eun tad koz a oa ennañ, tri pe bevar bloaz ha pevar ugent. E penn an daol edo, e gorn gantañ en e hinou, dirag eur werennad vad a win. E zorn kleiz a oa gantañ en e vruched, hag e selle pik ouzin, e-pad ma skriven.

— Kasit ar vugale d'o gwele, a lavaras d'e verhe-kaer. Sentet e oe outañ kerkent, ha grig ebed mui.

Eun den euz ar re wella oa Fañch koz. En onestiz, en enor e-noa baleet atao, deuet mad gand an oll. Gouzoud a ree leun a draou, re goz ha re nevez, hag heb beza bet kalz a zeskadurez e ouie rei d'an dud a deue niveruz d'e weled, kuzuliou fur leun a skiant-prena. An aotrou Person e-unan e halve a-wechou d'ar presbital da houlen kuzul digantañ. N'em-oa gwelet morse droug ennañ. Atao e talbe, en desped d'e oad, d'ar hatar, d'e boan izili, eur moushoarz leun a vadelez. Fañch koz a hede dizoursi an eur da guitaad eur vuhez hag e-noa kavet kaer, evid eun all hoaz kaerthob er Baradoz.

Med ar zell a blave warnon emberr ne blijte ket din re. Beb an amzer e saven eun taol lagad wardu ennañ. E zorn en e vruched, e gorn en e hinou, e zaoulagad a deue anezo evel flammou tan e-kreiz eur barr arne, wardu ennon, hag e vouchoarz a zeblante din beza deuet da veza eun tammig goapauz e va heñver.

— Amañ 'z eus eun dra bennag da lavared, a zoñjen en eur skrabad paper.

Hegasuz e teue muih-mui da veza sellou Fañch koz, evel re eur sparfell o plava a-uz d'eul labousig. Hag e roent din evel taoliou spilhou e nervennou va bizied.

Diou pe deir baperenn a oe red din regi.

— N'oh ket skuiz hoaz ? emeve. Marteze e ve gwellob mond d'ho kwele, Fañch koz, rag leun a labour am-eus hoaz.

— O ! Amzer zo ! emezañ war e zres.

En taol-mañ, douetañs ebed evidon, Fañch koz e-noa c'hoant klask trabas ouzin.

**

Ouspenn unneg eur oa p'oa greet ganin an talarou.

— Eur banne kafe, aotrou Kure? eme Vari.

— Ya, ma kirij.

— Me n'oun dare penaoz, eme neuze Fañch koz, e hellit ober kement-se a draou. A! Ar veleien gwechall o-doa eur vuhez disheñvel. Ni ive on-oa eur vuhez disheñvel. An dud bremañ zo desket. Nag a draou o-deus kavet! An traou koz n'int mui mad da netra. C'hwi evel ar re all, aotrou Kure, a ra goap outo. (Setu, eme ve, an emgann o vond da ziroll!)

— Me, Fañch, ober goap?

— O ya! C'hwi, gwasoh eged ar re all, emezañ, atao war e zres.

Me a zavas va 'fenn eun tammig re vuhan.

— Arabad deoh mond droug ennoh! Tro am-eus da gaozeal ganeoh eur pennadig. Komzom evel kamaladed. C'hwi a zo desket hag a hello marteze sklerijenna va spered poud din-me war draou hag e soñjan e-leiz enno, dreist-o! en deizio-mañ, hag en noz ive, rag ar housked d'am oad a zo berr ha skañv, emezañ, e benn kurunet a vleo gwenn o krena eun tammig. Bihan edon, c'hweh pe zeiz vloaz, p'en em gavas, e-pad eun nozvez glao hag avel spontuz, evel n'em-eus gwelet morse abaoe, eul lestr braz e Porz ar Vilin. Bi Jog eo e welas da genta. Daou pe dri a bignas warnañ. Me o gwelas o tiskenn anezañ, warno liou ar maro, o bleo sonn war o 'fenn. Krena reent kement ma ne gomprened netra euz ar pezh a lavarent.

Pa oe gellet direosti o haoziou, ar spont a grogas e reor an oll. Ar vag a oa leun-chouk a eskern tud! Klevet ho-peus kaoz diwar-benn ar vag-se?

— Me? Morse, Fañch!

— Alo ta! C'hwi beleien ne lavarit ket d'an dud an hanter euz ar pezh a ouzit! Kure oh e Sant-Pabu, bloaveziou a zo, ha n'eo ket posubl ne ve ket skrivet darvoudou evel hennez er paperiou koz.

— Me 'm-eus awalh d'ober gand paperiou nevez!

— Ta! Ta! Ta! Arabad deoh kemered Fañch koz evid eur genaoueg! Paperiou koz a anavezit ive, meur a hini, hag evid kompren ar re nevez, e ouezit mond da glask ar re goz.

— Med penaoz e ouezas Bi Jog hag e gamaladed edo an eskern eskern tud?

— An dud gwechal n'edont ket sotoh eged bremañ, eme Fañch

koz en eur vralla e benn. D'ar pardaez warlerh, wardro d'al lestr e save evel boullou tan, a rede euz an eil tu d'egile, evel ar flammaj a lakee da drei gwechall ar baotred yaouank wardro tanteziou Sant Yann ha Sant Per.

— C'hwi ho-peus o gwelet, Fañch koz?

— Arabad deoh ober goap. Ya, emezañ o sevel e vouez, o gwelet em-eus gand va daoulagad va-unan... D'ar pardaez e savas adarre gwall-amzer. Da hanter-noz eur zourradenn avel, ken kreñv ma seblante dond euz strad an ivern, a lakeas da horjella an arreboueri en tiez, ha ganti e oe klevet evel eur youbadenn diaoulou! Ar wreg a-gichen a vadinellas, ha nag a bed all!

D'an deiz warlerh ne oa bern kolo ebed mui en e zav e Sant-Pabu. Er parkeier, er prajou, e oa gwez astennet, tiez a oa dido. Toenn an iliz he-unan a oa bet dibradet, hag ar sklent diouti o-doa torret prenezier Penn ar Vered.

E Porz ar Vilin, bag ebed mui... med eskern, eskern, eskern tud a verniou war an aot, o steki an eil ouz egile, gand houloù ar mor en imor, o sevel a-wechou en o zav, evel ma vijent bet o hervel endro daveto ar hig o-doa kollet. E-pad eiz deiz an dour a gendalhas, fuloret, d'o mala gand ar vein ouz ar herreg. En tiez war-dro an aot ne jomas den ebed mui e-pad eur miz, hag en noz, e peb leh, e kleved klemmou tud varo.

Teir pe beder maouez a gollas o skiant-vad. Kerkent ha ma teue eun tammig teñvalijenn, an dud en em gloze en o zi, morailhet an nor, ha stanket mad ar prenezier. Den ne grede mond da zeni an anjeluz. Ar Person evel ar re all ne oa ket braz an tamm anezañ, ha ne grede ket bralla e gloh.

Gand fin ar reverdi e tizroas a-nebeudou ar peoh. Med e-pad bloaveziou ha bloaveziou, kalz muioh eged araog an darvoud, ar strobinnellou a deuas da redeg noz e Sant-Pabu. Er parkeier, er foenneier, paotred ar Zabad a reas freuz. Dond a reent zoken aliez da lopa war ar prenezier hag an noriou. Eur pardaez edon chomet diwezad eun tammig da laza eur pemoh e Kerlagador. Goude Kermerrien edon o vond da gemered hent Kuzul-Vad, ken a glevjen o sevel euz ar waremm hagn a oa eno d'an ampoent, eur ganaouenn zudiuz. Ne gomprenen ger ebed enni, ha kerkent, dre an ode, war eul letonenn, me a welas eun dousenn furmou tud, gwenn-kann en noz du. Euz o horv e sile sklerijenn. Hag e kanent, hag e c'hoarzent, o tistaga lam-mou dreist ar bodadennoù lann, en eur rei an dorn an eil d'egile. Eiz deoh gouzoud, n'on ket chomet pell da zelled outo. Re all a zo bet paket. Me a dennas va boutou, ha d'ar red da glask tiez tud ar bed-mañ... Mousc'hoarzin a rit goapauz, aotrou Kure?

— Goapauz n'on ket, Fañch, med klask a ran kompren.

— Kompren! Kompren! eme Fañch Koz, traou a zo na hellom

ket kompren. C'hwi hel lavar hoh-unan. N'eo ket hepken traou ar bed-all, aotrou Kure!

Ar strobinele, a nebeudou, e oe nebeutoh a gaoz diwar o 'fenn. Evel leun a draou koz e seblantent beza eet da glask fret en eun tu bennag all. N'edon ket o hedal o gweled o tizrei endro da Zant-Pabu. Ha koulskoude, dizroet int, aotrou Kure! ha digor eun draig va ginou.

— Ya, aze emaint adarre, c'hwi her goar, aotrou Kure!

— Me?...

— Ya, c'hwi! Anaoud a rit leun a istoriou nevez en em gavet. An dud o-deus fiziañs e Fañch koz hag a gont dezañ eur bern traou. D'ober petra nah ouzin ar wirionez?

— Me n'am-eus netra da guzad ouzoh, Fañch! Traou sebezuz a zo bet atao war an douar... sebezusoh nebeud a zo, marteze, e Sant-Pabu.

— Henn anzav a rit. Med euz a beleh e teu an istoriou-ez?

— Daoust ha me oar? Me a glask kompren...

— Mad, me am-eus komprenet. Piou a deu d'ober troiou kamm da Job al Lip, da Janig Lalla? Gweled a rit e ouzon, eveldoh, kalz a draou, ha n'eo ket red din, emichañs, konta deoh istoriou hag a ouezoh en dianheol! Piou a deu da laerez lienaj ha tammou dilhad a hiz nevez a zoug bremañ ar methed, harp e poull Sant Vaodez? E Sant-Pabu n'eus bet biskoaz a laeron ha ne vezo morse. N'ho-peus ket klevet ar hilheien? Nebeud zo, n'eus mui eur ebed ganto.

— Gwir eo, avad! En deiz all hini Juli a zistage e ganaouenn da unneg eur noz!

— Piou a lak ar hilheien evel an dud da goll o 'fenn, aotrou Kure? Ar strobinele! Ar strobinele! Me o hlev, pennad gal! o kana en noz aze er 'foenneg, e-kichen ar poull. Dre ar prenestr e welan furmou gwenn o hournijal. Klevet a ran zoken, rag war ar hlevet on chomet barreg, trouz o eskeliou awechou... Diouz ho penn me a wel n'am hredit ket.

— N'ho kredan ket, n'eo ket ar ger... C'hwi, Fañch, emedon, goustadig-kenañ, evel o klask lakaad lipig gand eun tamm fars, evid ma 'z afe êsoh en traoñ, c'hwi, Fañch, a gav deoh gweled ha klevet...

— Re gal! Ar paotr koz a zavas en e zav e penn an daol, a dennas e zorn euz e vruched, a daolas e gorn en eur skudell, hag e grabanou digor evel ma vije prest da zailha warnon evid va mouga, e youhas:

— Lavarit, kement hag ober, on eet e belbi, pennad gal! Ne gredit ket er strobinele! Sal e teufent bremaig, pa viot o vond d'ar gêr, da skrabad deoh ho penn hag ho fri!...

*

**

An avel a zourre. Teñvel-sah oa. Strobinele ebed ne deuas d'am diambrog, na war an hent nag e-kichen ar vered. Skuiz-maro oan, nehed-maro ive, o klask gouzoud, o klask kompren petra 'n diaoul a oa o c'hoari em 'farrezig muia-karet.

Kousket fall e ris, hag e oen dihunet gand va 'Ferson:

— Deus buan, emezañ, da weled petra zo en em gavet!

Eun darvoud fall bennag adarre, douetuz, rag an traou ne hellont mond nemed war o hemend-all. Malloz Fañch koz?

*

**

— Edon, eme va 'Ferson, o kana servichou gand mab ar hloher, ken e klevjem trouz e traoñ an iliz goullou. Tri labous gwenn braz a hournije war ar hadoriou. Manu a zo eet d'ar red, e-neus kemeret ar valaenn, ha dihagnet a far-digleo gand unan. Lazet eo bet war an taol, hag e gorr a zo en traoñ. Dont a rez d'e weled?

Me a jome digor va ginou. Va 'Ferson, an dour en e zaoulagad, ouz va dihuna ken abred, abalamour m'e-noa mab ar hloher mas-toufet a daoliou balaenn eur haz-noz!... E peleh emeon, va Jezuz! Amañ ema an oll, Person hag all, o paka anezo!

Diskenn a ran, koulskoude, gand truez ouz va 'ferson. War an daol, er gegin, edo astennet al labous. Me a zivorfilas va daoulagad, hag o digoras braz evel brennig. Gwenn oa al labous-noz, gwenn-kann gand rozennou melen, en o hreiz pikou aour.

Biskoaz kemend-all! Gwenn eul labous-noz! Rag unan oa. Tro e benn hag e zaoulagad henn diskoueze. Gwad a zivere euz e veg. Me a zelle outañ gand truez, Koulskoude n'am-eus ket eur galon ken tener ha va 'Ferson! Ha seul-vui ma sellen outañ, seul-vui her haven dudiuz. Netra zivalo ebed ennañ. Ma vijen bet ken kaer egetañ, p'edon paotr yaouank, oll verhed ar hanton o-dije lammet din ouz va 'fenn!...

— Set' amañ avad eur c'hoari! eme d'am 'Ferson. Euz a beleh e teu al laboused-se, brasoh eged kluriji, ha ken kaer? E peleh ema an daou all?

— Nijet kuit! N'oun dare e peleh! Med selaou 'ta: daoust hag an istoriou diweza ne deuont ket euz al laboused-se, evel hini ar hadoriou labezet? eme va 'Ferson n'oa ket bet ganet d'ar zadorn...

**

Leun a dud a deuas d'ar presbital, re vihan ha re vraz, da weled al labousig koant e-noa lazet mab ar hloher gand kement a grizder. Merhedigou a ouelas en e-gichen.

Me a glaskas en oll levriou sklerijenn war ar hizier-noz. Netra sklêr, traou distrantell! A greiz oll e teuas din da zoñj em-oa eul levr goloet a wiad kevnid, ha n'am-oa koulz lavared morse seller outañ. An aotrou Pemp, Doue r'e bardono, eur beleg mad bet kure Gwitalmeze, e-noa e roet din eun deiz!

— Sell, emezañ, hennez ez eus ennañ leun a draou talvouduz, hag a zervicho dit.

Evel ar halz euz ar re yaouank me a ree fae war an traou koz, war al levriou koz dreist-oll: « Rimadellou! » a zoñjen. Bremañ an dud a zo desket, hag a lez a gostez an diotachou. Hirio e ouzon ez eus traou koz talvouduz.

Bremañ ez eus eun nebeud bloaveziou, edon eet d'ober eun dro d'al Lorren. Eur vaouez goz he-doa bet c'hoant ober plijadur din, hag a roas din eun imaj dindan gwer: Sant Kristof.

— Petra rin-me gand hennez, a zoñjen, ar hoz tamm imaj koz-se?

A-veh m'edon en em gavet er gêr, e tigoueze ganin eul lizer hag a lavare:

« *Kleved a reom ez eo bet roet deoh eun imaj e gwer livet. Kinnig a reom deoh evitañ pevar ugent mil lur...* »

Ez deoh gouzoud n'em-eus ket e roet, rag kalz ouspenn e tle talvezoud imaj an hini goz. Uriaou an aotrou Pemp a zo eun teñzor hag a dalv kement egetañ. E-pad ma vezin-me beo, den ne lakay e graban warnañ. Her gouzoud a ran abaoe m'em-eus kaver ennañ eur studi dispar war ar hizier-noz, eur studi, ha kaer ho-po klask, ne gavot ket e neb leh all ebed.

En eur horn-tro edo al levr. War benn va daoulin, gwir bater, eo em-eus e lennet.

— *Lod, emezañ, a gav dezo n'eus nemed eur ouenn pe ziou a gizier-noz, a hoeñv evel ar hizier-deiz. Med ar hizier-noz a zo dini-ver. Ar halz euz ar re a vev en or bro a zo du, med bez 'z eus, zoken amañ, re wer, re ruz, re velen ha re wenn. Kement a laboused a nij en noz eged en deiz. O eskell avad a zo didrouz. Lod a gan, lod all a ro gand o beg trouz d'isheñvel hervez ar ouenn. Bez ez eus hag a zistag gantañ evel brammou, re all a zirlink evel kleier bihan. Oll al laboused noz a wel en deñvalijenn, evel dom-ni en deiz, peb tra gand e vent hag e liou. Lod all a wel sklêr en deiz koulz hag en noz. Evel diou gohenn a zo war o daoulagad, unan en em zastum e-pad ma*

labour eben. Treh int deom-ni, peogwir o-deus daoulagad deiz ha daoulagad noz.

Goude-ze e tisplege al levr buhez al laboused-noz, o bevañs, evid kalz anezo logod, razed ha gozed. War beb unan ez eus pajennou ha pajennou, euz an talvoudusa, hag e kendalh:

— *E-touez al laboused noz ez eus unan souezus, dudiu-kenañ. E bluñv a zo gwenn. (O lenn ar pez a heul, me a anavez kercent ar paour-kêz hini lazet gand Manu.) N'eus ket kaeroh egetañ, hag on tud koz a roas dezañ an ano a « alaourig-noz ». Ar ouenn n'eo ket puilh. An alaourigez ne zovz nemed eur vi beb daou vloaz. Ral eo eta e weled. Koulskoude her haver e korniou-tro euz an Normandi. Figuz-kenañ eo. Beva a 'fell dezañ er horniou douar ar haerra. Klasket ez eus bet e lakaad da veva e kestell, e touriou, e lehiou all, abalamour m'eo eun dudi e weled o hournijal d'ar pardaez. Netra d'ober gantañ. Tehoud a ra evid mond da veva en eul leh a blij dezañ.*

An alaourig-noz eo an aneval a dosta ar muia, dre e ijin, e zoareou, ouz spered an den. Gwechall ez eus bet tud hag o-deus bet alarouigou-noz en o zi. Chom a reent ganto hed an deiz, hag en noz teuent war joug o mestr pe o mestrez, d'ober dezo eun tamm illig, — (Istor Job Pipo!) — en eur gana « rou, rou, rou, rou ». A-wechou e reont eun trouz all, heñvel ouz hini eul liñser o regi, pe hoaz evel eur rohadenn.

Laboused speredeg ha karantezuz-kenañ, e karont tostaad ouz an dud a blij dezo. Brichinog int avad awechou eun tammig re. Gwellet int bet, dreist-oll pa glevont kana pe hoarzin, o tond da gemered perz er blijadur hag oh ober d'an dud a beb seurt brichinerez. (Setu istor Job al Lip!) A-wechou, pa welont tud teñval o 'fenn, pe me oar, setu m'en em lakeont d'ober dezo a beb seurt taoliou kamm. Tud a zo bet spontet ganto. E leh lezel ar bobl da gredi a beb seurt diotachou, e ve mad deski dezi ez eus en noz laboused euz ar hoanta, evel bugaligou noz, eun tammig direol, o klask an dro da hoari ha da hoarzin gand an dud. — (Klevit Fañch koz!)

N'int ket laer anezo. Karoud a reont koulskoude, evid farsal, kemered traou a bep seurt da guzad. Eun deiz unan hanter-vezo, en Normandi, a oa o satal dre ma helle, da zihuna an dud e-kreiz an noz. Eun alaourig, gand eun taol pao, a laetas diwarnañ e zutell euz e hinou, hag an den d'e wele d'an daoulamm.

An traou laeret a vez renket mad ganto en eur bern, en eur halatrez bennag, ha pa 'z eer d'o hlask, seul-vui ma tosteer outo, seul-vui e reont kreñvoh-kreñva « rourou, rourou », evel ma lavar ar vugaligou « tan, tan », pa vezont o c'hoari klask an teñzor. Ar vugaligou a blij dezo dreist-oll. Kemered a reont perz en o hoariou, ha gwechall, huñvre meur a brinsezeg er maneriu oa kaoud eun alaourig-noz.

Evel ar halz euz al laboused-noz, an alaourig a vev gand logod ha razed. Dre o han pe dre o zellou boemuz e teont a-benn evel d'o mezvi, d'o strobineella, ha gwelet int bet awechou o ren beteg o neiz kantchou ha kantchou anezo. Derhel a reont hepken ar pez a zo red evid en em vaga, ha d'ar re all e lavaront: « It d'ar gêr, kenavo warthoaz ! » Mond a reont ive aliez e glud ar yer, ha dirag dimezelled ker koant ar hilheien a goll o 'fenn hag a zistag en noz o hanaouen-nou kaerra.

**

— Dedeig! Dedeig! Klevet em-oa e park Landegaran mouez va hurust. Ged eun tammig, Dedeig!... Me a gemeras alhouez an tour. N'eo ket ubel tour Sant-Pabu, kuzet e-touez ar gwez braz a-dreñv kein ar presbital. Ni a zavas en deleziou striz beteg ar garridou. Dedeig a zelle ouzin, nehet, o soñjal, douetañs:

— Peseurt taol diot emañ adarre o vond d'ober ar hure?

Nebetoh oa hoaz pa bignas er skeul, beteg toenn an iliz:

— Taol evez! emeve. Bale war an treuziou a holo bolz an iliz. Laboused-noz a zo aze. Arabad dit kaoud aon, n'int ket droug an oll. Neiziet o-deus leun a draou, dilhad ha traou all. Klask an neiz, Dedeig.

Eur bounta war e benn a-dreñv, edo er halatrez... Rourourou... Rourourou! Dedeig a zirollas da hoarzin, hag al laboused a gane gwasoh-gwaz. Dont a reas en-dro va hurustig gand eur gazeliad traou, ha war e skoaziou, tudou, an daou alaourig, unan a beb tu a gane, en eur zoubla o 'fenn, evel diou durzunell. Beb an amzer, gand o eskell e reent illig da Zedeig en e joug, hag e c'hoarze, goloet er zilhad hag e benn a wiad kevnid.

Pardonet oa torfed euzuz mab ar hloher. Ne ouie ket ar paour-kêz den petra ree. Den ahanom na ouie pebez teñzoriou kaer a laboused a oa deuet da veva en on touez. Gellet o-dije goude an darvoud trêpezuz nijal pell diouzom. Marteze edont o bedal an noz evid tehoud. Moushoarz eur bugelig koant, laouen evel eur pintig, a lakeas ar peoh en o halon.

Dedeig, goustadig, a ree dezo allazig:

— Ni a vezo kamaladed. Me a deuo d'ho kweled. Arabad da zen ebed avad ober poan deoh, pe e pako ganin-me. Kenavo! Kenavo!

Hag e lammas d'an traoñ Dedeig, e-pad ma nije en-dro war o neiz an daou alaourig, en eur ober « rourou ».

*

**

Ni a zispakas ar bakodenn:

— Oa! eme Zedeig.

— Sell, Dedeig, korn Fañch Pilad!

— Boned Job ar Lip!

— Sell, Dedeig, eu zab fars!

— Oa! eme Zedeig, lakeet souezetoh eged m'e-nije kavet eun neiz dorhanig en e votez.

— Sah farz Janig Lalla!...

— Te a gaso o zraou en-dro d'an dud. Ar re all e vo gwelet goude.

Tammou dilhad a beb liou, pompon ruz boned eur martolod, — Setu aze eun all hag a dle bet lakeet nebet! — lienachou! Traou kempenn oll avad! An dilhad fank ne blijont ket d'an alaourigou! Daou lavreg merhed a oa ive en o-zouez, ha ne oa ket pell e oa gouezet da biou oant... da blah ar presbital!

**

Dedeig a redas, fouge ennañ evel eur bouchig bihan. Konta a ree d'an oll an istor zebezuz. Euz eur penn d'egile euz ar barrez, eur hoarzedenn a zavas, o lakaad da dehou an anken euz kalonou tud Sant-Pabu. Ar peoh, al levez e peb leh er pardaez a dride, e-pad ma selaoue euz dor ar presbital, laouen-meur, an aotrou Person hag e gure an daou alaourig, dindan toenn an iliz, o regi liñseriou!

Petra oa digouezet?

Daou alaourig a veve en eun tour, harp er mor glaz, e bro Normandi. Kaer-kenañ ar horn douar, hag e vevent euruz. Eun deiz e oe ganet en o neiz eun alaourigez vihan, eur verbig koant meurbed, a greskas hoaz ar blijadur o-doa o veva.

Dond braz a reas ar plahig. Eur pardaez e tigouezas en ti eun alaourig euz eur barrez a gichen, da houlenn he askell. Hag e oe friko-hagn gand oll gizier-noz ar hanton, ken na jomas mui er barrez nemed diou pe deir logodenn.

Pevar edont bremañ en tour kaer. En em glevet a reent dreist. Ar vamm-gaer, pa bake eur raz lard n'oa ket re galed he grohen, a zigase anezi e prof d'he mab-kaer. Hag hemañ, gand voulouz ar gozed, e-noa greet, evid deiziou yen ar goañv, eur mimi tomm d'e vamm-gaer. Set'aze laboused hag a ouie beva! Ger ebed morse etrezo, atao ar peoh, al levenez! Nag oa kaer o buhez!

Ar brezel, siwaz! a zirollas. Hag eun deiz, wardro div eur goude merenn, p'edont oll kousket, eur bolod kanol a gasas gantañ an tour ha toenn an iliz. Strinket oant, ar pevar alaourig, e-touez ar hoad, ar vein, hanter vouget gand ar moged. Pa helljont en em zivorfila, n'edont mui nemed tri. An tad a oa kouezet ar hloh braz war e gein, ha kaer he-doa e bried glaharet ober dezañ « rourou, rourou », ne vane ket mui.

A beb tu e nije an tennou. Ar vamm vad a zoñjas en he bugaligou, ha d'ar pardaez e lavaras: « Nijom pell abalen! »

Dond a rejont etrezeg ar Hornog, da glask lojeiz. Med er halz euz an touriou e oa kizier-noz euz ar rummou a gomz anezo levr an aotrou Pemp. Digemeret dreist e oant. Al laboused noz o-deus kalon vad evid an oll dud er boan, goude ma vent divroidi. Med eur gêr dezo o-unan o-doa c'hoant da gavoud, ha beb noz e nijent d'eul leh all. Awechou e kouskent hed an deiz en eul lab, eun tour avad eo a ree diouer dezo. Touriou goullo o-doa kavet, med figuz evel ma 'z int, ne blije ket dezo pe ar vro, pe penn an dud.

Goude beza troet ha dizroet e-pad daou pe dri bloaz, eh en em gavjont e Gwitalmeze. An tour a zo kaer awalh, ha n'eus kaz-noz ebed ennañ, na dindan toenn an iliz. Ar vro war e dro a zo kaer ive. Med ar vamm-goz, goude beza bet o firikad, diou pe deir nozvez, o selled en tiez a-dreñv kein ar prenezier, a lavaras:

— Evidon-me ne blij ket din an dud amañ. Gounid arhant a

zo eun dra, ha beva eun dra all. Amañ n'eus ket a levenez, ha ni a vo inouet-marò gand tud evelse.

— E klaskim e leh all, va mamm, eme ar mab-kaer.

E Lanbaol an tour a oa leun a vrini du, atao o koagal. N'int ket mignoned a zoare evid eun alaourig. E Plougin e oa kizier-noz rouz-gad, ha lard-puilh. E Landunvez re zu, hag e Porsal re velen.

**

Eur pardaez edont deuet o zri wardu ribl an Aber. Al loar a zavas ruz tan glaou a-dreñv kein Landeda, hag a deuas a nebeudou da skuilha he bannou melen-glaz war an toennou, kuzet evel neiziou koant e-touez ar gwez braz. Ganto e lintre an dour, e Beg an Enez, er Stellab, hag e Feunteun Benniget ar mor a oa goloet gand eur pallenn aour.

C'hoari a reent gand eonenn gwenn an houlou, wardro enezen-nou Garo, Gagnog ha Trevoh. An alaourigez yaouank a youhas da genta he levenez: « Rou, rou, rou! » emezi, ha didrouz, he eskell astennet, e plavas war ar pallenn aour. O zri dizale edont warnañ, o c'hoari:

— Na pebez bro dispar! eme ar vamm-gaer.

— E peleh emañ an tour? eme ar mab-kaer.

Kuzet edo evel an tiez, kuzet izel. A! N'eo ket ourgouilhuz evel an touriou all! Kuzet e-touez ar beziou!

— Amañ, eme ar vamm-gaer, e tle beza kalonou mad, kalonou hag a zalh soñj.

Goullo oa ha plijoud a reas dezo.

**

Eiz noz goude, ar vamm-gaer a lavare d'he mab-kaer:

— Mar deo brao amañ ar maeziou hag ar mor, an eneou a zo hoaz bravoh. O gwelet am-eus en o ziez. En noz eo e weler ar gwella dre ar bolejou, kalon an dud. Amañ 'z eus e peb ti karantez o vleunia. Nag eo laouen o beilhañnou! Nag eo koant o bugaligou! Pell zo, m'am-bije gouezet, e vijen deuet da jom en o zouez.

Hag o zri, da zerr-noz, e teujont bremañ bemdez da gemered perz e buhez Sant-Pabu, hag en he 'flijaderiou.

Red e ve bet, koulskoude, araog, embann edont aze, ober anaoudegez araog ober farserez. Ar paour-kêz mamm-gaer ne vije ket bet lazet!

Med dre brenestr ar presbital, an daou alaourig d'ar pardaez o-

deus gwelet bugaligou o ouela, re vraz, an aotrou Person e-unan, an dour en o daoulagad, dirag korv o mamm garet. Dedeig e-neus greet dezo allazig, hag e-neus rentet ar pezh o-doa kuzet evid farsal. Bremañ e vo gouezet int laboused onest. Bremañ e vint anavezet. Bremañ e vint karet. Bremañ e bellint c'hoari war ballenn aour ar garantez!...

E Sant-Pabu int chomet.

*
**

An oll a oar emaint aze ob ober o brichin en noz teñval. C'hoarzin a reont pa glevent o « rourou ». Ha p'o-devez kollet eun dra bennag, e leveront:

— O! Kavet e vo! Kuzet gand an alaourig e toenn an iliz!

Nag a blijadur pa deuont d'ober illig d'ar joug, war an hent, pe zoken en tiez! N'eus ken e Sant-Pabu hag e ve laboused evelse. Ganto ez eus fouge en dud. Ar pezh a zo gwellob, gwir vuzudou o-deus greet.

Fañch Pilad e-neus kontet e istor da Janig Lalla. Ha Janig Lalla he istor da 'Fañch Pilad. En eur hoarzin o-daou int deuet da gaoud kaer an eil muzellou egile. Hag e penn ar bern kolo o-deus en em roet o 'fog kenta. Sapre Fañch! Bremañ e-no arhant, ... eur vaouez, hag e bello sevel melhoued.

Job Pipo, goude beza bet tañvet eun nozvez duduz er sakristiri, a zo en em gavet eur pardaez er gêr, adarre hanter vezo, hag e-neus lavaret d'e wreg, droug ennañ:

— Selaou! Me a zo skuiz gand ar vuhez a renan en ti-mañ. Me am-bezo eun alaourig-noz, pe eun alaourig-deiz!...

Unan deiz eo en-devezo, rag, diouz ma leverer, traou a-nevez a zo gand Mari.

*
**

En he gwele bihan gwenn, Annig a zo o vond da gousked. He mamm a zo en he bichen, hag he bleo du en em vesk eur pennad gand re alaouret he merbig:

— Mamm! Selaou 'ta! Ne ouezez ket petra am-eus goulennet digand an aotrou kure? M'hel lavaro dit en da skouarn... eun alaourig bihan... An hini kenta a vo din-me!

... Lellig! Kea!

*
**

Annig! Annig! Poltred Sant-Pabu!... Eur verbig eo evelhout, koant, karantezuz evelhout. He bleo! Tachennou gwiniz alaouret Streat-Veur, Resevan ha Kerzonval. He zae marellet? Ar maeziou

a beb liou, o skedi e miziou kaer an hañv. Eur vreh dezi a zo astennet wardu Gweledigou, an Tevenn, beteg ar Honterludu. Eben, e-touez ar glazvez, o c'hoari gand an dour, etrezeg Ruzulan ha Merz-naot, beteg ar milinou. He zreid flour ha gwenn a ra bourbouilh er mor glaz, er Stellab, er Ganaog. Hag e vouchoarz, va merbig, va lellig, e penn all ar bed, ahont, pell...

Nag e karfen, beb an amzer, he briata stard etre va divreh, epad ma rafe he alan illig d'am choug, araog mond adarre, evel Job Pipo, dre straejou sperneg ar vuhez, beteg ar park, d'ober an neuz da hwennad!

Eur pardaez edon o konta dit marvailhou, dit-te, va merbig vihan, pe dit-te, Sant-Pabu? Ne ouzon mui da behini, ha me a deuas da lavared eur ger. « ankounahaad », a lakeas da zavel warnon da zaoulagad nehet:

— Na pebez ger diêz! emedout. Ankounahaad? Petra eo an dra-ze.

Me n'ouzon ket va-unan petra eo, va merbig-me, va lellig-me. A-uz dit, o Sant-Pabu, en da deur, e-kreiz da veziou ha da diez, va spered bepred a jomo, evel eun alaourig.

MAB an DIG.

Gerioù nebeud anavezet

SANT-PABU

Karza	heja-diheja, dastum evel teñl.
Jaret	chomet a-zav el lehid, heb gelloud mond war-raog, abalamour d'ar pri.
Askomb	koufr, unan a beb tu d'an daol ouz ar gweleou-kloz.
Gwele rêz (reaz)	Eur gwele a hiz nevez.
Stammioù	javedou ar vuoh.

JOB AL LIP

Louaj	marh-limon.
En dian-heol	dindan eñvor (par cœur).
Chichonou	chaosonou.
O tihagni (dihagni)	o labourad a laz-korv — gagn: sauvage; dihagni: défricher.

A hourrij (gourrijal)	c'hourrinad (evid eur gazeg).
greet krik gantañ	eet krenn da zod.

JANIG LALLA

Fog enni	fouge, leun a lorch.
Anell (gourel: anello)	randonnerez.

Arrelachi lakaad a gostez.
 Rafourchet klasket a beb tu.
 Al loa gog Al loa vraz, loa-bod, kloge.
 Distrantel heb feson, n'eus forz penaoz.

FANCH PILAD

Bidanell Krefivoh eged anell, rondonner.
 Ober an neg ouz . . ober goap ouz.
 O tirilha (dirilha). lakaad ar greun da goueza en eur frota ar penn-ed etre ar bizied.
 Lêz tourgouilh . . Lêz trenk pouloudenet.
 Soubenn ar bitonig soubenn gand bara poazet ha chalotrez.
 Euz e westell . . . gwestell (gweskenn, gwestenn) : mors.
 Pioka ano roet en Arvor d'ar bezin bihan pe vezin gwenn, a werzer bremañ ken ker.
 Dibennatuz louzaouenn a boulz er parkeier, mad evid al lapined hag evid para teiz ar zaout pa vezont bet flemmet.
 Ne darde tamm e henou ne ehane tamm ebed da gomz (tarda; chom a-zav).
 Istrimant den pe dra difeson.

AN TORFED EUZUZ

Rostet krenn ne heller ket o dibuna, roestlet.
 Brichinog a lak ar re all da hoarzin, a gar ober troiou.
 Skilt gwrizienn a zav en tevenniou, a jaoker evel rigaliz.
 Fri garlot fri kuriuz.
 War e zrez goustad, heb ober van (lavaret e vez ivez : war e zrezig).
 Direosti klask eur penn, evel d'eun neudenn rostet (dirouestla).
 Leun chek leun beteg ar penn.
 O c'hoari viel . . . o vond war an tu kontrol, o c'hoari fall.
 A far-digleo kement ha ma heller, gand an oll nerz.
 Mastoufet mouget.
 A hoeñv goeñval : miaoui, leñva. Eun den goeñvet : eun den hag a vez aliez en imor fall.

PETRA OA DIGOUEZET ?

Friko hagn founnuz, druz.
 firikad klask, furchal. Eur firig a lak e fri e peb leh.

Yannig an Termaji

Poullhourig a oa eun dister a barrez d'an amzer ma tigueuzas kement-mañ, a-boan echu ar brezel pevarzeg. Biskoaz ne c'hoarveze netra vraz enni da zanka tiz e gwad an dud, na netra vihan kennebeud da voueta kaoziou ar merhed el lenn. Ar re binvidig a zimeze etrezo hag ar re baour a rae kemend-all, med gwaz ebed ne laze e vaouez, setu e ranker kredi e oa bet hadet er halonou eur greunenn a houzañvidigez. Bugale a deue war an douar hag a veze kaset d'ar vadiziant war vreh o maeronez, araog mond d'ober tro ar vourh, d'eun ostaliri d'eben, evid kaoud chañs vad er vuhez, med biskoaz n'eus bet kollet poupig ebed etre an iliz hag an ti, pezh a oe gwelet meur a wech e Lanbrug, evel ma ouzer. Eur hoziad bennag a varve beb mare, ne oa ket dre gleñved, avad, med ablamour e chome re bell heb tenna war e alan. Eur barrez sioul ha tohorig, petra ta!

Setu perag, beb tro ma veze klevet eur wetur-dre-dan o trouzal gwasoh eged eun dournerez war ar blasenn pe o terri ar paz spontuz evid pignad d'al laez gand ar grehenn a gaze d'ar vourh, an oll a zirede da zelled outi piz ha piz, heb tostaad re. Ar gweturioù-dre-dan a oa kalz rouesoh c'hoaz, d'ar mare-se, eged ar peziou aour ha doujet seiz kwech muioh. Tud a ziavez ne veze gwelet kasiman morse, nemed eur pilhaouer diskennet deuz ar Menez Are gand eur hachedad bolenou ruz pe hlaz war lost e gar da baea e bilhaouerez, eur marhadour spilhou, lietez ha seizennou evid ar merhed hag eur mestr-skol yaouank bennag o tond da gemer karg an hini koz pa goueze fri hemañ en e varo. Beb eil sul, Loull an Tagnouz, pôtr ar bonbonigou, a deue gand e gar bihan dirag an iliz da werza tammigou liperez treud,

limaiou kamm,
 daou-wenneg an tamm!
 Gwastell amann
 d'ar pôtr ha d'ar vamm!
 Ragalaj du
 d'ober chod ruz!
 Eun dornad kraon
 da zigas naon!
 Daou-wenneg ar pezh,
 n'ho-po ket mez!

Med, da zevez ar pardon, ar vugale vihan, diskennet mintin mad deuz o gweleou-kloz, a gave endro d'ar blasenn beteg eun dousenn teltennou dislivet o tischeolia pe tislavli tôliou hir, ma oa kinniget warno seiz c'hoant warn-ugent an diaoul, ebatigou, c'houtilli, c'houezigellou ha « reuteuteoutou » d'ober trouz, merhodennou brenn-eskenn, mellezourioù, kokardennou, bouliou lintruz da ficha an tier hag

an aotrou Jan Bleo
war guz ha war zao.

Goude an overenn hag ar gousperou war an ton braz, ar vugale a zache o mammou, dre vañch pe lostenn, war-du an teltennou hag a rê eur veh spontuz evid kaoud tra pe dra. Awechou ivez (pebez plijadur, va Doue!) e veze gwelet o tiskoacha d'an abardaez-noz, an devez araog, pôtrede ar rônsed-koad pe bôtred ar « sinima »... Ar re-mañ a oa deuz gouenn ar rederien-bro e veze grêt outo an « toullou-louz » (doujañs deoh, ma zud!) ablamour moarvad o-doa bizaj melen-du ha krohen kaled, warno tammou dilhad truilheneg, lousoh e gwirio- nevez eged ma ne oant da weled, med nêtoh koulskoude eged ar horvou damguzet dindano. Eur reked hag eur burzud war eun dro.

Da genta, ar « sinima » a veze anvet an « termaji » gant Poull-dourig dre ma oa deut warlerh al « letern majik ». An ano termaji a veze roet ivez da bôtred ar « sirk », ar re a lakee loened gouez pe gezeg da ebatal dirag an dud sebezet, ar re a vranñigelle a-zioh ar pen-nou war eur fun stignet etre diou botojenn, ar re a hoarie jiminaskaz endro d'eur varrenn goad en êr. Setu, p'en em gave, er barrez, eur hanfard bennag douget da farsal ha da vaneal e gory en eun doare fentuz evid lakaad e vignoned da hoarzin leiz o bouzellou kig-sal, eur homediañcher ta! e veze klevet: o, hennez a zo eun termaji daou-wenneg! Hogen, eur paour-kêz den, pa rêe an arzodig heb gouzoud mad dezañ, pa ne oa ket lemmoh e spered eged eul loiad pri-mañsona, an den-ze a honeze anoïou-all: hennez a zo eur huign-zegal, a lavare an dud, hennez eo chomet gantañ ar brenn etouez ar bleud, hennez a zo eur Yannig Heiz-Gerh Na!

Ha dres d'ar mare-ze, e veze e Poull-dourig eur Yannig Heiz-Gerh. Eun denig mad ha dizroug. Alas, disterig a gory ha berrig a spered, chomet e oa paket etre bugel ha den, ken e oa gouest da reded c'hoaz war-du Keribilbeuz, ma vije bet goulennet digantañ, evid klask ar gordenn da dreï an avel pe eun hanter-lur had bolennou dozvet gand skudilli pri. Hag eur wech e pakas-eñ eur gwall friad, derhent deiz ar pardon, er « sinima », en doare ma kollas e damm heiz a zehou hag e damm kerh a gleiz evid dond da veza Yannig an Termaji beteg e varo, heb kleier na badiziant.

Pôtrede an termaji a zigouezas e Poull-dourig d'ar zadorn araog ar pardon. An dra-mañ oa er bloavez pemp warn-ugent, m'am-eus klevet mad. « Sinima » a oa ganto, « sinima-mud », evel just, peogwir ar « sinima-trouz » n'eo bet ijinet nemed tri pe bevar bloaz goude. Kerkent digouezet, amzer da zisterna ar harr hag e oe klevet an tapoulin o strakal war ar blasenn. Eur mell den e vleo du-pod a vlej e brezegenn ken e tregerne gantañ koulz ar hoefou war benn ar merhed hag ar gwez war ar prenestri:

« An noz-man, goude koan, e ti an ostiz Berr, e vo c'hoariet sinima euz ar seurd n'ho-peus gwelet biskoaz er ger-mañ na n'emoh prest da weled adarre araog pell. Eun abadenn hebken gand ar brasa film a zo bet savet beteg-henn er bed-oll hag er broïou tro-war-dro: « Le Fils du Contrebandier ». Evid echui, d'ober plijadur d'ar vugale vihan kement ha d'ar re vraz, e vo diskouezet deoh Charlo, ya, Charlo e-unan epad e amzer soudard. Danvez da hoarzin leiz ar horv. Ha pege-ment an tòi? Pevar real, marteze? Nann, na deg kwenneg kennebeud,

na pemp. Evid ma hello an oll, pinvidig pe baour, dond da weled Charlo en e gröhenn, daou wenneg hebken d'ar re vraz, eur wenneg d'ar vugale ha netra grenn d'ar poupigou maget diwar vromn. Deuit oll d'an abadenn sinima nevez, an noz-mañ, e ti an ostiz Berr; Bankeier pe gadoriou evid azeza. Ar re a gavo gweloh gourveza war an douar ne gousto ket dezo eul liard kerroh! »

Yann Heiz-Gerh a stleje e skasou dre ar vourh dres d'an ampoent ma rêe pôtr an termaji e halvadenn. Klevet e-noa eur gomz bennag araog diwar-benn ar sinima, med biskoaz ne oa digouezet gantañ mond da weled an termaji daou-wenneg-se. « Koulz eo din mond, evid eur wech », e soñjas on denig mad. Dao d'ar gêr da lonka e zoubenn rouz ha kerkent endro d'ar vourh, koaret gantañ e voutou ler-goad, e dog seiz bouloutennet war gern e benn. Faro ta!

Sal an ostiz Berr a oa leun-tenn a dud hag a vugale, eur hi bennag en o zouez, o harzal e-kreiz ar reuz. E penn-traon e oa savet, war eur mell trebez, eur mekanig sklerijennet an diabarz outañ hag o teuler eur c'hwez re-bar da hini ar harbur a lakee Yannig da voueta letern e varh-houarn. Er penn d'al laez, eul liñser wenn a oa staget ouz ar voger. Yannig a gavas an tu da ziazeza eun hanter-feskenn war ar bank kenta. Ken tost e oa d'al liñser ma wele mad al lizerennou brodet er horn hag eur pez tamm liern nevez gwiziet e-kreiz, moarvad da stanka eun toull. Ouspenn hag-eñ e-noa tôlet evez e kemend-se rag an dud, er zal, e save mouez d'ober goap: « Ahanta, ostiz Berr, poent eo deoh prena eul liñser nevez evid ho kwele, houmañ a zo brein awalh. N'eo mad ken nemed da zila yod pouloudet. » Hag an oll da hoarzin hag ar chas da harzal, penn-follet gand ar jolori. Setu eur rummad tud-all o vlej, kounnaret ru: « Da biou ar gurun eo ar chas-mañ? Tôlit anezo er-mêz pe goulennit daou-wenneg moneiz-ki digand o mistri! » Kerkent goude, e oe klevet an nor o tigeri hag al loened paour o skarza kuit gand chalpadennou mantruz, eur votez bennag dindan al lost.

War eun töl krenn, ar goulou a oe lazet hag ar gompagnunez teuzet en denvalijenn. An trouz hag ar zafar a ehanas, nemed e oe klevet eur bugel o klemm hag o leñva, gwasket gand an aon du. « Peoh, peoh, e hopas eur vouez groz e traon ar zal, roit ar chukenn da hennez! » Hag ar bugel da yudal muioh-mui, ken e oa eun eston. Neuze, e savas eur vouez-all e kichen an nor: « Kasit ho pugel er-mêz, Katell, hennez e-neus c'hoant dizoura. Ahendall, c'hwï a bako eur banne glao tomm war ho parlenn. » C'hoarzedeg adarre, evel just.

Med pôtr ar sinima a houlenas digand Poull-dourig chom sioul. Trouz ar mekanig a oe klevet raktal, heñvel-mik ouz chadenn eur marh-houarn o trei war an tu goullo. Al liñser wenn a oe sklerijennet penn-da-henn, tamm hag-all. Skrivet e oa warni: « Le Fils du Contrebandier ». An toull-louz a vlej: « Le Fils du Contrebandier! » Dioustu, ar re ne oant ket bet er skol, dreist-oll ar re goz, a grogas d'en em jala:

— Petra zo skrivet aze? Me n'ouzon tamm galleg ebed, daoust ma lennan mad-tre e brezoneg war leor Buhez ar Zent. Barba, lavar din, ta! »

— Me n'ouzon ket gweloh, Stefani, neudenn ebed. Med ma mab bihan a lavaro deom. Nouelig, petra zo skrivet?

— « Le-Fils-du-Con-tre-ban-dier », e tisklipas ar pôtrig, berr e alan.

— Petra eo ar hontrebandier, Nouelig?

— N'ouzon ket re vad, mamm-goz. Bremaig e vo gwelet. »

Hag e oe displeget war al liñser istor glaharuz eur pôtr a zaouzeg vloaz hag a glaske tenna e dad diouz etre daouarn ar valtouterien. An tad a rê floderez war ar butun etre Bro-Hall hag ar Spagn. Pôtrid ar Gouarnamand o-doa diguzet e roudou a-dreuz ar meneier braz. E oant warnez koueza war e choug p'en em gavas ar mabig. Ha hemañ a zizroas ar valtouterien war eun hent-all, louarnig awalh ma oa. Alas, dre forz redeg dirazo, e teuas da veza skuiz-maro ha prestig da goueza etre o daouarn. E sal an ostiz Berr, peb hini e-noa truez outañ, rag an dud o-deus kalon vad e Poullourig hag atao emaint a-du gand var re zister. Beb tro pa veze ar valtouterien o vond da deurel o hrabanou war ar pôtrig, diou pe deir mouez a hope : « Diwall, diwall mad, bihanig, emaint a-dreñv da gein, an toullou-boued-se! » An hini a hope ar muia war ar hrennard da deurel evez a oa Fañch Runevez ar Maltouter, eun den a vicher hag a ouie troiou e genseurted. War-se, ar mekanig a harzaz boud. Ne oa netra ken ebarz. Dibunet an tamm kenta euz ar film, red e oa boueta gand eur bellennad-all. « Stlakit ho taouarn, aotrounez hag itronezed, e kemennas pôtr an termaji a vouez groñs. Talvezed a ra ar boan, ne ra ket! » Hag an daouarn da stlakai e-giz ar gurun, epad ma houlenne Stefani digand Barba : « Perag e stlaker an daouarn, bremañ! Gwechall e veze youhadennou. Ar bed a dro re vuhan evidon. N'on ket gouest da vond d'e heul. »

Yannig Heiz-Gerh a oa bet spontet p'e-noa gwelet ar pôtrig kèz o klask tehed dirag ar valtouterien. Pa grogas ar mekanig adarre gand an eil bellennad, al liñser a ziskouezas dezañ kein ledan eur maltouter o pigna war eur roh da baka an hini bihan paour. Hemañ ne oa ket gouest da vond pelloc'h, nemed en em dôlet e-nefe e koummou eur ster hag a rede dindan ar roh. Awalh da vrema e dammig korv. Ar maltouter a bigne dalhmad, eur pezh den teo ha pounner anezañ. Ha Yannig a zoñjas gantañ e-unan : « Ar pôtrig paour a zo devet ma ne ran ket-me eun dra bennag d'e zavetei. Med petra ober? »

An denig en em gave dièz en e grohenn. Dond a reas eur mare ma ne hellas ket derhel e feskenn war ar bank. Hag e oe gwelet o sailha war al liñser hag o yudal a-bouez-penn : « Harzit ta, maltouter divalo! Leuskit ar pôtrig-se da vond, pe me welo! » Hag e klaskas paka gourizler ar maltouter ha mired outañ da bignad uhelloc'h. Alas, ne bakas nemed al liñser gand e grabanou. Al liñser a rogas, a zistagas diouz ar voger hag a gouezas war an douar, Yannig d'he heul, epad ma kendalhe ar mekanig da drei ha da sklerijenna ar voger. Med, siouaz, ar voger ne oa ket eur voger blèn hag ar skeudenn a oe drailhet e tam-mou bihan, ken sklêr ha gwelienn ar moh p'emei o vond da virvi. Eur jolori spontuz a zavas e sal an ostiz Berr :

— Piou e-neus grêt an amziod?

— Piou? Yannig Heiz-Gerh.

— N'eo ket fur awalh, hennez? Petra e-neus peget en e gory?

Dreist ar re-all, mouez ar vamm-goz :

— Nouelig, daoust ha Yannig eo ar hontrebandier? Biskoaz n'em-eus klevet sevel an ano-ze warnañ d'hoaz. Med bremañ e welan mad eo kontrebandier awalh beteg ma ra sotoniou e-giz-se. Roga liñser an termaji! Ma n'eo ket eur vez ruz! »

E berr gomzou, tud paour, Yannig a oe stlejet er-mêz gand an toullou louz hag a rankas mond ganto beteg e di da rei dezo eul liñser tennet deuz e wele e-unan. Ha setu ma 'z eas ar paour-kêz genaoueg da gousked gand eul liñser hebken dindannañ, epad ma hope beb seurd lakichen dirag e brenestr;

Yannig n'eus ken eul liñser vreïn
Da ranna etre kov ha kein.

Med Yannig ne rê forz ebed gand ar goaperez. En e wele hanter-goloet, an denig mad a hoarze laouen ha didrouz. **AR VALTOUTER-RIEN A OA CHOMET BERR DA BAKA MAB AR HONTREBANDIER.**

Per HELIAS.

Diridou 15 a viz mae 1958

Seizved

Devez ar Brezoneg

Ar Pab Inosant

Kontadenn a Vreiz-Izel gand Urvan PERENNES (1)

SKLÉRIJENN

An ano « Inosant » eo e-neus lakêd da-ziwan, a-dra-zur, ar marvailh-mañ, kutuilhet ganin e memor ar re goz. Koz e tle beza, moarvad.

Evid ar Breizad, an « Inosant » eo ar spered dinerz, an hini n'hell ket ober droug hag a dleer kaoud evitañ truez ha doujañs.

Da genta, truez, o veza ne 'neus ket bet digand Doue ar skiant a vez roet d'an oll dud all. Doujañs ive, rag evid ar Breizad kristen eo an « Inosant » an hini n'hell ket pehi, an hini eta e-neus dalhet glan sae wenn e vadeziant, hag a heuilh dalhmad bolontez an Aotrou Doue.

Er gontadenn-mañ, e klask ar marvailher ober euz ar Pab Inosant, eun « Inosant » hervez ar pezh a zoñjer euz ar ger-se e Breiz. Med, kaer e-neus ober, ne gred ket mond beteg penn. Re a zoujañs e-neus evid karg uhel penn-tener an iliz. Setu ma ta anezañ eun « Inosant » euz eur seurt nevez : eur galon gizidig hag eur spered troetoh da studia an natur eged skianchou an dud; eun ene didroidell digor da oll gaerdericu ar bed, ha c'hoant dezañ, dreist peb tra, da gompren skiant al loened mud. Bez ez eo an « Inosant »-mañ evel eun eil sant Fransez, eun ene santel ha sentuz meurbed ouz bolontez an Aotrou Doue.

Ar gontadenn-mañ a zeblant beza kar tost da varvailh ar « Folgoad » a ziskouez deom eun « Inosant » all ha ne ra van nemed ouz traou an Neñv. Gand an douar varvailh-mañ emao e gwirionez, e-kreiz traou burzuduz ha kevrinuz ar Grenn-amzer.

(1) BRUD. — Nn 3, p. 61.

AR PAB INOSANT (I)

(1) An Aotrou Urvan Perennès a gare kalz ar marvailh-mañ. E lennet e-neus da nouspet hini euz e vignoned, du-hont, e Treboul, e gwasked e lochennig. Greet e-nevoa eun droidigez halleg anezi, hag e zoñj a oa e embann, en eul leorig, e diou yez. Sammet eo bet gand an ankou, a-raog kas e vennoz da benn.

Pegen brao eo renket darvoudou ar gontadenn-mañ ! Warleth moueziou garo ar chas o santoud ar gwalleur o tond, e vo klevet moueziou melodiuz al laboused o rei da houzoud eur helou mad, ha goude moueziou doaniuz ar taned, o klemm war viloni ar pehed.

Penn-da-benn an istor-mañ, Providañs Doue eo a ren an darvoudou hag a laka ar Breizad santel « Inosant » da bignad, tamm ha tamm, euz e lochenn baour, beteg uhella pazenn tron Sant Per.

U. P.

I

DILEZET

Gwechall, demdost da goad Neved,
En eul lochenn goz ha dister,
E veve truilh, gand e bried,
Didrouz, eur paour-kêz labourer.

Nerz e galon, pouez e zivreh,
Labour e gorv, c'hwezenn e dal,
Netra ne helle beza treh
D'an dienez eno ' rodal.

An daou bried, kristenien vad,
Ha savet e doujañs Doue,
A gemere, heb grosmolad
Stad reuzeudig o gwall vuhe.

Tri gavell paour a oa en ti,
Enno tri êl bihan ha koant.
Med tamm bara n'oa da zibri,
Ha yén an oaled diarbant.

Eun deiz, Doue a sko kalet:
An tad a skuilh daelou ruz-gwad,
Rag ar vamm zo eet d'ar vered;
Gantañ e chom tri emzivad.

Neuze ' lavaras d'ar Hrouer:
-- D'evned an Neñv c'hwi ' ro bara.
Gwella tra am-eus da ober
Eo rei d'ho kward va yaouanka.

Hag eñ d'ar hoad gand e vabig,
Serret en eur zah kanab teo,
Ha staga sah ha bugelig
A-istribilh ouz eur brank beo.

E zorn dehou, neuze ' zavas
War ar bugel, o lavared:
— Va mab, ra deuo Sin ar Groaz
D'az tiwall diouz droug ha pehed.

Rannet e galon, an tad paour
A debas kuit a-dreuz ar gwe;
Eled dindan o eskell aour
An êlig bihan a domme.

Pa enaouas ar goulou deiz,
Ar hrouadurig a gouske,
Hag eun eostig war bord e neiz
Gand e gan flour henn luskelle.

II

EUN TAD

Deut ar mintin, Bremañ er hoad
An douar a greñ dindan troad
Ar hezeg, prim, o haloupad.

Hag en deliou, al laboused,
War o neziou a gren, spontet:
Raktal, o han o-deus tavet.

Mez an hekleo er hoajou don
A gas, skiltruz, tu-mañ, tu-hont,
Mouez ar horn-boud dre-oll o son.

'Ma ar markiz o chasæl:
Dirag ar maro o rodal
Pep loen a glask eun toull teñval.

Kerkent e sav dindan ar gwe,
Blej-yud ar chas, e seurt doare
M'o-deus kavet sur, traou neve.

Ar mestr d'e 'floh a lavaras:
— Petra ' hoari gand va oll chas
O vlejal yud, ken kreñv, ken
[gwaz?

Setu war hent ar chas, a-grenn,
Ez eont asamblez d'ar wezenn,
Hag e welont... ar zah melen.

Ar zah neuze, zo digoret,
Ennañ, ar bugel ' zo kavet,
Jesuz! Na koant eo da weled!

Hag ar markiz her hemeras;
War boull e galon henn stardas,
Dezañ neuze e lavaras:

— Doue da laka war va hent;
Da dad' vezin, m'henn tou ar zent,
Forz pe renk ' teus bet diagent.

Pegwir emaut e stad garo,
Glan 'vel eun El euz an Neñvo,
Inosant vezo da ano!

Hag an aotrou, dizro d'ar gêr,
A ro dezañ eur vamm dener,
Breudeur, c'hoarezed, eur maner.

III

HARLUET !

'Ma deut paotr krenn èlig ar zah,
Eun dudì eo 'vid ar markiz
Gweled ken kaer, ken glan, ken
Ken dreo yaouankiz. [yah,

— Petra 'teus desket er bloavez?
Eme an tad, d'e vab dizro.
— Desket em-eus eur yez dièz:
Yez ar chas etrezo.

Sentuz braz ouz e dad mager,
E tiskouez ' keñver peb hini
Ato mousc'hoarz, kalon dener:
Eur bann heol en ti!

— Gand an dud eo 'teus da veva,
Nann gand ar chas! Pebez diegi!
Mar deo ' benn bloaz ar memes tra,
Paotr saout e vezi!

An tad, o weled e kreske
Spered ar paotr gweloh-gwella:
Mab, emezañ, deut ar mare
Dit da studia.

An tad a houlenn, bloaz goude:
— Petra 'teus er wech-mañ desket?
— Traou ken dièz ha warleue:
Yez al laboused.

— 'Vel ma plijo deoh, tad karet,
' Ra Inosant. Hag heb dale
D'ar gwella skol e oe kaset,
Eüruz 'vel roue!...

— Foll eo da benn 'vel penn la-
[bous!
Eme an Aotrou, droug ha têt,
Ar wech kenta 'mo d'az kourdrouz
Ez i diouz ar gêr.

— Ya, tad!... Bloaz warlerb an
[Aotrou
A houl: -- Petra ' houzez bremañ?
— Kaerra tra dindan an Neñvou:
Yez kanuz ar ran.

— Skuiz eo erfin va 'fasianted!
Eme an tad. Mab digalon,
En da geñver, re vad on bet.
Teh pell diouzon!

— Ya, va zad kèz! Hag Inosant,
En e visah eun dorz vara,
Gand rann-galon, ha diarhant,
An ti a guita.

IV

AR CHAS

Dindan heol skeduz ar mintin,
Araog en em lakaad en hent,
Ar paotr yaouank ' gouez d'an
[daoulin
'Vid pedi Doue hag ar zent.

Meur a zeiz ' zo 'maint o vale,
A-dreuz traoniennou, meneier,
P'en em gavont, eun abardae
E-kichen dor vraz eur maner.

— Aotrou Doue, Sent Breiz-Izel,
Bennoz d'am ziegez kuiteet;
Pellait diouzin peb gwall antell,
Ha va skoazellit, me ho ped!

Raktal e sav moueziou ar chas
O vlejal 'vel bleiz er hoajou.
Biskoaz den ebed ne glevas
Chalp ken kounnaret na seurt you.

Neuze ' kemeras e benn-baz,
E visah hag e chapeled,
Ha setu-eñ war an hent braz
O vond heb aon ha kennerzet.

Hag Inosant: — Gouzout a ran
Petra emaint o lavared.
Ar chas a lar ' vo en noz-mañ
Ar maner-ze, laeret, devet.

Hogen, goude teir eur vale,
' Tigouez gantañ daou baotr livrin;
— Da beleh ez it evelse?
Emezañ d'an daou berhirin.

Hag int da skei ouz an nor goz.
An aotrou ' deu d'o digemer.
— Mestr, emezo, e-pad an noz
' Teuio al laeron er maner.

— Ni ' zo o vond da weled Rom
Ha bez an abostol Sant Per.
Mar karit e teuoh ganeom:
Berroh e vo deom an amzer.

— Doue eo ho kas davedon,
Eme 'n Aotrou da baotred Breiz.
Deuit en ti va zri mignon,
Da gemered pred ha lojeiz.

— D'oh heul ez in gand plijadur:
E oan o vond da redeg bro.
Kaerra bro eo Rom, a-dra-zur,
Rag gwrizienn ar Feiz ' zo eno.

Pa zilamm ' kreiz an noz teñval
Al laeron da ober o zaol,
An archerien ouz o gedal,
En eun taol kont o jadenn oll.

An aotrou ' ro, e trugarez,
D'an tri vignon eur yalhad aour;
Eur hart pemoh a ro ivez,
'Vid pourvez d'an tri veachour.

An daou gomper ' ra diou lodenn
Euz an aour o-deus resevet.
Ar bevañs, vel eur farienn
Etrezo ' zri a zo rannet.

Dre-ze, ar paour kêz Inosant,
En despet d'e guzuliou mad,
'Vel arag a jom diarhant
Ne deo ket kalz gwelleet e stad!

Emaint o vale a nevez
Etrezeg Rom, hag e treuzont
Meur a gêr vraz, meur a barrez,
Kalz tud, kalz broiou a welont.

V

AL LABOUSED

Digouezet int war ribl eur ster,
' Kreiz eur hoad don. Kaer an am-
Evned a gan er brankou. [zer,
O han flour
A respont ' mesk an deliou
Da hiboud an dour.

Setu ar pezh a lavare
An evned en deliou nevez.
' Leh goulouenn goar melen,
Inosant
A droh eur walenn gelenn
Dre m'eo diarhant.

Pa glev eur han ken dudiuz
O sevel er mintin skeduz,
Ar paotr ' lar d'e zaou vignon:
— Pebez kan!
Ar re-mañ petra gontont?
Her gouzoud a ran.

An daou all ' red d'an tosta kêr
Da joaz beb a houlaouenn gaer.
Pa welont ar walenn voan,
Nag a hoap!
Hag en o 'fart o-unan:
— Me eo a vo Pab!

Laret a reont: Be ' vo dibab.
Unan abanoh a vo Pab.
Arag, red ve deoh prena
Goulouenn.
Doue ' roy 'vid dibaba,
D'unan sklêrijenn.

Neuze o daou: — Pab ma vefem,
Inosant kêz d'az tiwalfem:
— 'Vid emmel ouz al loened,
Ra unan.
— Ha me 'vid faouta keuneud,
'Me 'gile dezañ.

VI

AR RANED

En hent a-neve d'ar beure,
Dre barkeier ha lanneier,
Kavoud e reont beb ar mare
Chapel zister pe iliz kaer.

Eun abardaez e welont teol:
Toenn eun ti ' traoñ eur menez,
Skoët gand bann diweza 'n heol
O luha ' dreuz deliou ar gwez.

Hag e pedent a greiz kalon
An aotrou Doue hag ar zent,
Eun 'vid e dud, an daou vignon
Da lakad buan penn d'o hent.

Prestig goude 'n em gavont drant,
Dirag an ti. Dindan al loar,
Eul lenn 'vel mellezour arhant
A lintr e glazder an douar.

— Petra 'ta eo ar han klemmuz
A glevom e sioulder an noz?
'M: an daou d'Inosant soñjuz.
— Ez an d'henn lared deoh fenoz.

— Kan ar raned eo ' zav klemmuz
Diwar an dour hag al lagenn;
Konta ' reont traou ken souezuz
M'am-eus poan o rei deo kredenn.

Eur verb yaouank, korv or Zalver
D'he 'fask kenta a resevas;
Kerkent avad, dizro d'ar gêr,
El lagenn amañ henn tufas.

Ar Horf Sakr, dre aotre Doue,
Zo digemeret gand eur ran.
Bez' 'z eus hirvoud, rag abaoe,
War beg e deod emañ gantañ.

Hag e klemmont 'vid ma vezo
Seurt karg diwar ar ran tennet.
Mez kement-se ne hoarvezo
Nemed « Inosant » ve kavet.

Ha kerkent e kav ar pare.
Ar vamm, daelou 'n he daoulagad,
A ro mil bennoz da Zoue,
Ha d'an tri baotr digemer vad.

VII

AR PAB INNOSANT

Leh ma hoarveze seurt burzud
'Zo tost da Rom. Goude tri deiz,
E kêr ar Pabed, ne oa brud
Nemed a baotred Vreiz.

Etrezo, Doue, marteze,
Dre eur burzud all, sklêrroh hoaz,
A zibabo ar Pab nevez:
Dougom banniel ha kroaz!

Marvet ar Pab: pemp devez ' zo
'Neus renter ene da Zoue;
Bremañ, e Rom, ez eus ano
D'ober eur Pab nevez.

Hag int en hent. An tri vignon,
Kuiteet mintin mad ar maner,
Zo ivez en hent. Hag ez eont
Daou anezo seder.

Hag er Gêr-Veur, e lavarent:
— Oh ober 'veleb burzudou,
An tri Vreizad ' rank beza sent;
Deom dezo gand goulou!

Innosant hebken a jom mud.
En e spered e Vreiz a gar;
Soñjal ' ra ivez en e dud,
Ha, trist braz e lavar:

— Ne welin ken da barkeier,
Gand o ed alaouret, o mell,
Da vilinou, er meneier,
O trei gand an avel!

Na da vaneriou iliaveg,
Na da vor rust, nag an tarziou,
O kounnari ouz da gerreg,
O Breiz! Bro va zadou.

Nag ar brug ruz, el lenneier;
Na da goajou dero kalet,
Na bokedou da brajeier
En heol, splann da weled.

Na da douriou sonn en oabl briz,
Na koefou kaer dantelezet
A zoug, ken dreo, da yaouankiz.
Va Breiz-Izel garet!

Pa zono kleier ar mintin,
D'an abardaez, pa varv an deiz;
Da galvariou ken ne bedin,
O Breiz! douar ar Feiz!

Ne glevin ken son ar biniou
O kas endro ar jabadao,
Na kan seder da vammennou
Kennerzet gand ar glao!

Ne heuilhin ken da henchou doun,
Da wenodennou roudennet
Gand balan, lann ha spern e bleun,
Aour hag arbant mesket.

Ne houesin ken ar mel melen
En tachennadou gwiniz-du,
Nag en avel, êzenn ar foenn.
Breiz! O c'hweka repu!

Na kennebeud, el liorzou,
D'an diskar-hañv, e gwenngolo,
Alan vad ar gwez avalou,
Karget a frouez aho.

Ne gerzin ken d'ar pardonioù,
Diarhen kaer diouz ar mintin,
D'ar chapel, skoachet en deliou,
Kreiz ar parkeier lin!

Noz-veilh 'bed ken, e-tal an tan,
D'ar goañv, p'en em astenn an noz;
'Vid meuli, dre varvailh, dre gan,
Breiziz an amzer goz.

Biken mui ne hallin kleved,
E sked al loar, da noz ar hann,
Tro-dro d'ar vein hir, korriked,
Oh ober koroll drant!

Ne gomzin ken da yez ken koz,
Kalet 'vel reier da aochou,
Breiz! kaerra korn 'vid ar repos
Dindan bolz an Neñvou!

Va bez, du-hont, vefe fichet
Gand klohigou ar brug digor,
Gwaskedet brao er pin krommet
Gand an aveliou mor.

Mez, keid e pado va buhez,
Va gwad ennon, keid e redo,
Dit, va Doue, va harantez,
Ha d'am Breiz, va mamm-vro...

Ha kollet oll en e zoñjou,
Ne welas ket e trohent hent.
'Maint digouezet tost da zoriou
Rom, eienenn ar Zent.

Eno, 'kreiz sklêrijenn, goulou,
Gwisket gand aour, ha diskabell,
Pobl kêr a-bez, gan kantikou,
Gand kroaz ha banniel.

Hag Inosant, er penn a-raog,
'Ne zorn brank koad 'leh koar me.
A-wel d'an oll, an tan a grog [len,
Er houlaouenn geleñn!

Pebez you, neuze, oe klevet!
Oll e yudont: — Greet an dibab!
Doue e-unan '-neus dibabet!
Inosant eo ar Pab!

Hag e-kreiz gwiskamañchou aour,
Goulou, kan, trompilh ha kleier,
Ar pennou braz, ar Breizad paour,
A dreuz oll henchou kêr.

Oll ez eont da Iliz-Veur Rom
Da renta gloar da Zoue
Hag o kana an Te Deum
'Tronont ar Pab neve.

VIII EVID ECHUI

Hag er mintin, d'an deiz varlerh:
— Paotred a Vreiz, bezit dineh!
Eme ar Pab, d'he zaou vignon,
Rag ni zo paotred a galon:
Te 'ray war-dro va loened,
Hag egile 'faouto keuneud.
An den a ziskouez gwir furnez
Pa vev izel, er baourentez.
Karom or stad, karom or Breiz!
Setu evidom gwella reiz!
Ra vo bennoz Doue warnoh
E bras en oh ene, puilhoh,
En ano an Tad Eternel,
Ar Mab hag ar Spered Santel!

Treboul, Ebrel 1939.

U. PERENNEZ.

Ar rod a dro

Gand Yann BREKILIEN

An dén koz a jomas eur roiad war dreuzou e lochenn, o selled ouz an heol a bigne a-uz d'ar gwez, e splannder ruz an oabl o tigousked. Euz ar hreh strouezeg ma oa savet al lochenn warnañ, ne weled nemed ar hoadou o kelhia an dremmwel, koadou glaz tener diouz tu ar huz-heol, koadou teñval ha distres en amboulou, a-ziaraog taniou an tarz-deiz. An dén koz a stouas e benn dirag ar gantenn hloriuz oh en em strinka da aloubi an neñv. Palv e zaouarn troet d'an neh, e salmas eur bedenn hir.

Gwisket e oa an dén koz gand eun doneg krohen arz nemetken, teuh he hreo, a leze noaz e zivreh hag e zivesker treut-eskern. E vleo gwenn a goueze war e ziskoaz hag e varo a oa meurdezuz, daoust dezañ da veza fuilh-tre. Krena a ree ar pedenner gand ar gozni hag ar wanded. Gwir eo n'e-noa debret abaoe diou loariad a-bez nemed frouez gouez gwriziennou. Dén ebéd n'e-noa digaset dezañ abaoe keid-all na kig gwadeg-beo, na pesked, na kouignou gwiniz. Netra. Netra euz ar pez a zo kalz gwelloc'h evid eur hoziad santel eged greun melchon-lann, lus ha gwriziennou bleun ar zakramant.

Echu gantañ e gan-salmou e lezas an dén koz e zell da gantreal trist war ar helhwelad tro-war-dro. Amañ he-doa e vuhez redet keid-all a oa ! Peb bodenn, peb geotenn, peb labous a anaveze. Gouzoud a ree gand piou e oa bet grêt peb douarenn, peb riboul, peb neiz. Mignoned e-noa e-touez ar mouilhi, an ebeulien-koad, ar hegined rouz ha glaz, ar honikled, lirzin, ar razed-koad, an demmed hag ar yourhed bividig, aonig an tamm anezo; eur bleiz memez e-noa roet dezañ e garantez. Mignoned e-noa e-touez an dero skoulmeg, an ivin glaz bepred, skeudenn ar beurbadelez, hag ar bezo koant ha mistr. Kalet e vefe kimiadi diouto.

Arvesti a reas an dén koz ouz al lochenn e-noa kousket enni e-pad ouspenn an hanter euz e vuhez, eur vuhez kalet, digenvez, roet oll d'ar bedenn ha d'ar binijenn, méd eur vuhez ma hortoze e-nije he hlozet evel m'e-noa he zremenet : enoret, doujet ha bevet gand tud ar Meuriad a-bez.

Al lochenn n'oa anezi nemed eur seurt turiadur-goz grêt gand pri ha raoskl, eun toull hebkén evid an nor, hag annezadur ebéd enni, nemed eur gouzer raden da wele hag, en eur horn, an traouigou roet

e prof gand tud ar Meuriad : kregin liesliou, koulourdrennou, chapelledou, mein-kurun. Flastra a reas an dén koz eun daeraouenn e korn e lagad. Para a reas goude-ze e zellou war ar peulvan a verke lein ar hreh. O heulia eul linenn a beulvanou, peb unan a-wel diouz an hini diagent, e helle tud ar geriadenn kavoud êz an hent evid dond beteg ar hreh sakr-mañ. Siwaz ! Dond ne reent mui.

An dén koz a gemeras e vaz hag a skoaz war eur wenodenn a yê don er hoad, o troïdella etre ar reier ha kefiou an dero hag ar fao kantvloaziad. Diskenn a reas beteg eur 'feunteun, e 'feunteun dezañ, a vouskane evitañ gand melkoni dindan ar spoue. Kemer a reas dour en e zaouarn hag ober an emwalhadennou lidel. Da houde, eh evas a-builh dour benniget, rag an eva a 'fazie e naon, ha pignad a reas en-dro war-zu lein ar hreh.

Pignad a reas, o c'hweza, beteg ar peulvan ha, goude beza soublet ouz ar pevar roud-avel, e kemeras penn an hent, rannet e galon gand ar glahar, war-zu ar peulvan nesa a verze dre eun ode e-kreiz ar hoad.

Tenn e oa evid ar hoziad kerzed e-mesk ar bodegi, ar vein hag an drein. Divoaziet e oa diouz bale re bell, hag e zivesker sempl n'e zougenn kén mad. Ar remm a lakee peb flach da veza poaniuz dezañ. Kammed ha kammed, koulskoude, ez ee war-raog, o poueza war e vaz. Pa veze re bistiguz e izili, en em leze da goueza en e goazer war eur roh bennag, o huanadi hag o kunuda.

Klask a ree petra a helle beza c'hoarvezet gand tud Kottobuta evid o herzel abaoe keid-all da zond d'e gavoud. Ma vije bet eur gwall-zarvoud bennag e kêr, n'oa ket heñ evid kredi n'e-nije ket unan bennag gellet tevoud er-maez ha diredeg beteg e lochenn.

Pa erruas e-harz ar peulvan kenta, e oa deut an oabl da veza koabret ha yén a ree. Kridienna a reas. Dao e oa dezañ kenderhel gand e hent, ha skei a reas war-zu an eil peulvan en em ziskoueze er peller war horre eun dorgenn brugeg, en tu all d'eur stank vraz. Perag e oa dezañ, hirio, da vond daved tud Kottobuta, pa oant deut davetañ beteg-hen? Perag?

Endra m'edo o heulia ribl ar stank, evid ober tro dezi, e krogas ar glao da goueza. Diêsoh a ze e teuas da veza e gerzed. E dreid a zanke e-barz ar fank, an dour a zivere war e zremm hag e remm e verie muioc'h eged biskoaz.

Poent e oa koulskoude dezañ soñjal en e lein. Ne gavas da zebri nemed struj raden, krosennou blod ha bouedenneg, méd pegen c'hwero ar blaz anezo ! Torret ne oe ket e naon ha broudet e sante e boull-galon en eur vond gand e hent. Glao a ree pa erruas d'an trede peulvan, war eur bantenn brouskoadek. Skuiz-marô e oa. Astenn a reas dindan brankou eur gistinenn ha, daoust d'ar glao, e chomas eur pennad en e hourvez, o voredi.

Sevel a reas pa zeuas an heol benniget a-benn da dreuzi skramm ar hoabr. Tommet eun draig, e valeas adarre, a-bilpazig, o pasaad seh a vare da vare hag o brosmolad dindan e vourrou. Evelse e tizas an uhelenn a beleh e weled Kottobuta astennet e kreiz an draonienn, war ribl e sterig.

Beo kann e oa ar geriadenn. Mogedi a ree toullou-avel an toennou, tregerni a ree an êr gand trouzou ar hovel hag, er prajou tro-war-dro, e weled labourerien-douar o troha ar 'foenn, tra ma tareve er parkeier trevadou ed hag heiz. Gwall-zarvoud ebed n'oa bet eno, spiz e oa.

Tier Kottobuta a oa bodet en-dro d'al leur-gêr, eleh m'edo an deuzerez-arem hag ar hovel, ti ar Penntiern ha Sal ar Huzul. Lod tier a oa savet war gelh, lod all a oa pevar-borneg; oll e oant grêt a vein seh hag a dilh, gand eun dcenn-golo, peuliu kizellet ha livet dirag an nor. An teuzerez-arem n'oa nemed eur stal-labour dindan an amzer, andoret hebkén gand eur goloenn lien douget gand postou koad. Eur hrohen ejen-meur a-led, kaset en-dro gand liez dén, a dal-veze da vegin. Dirag ti ar Penntiern eur peulvan sakr a zalbe da veva koun ar re varo. Klozet e oa ar geriadenn gand eur peulgae war dri zu ha gand ar ster war ar pevare. Er-mêz eus ar sklotur e weled parkeier, peurlehiou, enno saout, deñved ha moh, ha pelloh ar vered ha krommlehel santel al lidou-kañv.

Diskenn a reas ar penitiour koz war-zu ar vourh sioul. An hent a oa treset bremañ ha meinnet. E dreid noaz a enlouhe ar boultrenn hleb. Tremen a reas a-hed eur park ma oa ennañ o labourad tud e-noa anavezet a-vihanig. Klask a reas en e benn petra a hellfe goulenn diouto evid gouzoud petra oa kirieg da dud ar Meuriad hel leuskel en eun dilez ken truezuz all. Hogen al labourerien, ouz e verzoud, a droas kein, oh ober neuz da veza re zalbet gand o labour evid e weled, hag a yeas d'ar penn all d'ar park en eur guzad o dremmou ar muia ma hellent. An dén koz a zouezas, eur galonad anken dezañ, hag a glaskas en aner e petra e helle-heñ beza dizellezet. Pellobig e tremenas ebiou d'eur plah yaouank e-noa kelennet war wirioneziou ar feiz araog he Lidou-oad-krenn. Hi a zaludas anezañ, tres ar beh warni, hag a droas prim he 'fenn. Hogen ne 'felle ket dezañ he lezel da vond evel-se, heb diskleriadur.

— Petra, e houlennas, a hoarvez ganit, Bleun-Tro-Heol, beteg ma'z out ken diseven em heñver ?

— O... netra, Tad... netra.. ne 'felle ket din beza diseven...

— Gevier ! Petra a grog ennoh-c'hwi oll amañ ? Abaoe diou loariad n'eo pignet hini ebed d'am 'feniti. Penaoz n'ho-peus kén ezomm euz sikouriou ar Relijion ? Penaoz n'eus bet epad ar maread-se na ganidigeziou na dimeziou ? Penaoz n'eus ket bet tud varo da bedi evito ?

— Bez ez eus bet. Tad, gwir eo, méd kement-se ne zell ket ouzin. Goulennit digand ar re all.

Hag hi da vond kuit, tiz warni.

Ar penitiour a jomas abaf, rannet e galon. Gand beg e vaz e stokaz war eur gailhenn euz an hent, a yeas diwar ruilh da goueza e-barz ar zan.

Prestig goude eh erruas dirag dor ar gêr, eur porched braz toullt er peul-gae hag a veze serret bemnoz gand stalafiou pounner. Sabatuet e oe o weled en digor eun dén, iskiz ha spontuz e neuz, a ziskoueze beza oh ober ged. E-leh dougen eun doneg ler liesliou, evel oll dud ar Vro, e-noa lakeet an istrégell-mañ peb unan euz e zioubar en eur seurt gouin; war eur rokedenn brodet a aour hag a limestra e touge eur vantell hloan garrezennet-stank, ruz ha gwer; dizoare e oa e vleo : melen evel ar plouz e miz eost; en e zorn e oa eur goaf bir, dezañ eur beg dantet grêt gand eur metal dianav, glaz-gwenn ha lugernusoh eged na oa bet gwelet tra biskoaz gand dén. Teurel ar goaf war-dreuz a reas ar brezelour-mañ pa ginnigas an dén koz mond e-barz ar geoded, ha goulenn gand eur stumm-mouez estren :

— Petra emañ o klask dre amañ ?

— Amañ emañ em hêr, ma 'faotr, a respontas rog ar penitiour. Din-me eo kentoh da houlenn digand petra emañ oh ober e Kottobuta. Me a zo Deiwodrkos, beleg-meur ar vro-mañ.

Ar brezelour iskiz a zirollas da hoarzin.

— Ne ran forz gand beleg-meur ar vro-mañ ebed, emezañ. Tremenet eo da amzer, kabah. Ahanta ! Kuit ahann pe krog az-po ganin !

— Penaoz ? N'em-befe ket me frankiz da vond tre ?

— Daoust ha gouzoud a rez ar gêr-dremen ?

— Ergentaou n'oa ket ezomm gouzoud eur gêr-dremen evid mond ha dond e-leh ma plije deom.

— Kemmet eo an traou ! Kuit ahann em-eus laret !

Ar beleg-meur Deiwodrkos a reas tro, izel e benn, hag a gemeras en-dro penn an hent, evel eun emfñiver, heb gouzoud dezañ peleh edo o vond. A-daol trumm e klevas galv dezañ dre e ano. Sevel a reas e benn hag eur skeud a houwelas, o tamguzad a-dreñv eur bod kelvez. Mond ha reas di hag en em gavas gand Sterennig-Didrouz, gwreg Taro-an-Noz-Ru, eur vaouez fur ha deol he-doa bet atao damant outañ.

— Petra 'zo, Sterennig ? Gelloud a rez displega din ar pez a zo c'hoarvezet gand tud Kottobuta ?

— Cht ! Komzit izelloh, Tad. Ho kwelet em-eus o vreutaad gand ar gedour bragezet. Dievez braz e oah. N'ho-peus ket laret dezañ piou oh ?

— Eo 'vad ! Petra virje ?

— Gellet ho-pije beza paket ha taolet en toull-bah. N'ouzoh ket eta petra a zo darvezet gand or hêr reuzeudig ?

— Penaoz em-mije her hlevet ? Dén ebed n'e-neus komzet din pell ' zo.

— Diou loariad a zo, eo digouezet e Kottobuta eur strollad bihan a vrezelourien estren. « Kelted » a vez grêt anezo. Niveruz n'int ket — eun dournad hebkén — méd armet mad, gand armou kevrineg.

— Armou kevrineg ?

— Ya : goafou ha klezeier stard na harz ket outo on armou arem koz. Setu ar pezh a anver an Araokaad ! Stourmet o-deus kaloneg outo tud or Gward-Broad, méd en aner eveljust. Lazet eo bet ar re wella : Arz-Danteg, Mab-an-Dero, Kan-an-Hañv.

— Spontuz ! Ar geiz ' zo anezo ! Doue r'o 'fardono. Ha da waz ?

— Hemañ a zo bet prizoniet ha lezet eur roiad en eur hamp prizonidi. Disousardet avad eo bremañ, ha deut en-dro d'ar gêr.

— Gwell a ze.

— Trehet om bet eta ha taolet o-deus an alouberien warnom eur vestroniezh tenn. Lodennet eo deom ar boued hag ar zoudarded vragezet a vev diwar or houst. Spiet om ha n'on-eus ket gwir da vond-dond en or giz. Setu perag n'eo eet dén ebéd d'ho kweled. Keulfe a zo bemnoz. Brigadennet eo ar baotred yaouank en eur « Ser-vich Keodedel Réd ». Tud a zo bet toullbahet dre veza gwall-gomzet euz ar renadur, pe dre veza bet re feizeg. Rag heskinet eo ar Relijion. Lazet eo bet an danvezioù-beleien, Bann-Heol hag Enor-an-Tantad.

— Doue a vadelez !

Ar vaouez a izelaas hoaz he mouez.

— An alouberien, emezi, a 'fell dezo on trei war o feiz euzuz, war o falskredennou. Eun druez eo gweled kemend-all !

— Spi am-eus e labouront en aner. N'hell ket beza reneaded e-touez Kottobutaiz.

Sterennig-Didrouz a stouas he 'fenn.

— Grêt mad eo ganto o bruderez. Entanet eo an dud yaouank gand ar gredenn nevez. Ha liez hini euz ar re goz, or Penntiern hag all, a gav poelleg kenober gand an Alouber. Kalz tud evelvoud a zo koulskoude hag a jom feal da 'feiz on Tadou Koz. Méd dao eo lakaad evez... Merket e vefem ma 'z afem beteg ho peniti. Ouspenn-ze on-oa aon ma vefe diskouezet evelse d'an enebour peleh emaoñ o chom. Méd peogwir emaoñ hirio, e hellfeh marteze lida e kuz an aberz santel evid ho teñved leal.

Ar beleg koz a galonekaas en-dro, eun drañg.

— Goùd a rit na houlenan ket gwellob. Hogen penaoz...

— A-benn warhoaz vintin e kemenno ma 'fried d'ar Gward ema o vond gand eur strollad labourerien ha labourerezed da geuneuta er hoad. Neuze e hellim en em voda en-dro deoh en eur frankizenn zakr.

— Mad-tre. Méd etretant petra a rin ? Re goz ha re skuiz on evid ober endro an hent beteg ma lochenn ha distrei dre amañ a-benn warhoaz. N'on ket kennebeud evid tremen an nozvez dindan an amzer.

Eur prederig a reas Sterennig.

— Mad. Me a zo o vond da zigas deoh peb tra evid ho treuzwiska e marhadour-red a Vro Fenikia. Evelse e helloh goulenn mond e-barz ar geoded ha me ho resevo em zi.

Er hiz-se e oe grêt. E ti Sterennig en em gavas Deiwodrkos, treuswisket e marhadour-red. Taro-an-Noz-Ru, ar penn-tiegez, a wallbede gand an alouberien o-doa kaset ar vro d'ar sklavezh ha d'an astud : « War an noaz om lakeet gand an amprevaned villiget-se ! » Hogen Aezenn-Serr-Noz, e verb hena a vreutaas outañ :

— Eur gwarnizonig evel o hini n'eo ket kalz a dra deom da voueta, ha diwallet om bremañ gantañ. Biken ne vo mui a vrezel, ken dañjeruz eo an armou a hirio, degaset deom gand ar Gelted-se.

— Peoh ! a houdrouzas he zad. Gouzoud mad a reom e vez grêt lez dit gand unan eus al loened fall-ze.

— N'eo ket Katuvokanos eul loen fall, ma zad. Eur paotr hael hag uhel e galon ne lavaran ket.

— An oll zoudardet-se a zo loened fall. Rivinet om ganto. Bremañ eo kollet ol leh war ar marhad etrevroadel : on oberiataerez-arem n'eus ket a werz kén dezañ.

— Diskaret eo an arem gand an houarn. N'hell ket beza tamallet dezo. An Araokaad eo.

— An Araokaad... an Araokaad... An Araokaad eo ivez, marteze, pa'z o-deus gwasket ene or gouenn.

— E waska n'o-deus ket grêt. Digaset o-deus deom eun dra bennag ouspenn, méd stad a reont euz or zevenadur, or yez, or...

— Evid ol lakaad gwellob da labourad evito ! a strinkas Sterennig, c'hwero an tamm outi.

— A hell beza, méd n'eus forz. Kroget o-deus da gomz or yez — ha ni, ar re yaouank, da gomz o hini. O beleg, an Drouiz, or helenn war o 'frederouriez hag o doueoniez, méd a lid goueliou an azeulerez nevez el lehiou ha da geñver an amzeriadou ma oa lidet or goueliou koz. Desket e-neus ganeom enori an doueier, ar vein, an Anaon...

Moueziou ar vugale all a harmas :

— Atao e chomim feal da 'feiz on Tadou koz!

— Ha te, Aezenn ? a houlennas Deiwodrkos.

Aezenn-Serr-Noz en em roas da ouela :

— Kared a ran a-greiz kalon relijion ma bugaleaj. Kaer eo houmañ ha madoberuz. Méd dedennuz-tre eo ivez hini ar Gelted, ha n'ouzon ket mui... N'ouzon ket... Peleh ema ar wirionez ?

Mantret e oa ar beleg koz. Penaoz a helle merh Sterennig, ken deol ha doujuz beteg-hen, lared traou er mod-se ? En em drechala a reas :

— Daoust hag ez eus kalz tud e Kottobuta hag a zo eet e belbi evel houmañ ?

— Siwaz ! a huanadas Taro-an-Noz-Ru.

— Ped dén a deuo a-benn warhoaz d'an aberz lidel a ginnigin ? Sterennig a respontas mezeg :

— Eun ugent bennag o-deus prometet din mond.

Eul lamm a reas Deiwodrkos.

— Hebkén ? Mantruz eo ! Dao eo din lared o 'fegement da oll drubarded ar geriadenn-mañ.

— Arabad deoh hen ober, eme an Taro, rag paket e vefeh abarz pell gand ar re-vragezet ha lakeet d'ar maro : o Ziern e-neus touet stourm didrugar ouz or relijion — lared a ra heñ « ouz or briz-kredennou ».

— Kalz ne vern mui din ma buhez. Da betra e-nije talvezet din beza he hinniget evid ma Doue, beza bevet garo oh ober pinienn, oh en em wana noz ha deiz epad ouspenn hanter kant vloaz, ma n'em-bije ket hebkén gelllet derhel ar feiz e kalon ma 'fobl ? Kentoh ha gweled, war ziskar ma oad, distrujet oll ar pezh am-eus bevet evitañ, e vefe gwell ganin mervel !

En em deurel er-mêz e-noa grêt dija ar beleg koz, diwisket gantañ e zilhad marhadour. Lakaad a ree da dregerni an taboulin arem staget ouz dor Sal ar Huzul. An oll dud euz ar geriadenn a ziredas hag en em vodas, sebezet, dirazañ.

— Ma breudeur ker, a yudas e vouez groilh, evid ar wech diweza, emichañs, e prezegennan deoh. Desket em-eus deoh gwechall oll gwirioneziou ar Feiz, diwar an diskulierez resevet gand on Tadou. Penaoz, eta, ho-peus gelllet digeri ho tiskouarn d'ar falskredennou tra m'edo ganeoh ar wirionez, ar wirionez prouet dre desteniou n'heller ket diarbenn ?

Dén ebed ne reas eur vann. Klevet o-doa ivez Drouiz ar Gelted o komz diwar an diskulierez resevet gand o Zadou, o laret edo

gantañ ar wirionez prouet dre desteniou diarvar, o skourjeza ar falskredennou.

Ton ar prezegenner a droas klemmvanuz.

— Ho karet em-eus epad ma buhez a-bez ha c'hwi am lezfe da vervel dilezet ha glaharet ? Ma dilezel a rafeh ha dilezel ho Toueou muia-karet, ho Krouer, mibien dianaoudeg ma vefeh ! Nann, n'on ket evid kredi e vefeh-c'hwi, ma bugaligou, ken displeal e-keñver spered ho Tadou Koz...

Daou zoudard a dreuzas an engroez.

— Dalh da latenn, kabah ! Ha deus ganeom da ziskleria da vennad dirag an Tiern.

— N'ez in ket. Ma lazit eleh m'emaon, ma plij ganeoh. Ma lazit dioustu, rag re vevet em-eus. Ne lazoh ket, koulskoude, ar feiz a varvan eviti. Peurbaduz eo.

— War a gredez ! Méd ar rod a dro.

Daoulagad ar penitiour koz a skedas trumm. War-zu an neñv e savas e zivreh :

— Ar rod a dro, ya. En em geja a raio ho teskadurez hag or hredennou koz, ho kouenn melen he bleo hag or gouenn zantel, ho yez hag or yez. Méd eun deiz a deuo ma tegouezo amañ tud all gand kredennou all hag eur yez all, hag evelse e vo adarre hag adarre keit ha ma pado ar bed. Bepred e troio ar rod. Skoñt, bremañ. Dare on da zigemer ar Maro benniget.

Yann BREKILIEN.

Teñzor lenn Meilh-ar-Roh

Hervez tud Sant-Toz ez eus eur varrikennad aour hag arhant e goulid lenn Meilh-ar-Roh, du-ze er stankenn don ha glaz a zo izelloh evid ar roz uhel ha plomm e-leh m'ema chapel vihan an Intron Varia. Ha, war a leveront, eo diwallet an teñzor dispar-se gand eur mell silienn, hir meurbed ha kalz tevoh evid ma morzed.

Gand piou 'ta hag abaoe pe da vare eo bet kuzet an teñzor-se eno a zirag daoulagad an dud? N'em-eus kavet kristen ganet ebed d'hen diskleria, hag ar meilher koz a oa kent o terhel ar veilh n'eo ket bet gouest, kennebeud, da roi din netra da houzoud diwar-benn kement-se.

Eur mare a zo bet, a-rôg ma oa grêt an hent braz a dremen brema etre ar veilh hag ar roz ha ma tiskenne homa, krenn war eeun, beteg al lenn, emede Primel Gaonah, eur merourig berr ar stal gantañ, o terhel eun tammig douar e Kêrwern, war-hed nebeud djouez chapel ar Roh. Hag eun deiz, war-bouez klevoud ano dalhmad euz an teñzor burzuduz, e tiwanas eur zoñj iskiz en e benn.

Diêz e oa beva ha, rag-se, resta arhant en e dammig atant ha, pa veze deuet *gouel an dudchentil paour*, e fazie bewech eun nebeud skouejou e yalh Primel evid kaoud peadra da gas e ouel-mikêl d'ar perhenn. Setu ma ree hema beh d'e verour ha ma hourdrouze, beb bloaz, klask an urcher war e dro da lakaad gwerza unan euz e zaou ejenn evid kaoud e zigoll.

N'e-nevoa Primel netra a dalvoudegez nemed eur houblad ejenned kaer ha mad da labourad, ha lorb a oa ennañ ganto. Setu e oll zanvez hag eur rann-galon a vije bet deñ koll hini pe hini aneo. Ha penôz e-nije grêt evid labourad e zouar, ma vije bet didruez a-walh ar mestr da denna unan aneo digantañ?

Ar bloaz-se, efa, dre ma tostae miz gwengolo, e tiêsa da spe-red Primel, rag platob evid biskoaz e oa e yalh. Heb ehan e ruilhe hag e tiruilhe soñjou trubuilhuz dre e benn, ankeniet gand an neh rag an amzer da zond dre an diouer a arhant. Hogen, goude beza prederiet e-pad pell, e teuas eñvor deñ euz teñzor lenn Meilh-ar-Roh. « Ya! » emeañ outañ e-unan, « perag ne glaskfen ket an tu da bes-keta ar varrikennad aour hag arhant-se a zo kuzet du-ze el lagenn? »

Ne jomas ket hirroh da dermal ha, goude beza sternet e zaou ejenn ouz ar harr, e yeas ganto etremeg ar veilh, eun tammig enkreuz en e galon. Dre ma kerze gand an hent e pede ar Werhez Vari hag e lavare beb eur mare: « Ma teuan a-benn da denna an teñzor euz an dour hag ar vouilhenn, e roin an hanter aneañ da Intron Varia ar Roh! » Ha, leun a fiziañs, e tigouezas e-kichen al lenn, e-leh ma stagas e loned ouz eur vodenn haleg.

Heb chom da yari na da varhata, e tiwiskas e zilhad ha, gand eur mell keuneudenn en e zorn, e tiskennas e-barz an dour. War evez emede ha mad a reas rag ne zaleas ket ar zillienn da zilam-mad warnañ euz a-douesk ar pri, o klask e zanta gand he genou ledan ha leun a zent hir ha stank, ken lemm hag aotennou.

Kerkent e lakeas Primel sin ar groaz en e gerbenn hag, e-ser darhoi eur mell taol war benn ar zilienn, e lavaras: « Dre halloud Intron Varia ar Roh, ra vo friket an amprevan-ma! » Ne oe ket dao deñ skoï diou wech; tra-walh e oa bet ar mestaol he-devoa tapet evid he divella hag he lakaad da reuda. « Ema lipet ganti he loa! » eme Primel neuze, fougeit deñ, en eur gerzed da greiz al lenn.

Eno, dindan e dreid, e kavas eun dra galet hag e-nevoa doare da denna d'eur fustailh. Hag heñ da bloma war e benn en dour, don-braz en takad-se. Tapa a reas peg er pez a yeas e zaouarn warnañ, da lavared euz eur varrikenn, hag, o burzud! daoust da homa da veza pounner meurbed, e oe gouest d'he zamma heb ober muioh a veh evid ma vije bet eur vriad plouz.

P'en em gavas Primel war ribl al lenn, e taolas e deñzor war ar haled hag e wiskas e zilhad. Leun-barr e oa e galon gand al levenez ha ne bade ket gand ar blijadur; deuet e oa gantañ e daol da vad. Heb an disterra diêzamant ha souezet-maro o weled pegement a nerz a oa deuet deñ, e kargas ar varrikenn er harr. Goude e lavaras yao d'e zaou ejenn hag heñ ganto war-zu ar grehenn a zo a-uh d'al lenn. Mond a ree an daou lôn war o fouezig, heb ober nemeur a veh, ken êz ha ma vije bet gollo ar harr a oa d'o heul.

War a lavare ar re goz gwechall:

*Ar paour, pa binvidika,
Gand an diaoul a ya.*

Techet on da gredi eo gwir-bater kement-se rag, dre ma tostae Primel ouz lein ar roz, e teue euz e henou komzou sebezus. « Kreñvig a-walh, a gredan », emeañ, « am-eus prometet d'an Intron Varia evid he lod, rag gand piou eo bet grêt al labour nemed ganin-me? Me ' zoñj p'am-bo profet dei er plad eul louiz aour a ugent lur pe zaou, da zeiz he 'fardon, he-devo bet he digoll diganin! »

Siouaz! ne oa ket echu gantañ distaga ar homzou dizakr ha dizanaoudeg-se, ma welas e garr o tidala hag ar varrikenn bounner o vond a-ruilhous, mell-divell, d'an traon gand ar roz. Dre ma

tiskenne etremeg ar stankenn, e stirliñke laouen enni ar peziou aour hag arbant, e-giz ma vijent bet oh ober goap euz ar paour kêz Primel, mantret e galon ha kouezet ar zabatur warnañ dirag ar gwall-zarvoud.

Koueza a reas war he 'fenn e-barz al lenn, oh ober eun trouz spontuz hag o lakaad dour ha lagenn da strinka a beb tu. Donbraz e sankas er goulid, e-touesk ar pri hag al lebid, e-leh ma tiskennas ive d'he heul ar zilienn vraz, divorfilet war an taol, hag a zo eno abaoe, war a leverer, o tiwall an teñzor priziuz a zo chomet enni.

Hag, allas! ar bloaz-se e teuas an urcher da lakaad foar war stal Primel gêz, reuzeudig ha paour-raz hag o keuzia, en aner, d'ar gwall-fazi e-nevoa grêt o nah ouz an Intron Varia ar pezh a dlee dei.

Yun ar Halvez

P'en em gavas, ar vintinvez-se, ar hemener er Gêrnevez, emede ar wreg oh aoza lein. Lakeet he-devoa krampouez seh e-barz ar skudilli ha soubenn da domma war an tan.

« Salud deoh, Gaid », eme ar hemener, chichant-tre deañ, en eur zond dreist an treujou.

— Ha deoh, Yann », a respontas ar vaouez yaouank. « N'emaoh ket diwezad o tond d'ho tevez hirio. Ha kouezet oh bet euz ho kwele 'ta pa welan abanoh war-zao ken a-bred-ma? »

Evel kalz euz ar gemenerien, e oa Yann eun den dieguz, troet da zerhel a-dreñv hag, aliesoh evid e dro, da ziweza o tond d'e zevez. Ne blijas ket farserez Gaid deañ hag e klaskas trei ar gaoz.

« Ahanta! » emeañ, war-lerh eun taol-lagad d'ar peder skudell a oa war an daol-voued, « 'm-eus aon ne vin ket ma-unan o tevezia ama hirio! Pa teuan davetoh ne vez nemed teir skudell war an daol: re dud an ti-ma ha ma hini-me. Petra 'zo a nevez ama hirio 'ta? »

Ne oa ket koz-dimezet Gaid ha Tin, he gwaz, ha dizher e oant c'hoaz. O-daou, heb mevel na matez, e labourent o ziegez, eun atant vihan aneañ.

« Herve an Ti-Gwenn », eme Haid, « a zo bet goulennet gand Tin evid ober eur hastell-karr nevez ha lavaret e-neus e teuje ar mintin-ma. E skudell eo a zo aze, war an daol e-kichen on re-ni. »

Eun diaoul a zen e oa ar hemener, e zamm a natur fall en e gorv. Pa helle ober droug, n'eo ket vad a ree. Hag ouspenn, kasoni e-nevoa ouz ar halvez, n'ouzon ket perag mad a-walh.

« Ma! Gaid kêz », eme ar hemener d'ar wreg, « ne dalv ket ar boan deoh aoza lein da Herve, rag ne zebro ket eur begad ar mintin-ma. N'ouzit ket 'ta ema gouel Sant Jozef a-benn arhoaz? Derhent gouel o zant patron, e ra ar gilvizien yun ha vijil ha boazet eo Herve da heulia striz al lezenn-ze. »

Yaouank e oa Gaid, berr he skiant-prenet ha troet da lonka kement gaou a veze pasket dei. Ma oa bet e breuriez Bugale Mari pa oa plah yaouank, ne oa ket ano c'hoaz d'he lakaad e hini Sant Tomaz, rag ken kredig e oa ha Yann Zeiteg e-unan.

« Fei 'vad! » emei, « bemdez e vezer o teski eun dra bennag nevez. Biskoaz n'em-oa klevet ano euz kement-se. »

**

Nebeud amzer goude e tigoetze Herve e kêr. E leh mond war-
eun d'an ti, e troas er harrdi, evel boaz, d'ober eur hrogad labour da
hortoz mare lein. Peurlies a ne veze ket pell o teport, rag dizale e
teue an ozab pe ar wreg da gemenn deñ e veze ar pred war an daol.

Ar wech-ma, avad, kaer e-nevoe gedal, ne dostaas den hag e
oe laosket da zisvoueda e-pad ar mintin. Eun tammig kas a oa ennañ
hag e lope dizamant war ar hoad, o tabahad ar muia ma belle, da roi
da houzoud da dud an ti e oa mall gantañ kaoud enn dra bennag
da zibri.

War-dro unneg eur e teuas ar wreg d'ar harrdi. « Eun tamm
rubanou ha skolpou », emei, « am-eus ezomm evid ober tan da boazad
merenn. »

— Petra ' lirit? » a respontas Herve, sebezet ha feuket, « abaoe
pe da vare eo deuet ar hiz, er gêr-ma, d'aoza merenn a-barz mond
da lein? »

— O! lein on-eus debret pell ' zo », eme Haid, « ha, paneve
d'ar hemener, em-bije lakeet abanoh, marteze, d'ober eur pehed mar-
vel. Ho skudellad voued a oa du-ze war an daol o hortoz abanoh,
ar mintin-ma. Med Yann ar Veskenn e-neus bet skiant a-walh da roi
din da houzoud e rank ar gilvizien ober yun ha vijil derhent goul
Sant Jozef ».

Herve, o klevoud kement-se, a jomas e henou war nav eur. Droug
ruz a oa ennañ da heul an dro-gamm-se c'hoariet deñ gand ar heme-
ner. Med gand aon e vije grêt goap aneañ, e kavas gwelloc'h kuzad war
e gasoni.

« A! Yann a zo deuet d'ober eun devez-gwriad deoh hirio? »
eme ar halvez. « Mad, mad... O! eur hemener gouest hag eun den
a zoare eo Yann, avad, daoust d'an oll draou diod a gonter diwar
e benn... »

— Traou diod? » a houlennas Gaid, savet he skouarn ganti.

— Ya! diotachou, kaoziou gwrahidi... Muioh a deotou fall
'vid a re vad a zo war an douar-ma e-touesk an dud, plah kêz! »

— Ha petra 'ta a gonter diwar-benn Yann? »

— O! nebeud a dra, nebeud a dra... Eun tammig eo ran gand
ar merhed, c'hwi ' oar... »

— Chê! biskoaz kemend-all! N'em-oa ket klevet c'hoaz eur seurt
tra! Ne dalv ket kaoud fiziañs e gwazed ' zo, war a welan. Fei!
brao 'maon ganti avad! N'eus nemedon en ti gand an hailhon-
ze! Tin a zo oh arad, war an teil, er Zaouleg Kerh. Petra ' rin ma
teu ar hemener-laou-ze da glask trabaz ouzin? »

— O! » eme ar halvez, « n'ho-po nemed beza war evez.
War am-eus klevet n'eo ket diêz gouzoud pe da vare e vez da zisfi-
zioud outañ. Pa weloh ar hemener o lammad gand e zent ouz e neu-
denn hag o strilha e benn, e vo dao deoh diwall. Neuze, heb chom da
dermal, bannit eur geuneudenn ouz e benn hag e wellay deñ ker-
kent ».

**

Distroi a reas Gaid d'an ti gand he zavañcherad rubanou ha
skolpou. E-ser meska he jidouarnad youd kerh, e taole a-gorn sel-
lou truilheg ouz ar hemener. Hema a oa e-kreiz an daol-voued o pla-
dorena war e dorçenn. Buan e rede e nadoz ha, war e vuzell dano,
e pare eur mousc'hoarz treñk ha goapauz. C'hoariet e-nevpa an « troad
leue » d'ar halvez, brao ha kempenn, ar pez a ree deñ beza laouen
ha seder.

« Pelloh ' zo deuet naon da Herve », emeañ, « Bremaig, moar-
vad, ne jomo ket lobet ar pouloud e toull e houzoug ». Hag, e-ser
distaga ar homzou-ze, — hign! hagn! —, e lamme gand e zent ouz
e neudenn, o klask he zroha a-rez ar mezer. Eun neudenn vad a oa
gantañ en e nadoz pe, marteze, e oa laoskaet e zent en e henou. An
taol kenta e fazias warni hag heñ neuze, heb diskrogi diouti, da strilha
e benn en eur charoñsa e zent.

Med Gaid a oa war evez: « A! merhetaer an diaoul », emei
d'ar hemener, « n'ho-peus ket e vez 'ta? C'hwi, kennebeud, ne jomo
ket ar pouloud da stoha ho kourlañchenn! Gortozit ma vezoh dizonet
diouz ho tech fall! » Hag e tistagas gantañ eur mell taol krog-youd
e-kreiz e fas, ken a striñke an toaz tomm a beb tu.

« Forz ma buhez! forz ma buhez! » a harme ar hemener paour.
« Homa eo kollet he skiant-vad ganti! ». Hag e tilammas diwar
an daol da glask tenna ar hrog-youd digand ar vaouez penfollet.

« Loustoñ koz! » emei adarre o rasailhad gwasoh-waz, « ha
n'ho-peus ket bet a-walh? Setu ama eun tamm-all evidoh! » Hag e
lope dizamant war chouk Yann ar Veskenn.

Ne jomas ket pôtr an nadoz da goza en ti, e hellit kredi. Ne
oe ket pell o tapa hed e har hag o skara kuit. D'an daoulamm ruz
e treuzas ar porz, Gaid war he lerh gand he hrog-youd.

Pa yajont e-biou d'ar harrdi, e teuas ar halvez da hopal d'ar
wreg. « Hep! Gaid », emeañ, « ma rank ar gilvizien ober yun derhent
goul Sant Josef, n'eo ket dao deo, evelato, kaoud youd lesket
d'o merenn! Arabad deoh leuskel ar youd da zuilha!!! »

Eul laeradenn iskiz

Tomm ha digoumoul e oa an amzer hag a beb tu, dindan heol benniget an Aotrou Doue, e weled ar bleuniou en o haerra hag e kleved al lapoused o c'houtellad hag o kana laouen. War-bed tregont pe zaou-ugent kammed diouz tal ti Yann Zeiteg, war eur hleuz ledan ha peuz-uhel, e oa eun tamm brao a wezenn-gerez enni, a-zribilh, melladou barbiolez ken druz ha ken kaer ma oa eun dudi selled outo.

A-greiz dond d'e bred e chomas Yann harpet dirag e wezenn-gerez hag e teuas an dour en e henou: « N'int ket ao a-walh tre c'hoaz », emean outañ e-unan. « Hogen dao ' vo din beza aketuz da deurel evez outo pe, a-hend-all, e vint laeret diwar ma houst. Dislañgourien a-walh ' zo dre ama ha ne vefent ket seizdaletoh evid ober beb a govad ganto. N'eo ket heb digarez e oa deuet, deh diweza, da droidellad endro d'ar gêr-ma, Laouig Lagad-Karn ha Perig Lard-Ki, an daou lampon-ze hag a blij gwelloc'h deo beva diwar goust o nesa oh ober netra evid staga o horv d'al labour. Bezom war evez, pôtr koz! Bezom war evez! »

**

Ti Yann, eun ti bihan troet d'ar hreizteiz, daou brenestr hag eun nor warnañ hepken, a oa savet e-barz ar park e-leh m'emedede ar wezenn-gerez. War beb hini euz ar prenestrou e oa barinier houarn da vired ouz al laer da zond e-barz, rag eun den aonig ha douetig e oa Yann. Ouz unan euz taliou an ti emede kraou ar gazeg koz hag an teir buob. Hogen, abaoe ma oa tomm an amzer, e veze laosket ar gazeg er-mêz noz-deiz. « Kuit dei da veza debret gand ar helien », evel ma lavare Yann.

Diouz an noz, a-rôg mond d'e wele, e teuas eur zoñj deañ: « Pounner-gleo on eet abaoe eur pennad », emean da Gatell Beg-Treñk, e wreg, « ha ne glevfen netra ma teufe al laer d'ar hignez. C'hwî, Katell, ho-peus eur skouarn dano ha ne vez ket kalz ar housked ganeoh. Rag-se bezit war evez ha, ma tigouez deoh klevoud eun trouz bennag, dihunit abanon kerent hag e yain war-dro al laer. »

**

Sklêr e oa an noz rag kann-loar a oa. War-dro hanter-noz eb en em gavas Laouig Lagad-Karn ha Perig Lard-Ki, an daou lampon, e-tal ar wezenn-gerez, eur mell beh melchen ganto.

Ken didrouz hag an Ankou pa vez o kas tud d'ar Bed-All, e yeas Perig da loch ar harr e-leh ma kavas eur 'fun bir. Setu heñ goude o staga eur penn anei ouz dorn klikek dor an ti, e-keid ha ma teue Laouig a-benn da dapa ar gazeg koz dre he moue ha d'he digas gantañ d'e heul. Neuze e oe staget ar penn-all d'ar 'fun ouz lost hir ar gazeg ha taolet ar beh melchen da homa da zibri. Red eo lavared e oa bet lakeet ar 'fun war stenn ha grêt kement tra ken sioul ma ne glevas Katell na Yann seurt ebed.

Pa oe renket an traou ganto hervez o zoñj, e pignas an daou lakepot er wezenn-gerez hag, heb aon neuze da veza klevet, e krogjont da dorri bodou diouti ha da zibri barbiolez kement ha ma hellent...

Hogen, e-kreiz he housk, e oe dihunit Katell gand eun trouz bennag. Dioustu e halvas Yann hag hema a lammas raktal er-mêz euz e wele da wiska e vragou. Hag heñ da doull ar heuneudeg da dapa eur mell keuneudenn, gand ar menoz da vazata al laer ma hellje tостаad outañ. Goude, ker prim ha tra, e redas da zibrenna an nor evid mond er porz. Med, tra sebezuz! kerent ha ma oe gorzigoret, setu hi o vond en-dro d'he 'flas, ken herr ha gand kement a drouz ma kredas da Yann e oa daou pe dri den er-mêz o chacha warni. « Petra 'n diaoul a hoarvez gand an nor-ma? » eme Yann, droug ruz ennañ. Klask a reas he digori adarre, med en aner, rag ken liez gwech ma teue a-benn d'he digloza diouz he 'fostou, e veze diframmet kerent diouz e zaouarn ha sarret klosoh evid biskoaz gand eun nerz iskiz. « Ma! » eme Yann, « n'eus ket da lavared, sorset e rank beza an nor daonet-ma! »

O kredi e oa unan-bennag o chacha war he lost da vired outi da zibri he melchen, e ree beh ar gazeg koz, evel just, da vond a-rôg gand aon da goll ar pred mad a oa dirazi. Hogen ne gomprenas ar paour kêz Yann petra a oa c'hoarvezet nemed pa yeas beteg unan euz ar prenestrou ha pa welas na hellje ket mond er-mêz e-keid ha ma chomje eun tamm boued dirag e lôn.

E-pad an amzer-se emede an daou lampon oh ober, da vad ha war o mad-ober, eur hovad kerez er wezenn hag o leunia o fanerou e-ser goapaad diwar goust Yan Zeiteg. A-rôg ma oe deuet ar mintin e oa bet skarzet ar wezennad barbiolez, e-keid ha m'emedede Yann ha Katell, savet ive euz he gwele, o charoñsa o dent gand an droug a oa enno hag o pilpasa dre an ti heb gelloud mond er-mêz.

Pa oe deuet ar mintin ha debret he beh melchen gand ar gazeg, e helljont digori an nor hag e oent mantret o weled na jome kerezenn ebed koulz lavared war-leth al laeron. Ha, gwasa pezh ' zo, ne ouient ket ouz piou dougen klemm peogwir n'o-devoa dizaouzan ebed euz ar re-ma.

Yeun AR GOW.

Brehoneg Bro-Guéned

Sonerion koh on bro

En daou vreur Flejaou

ged Loeiz HERRIEU

A Gaodan éh oent genedig, ag er hornad-sé deit goudé de voud parréz Lann-er-Stér, étal En Oriant.

Tud Lann-er-Stér, daoust dehé boud labourerion-porh pé michérierion, a zo chomet pell ha hir staget doh er brehoneg ha doh modeù er vro. Evel en oll Gwénédez-lzel é karent er horoll, ha gelloud a hrér lavared éma bet en daou vreur Fléjaou é-mesk er ré é-neus douget o henvroiz de chomel féal d'o horolleù beteg treuzeù en xx^{ed} kantved.

A gentañ, p'em-eus mé o anaùet, boud 'zo ohpenn tri-ugent vlé, éh oent artizanted é voned d'o deùehieù, a gér de gér, ar er mēzieù, é Kaodan hag ér parrézieù ag en dro. Ar er hoed é labourerent : dornet mad a oent ha heb doujein é helleh goulenn geté obér deoh kement tra a hrér ged koed : plancheris, dergei, rod, karr, karrigell, fust, h.h... Kizellein a hrent eùé, a pe gavent en tu. Ar un dro é sonent ged er bombard hag er binieù ér festeù ha pardonieù.

Soñj em-eus, a pe oen bihan, é té Fransoé de gerlein barrikeù d'on ti-ni, hag é vezé é labourad dindan ur harrdi ar er leuré, ni bugaléigeù tolpet én dro dehoñ é selaou doh é fidorienneù. Meur a wéh, a pe hrem en dall dehoñ, é tapé daou pé tri ahanom hag on diskenné én ur fust didalet. Prim, é laké en tal én é leh, ha ni de vléjal én téoélded. Neuzé é lavaré dem doned ér mēz dré en toull-bont : allaz ! béh ma treméné on dorn drézoñ ! A pe gavé getoñ or-bezé bléjet on goalh, é lamé en tal hag on tenné ér mēz, ru on bougenneù ged en dareù. Moned én ur varrikenn de zaou pé tri blé a oé ével diskenn brema, pen dom deit de voud koh, én ur puns don !

Bombardér a oé Fransoé ha biniaouér Matelin Fléjaou. Med anehé o-daou, ged Fransoé éh é er maout évid doujein en dud d'obér bourrapted. Hardihoh éged é vreur, sontil, ur spered lemm dehoñ, goapour un tammig, a pe ne soné ket, é blijadur a oé lavar-red farseù, ribardenneù, penneù sonenneù. Evid riotal n'é-noé ket é bar ha goa d'en hané a glaské « hwenn én é chaocheù » él ma lavarér. Prest é stagé un tamm doh é atahinour, hag é troé er hoarherion a du getoñ-éan.

Ohpenn ma tislégé é draou én ur mod fentuz, é houié obér er jestreù pé en ardeù a zégasé soñj deoh ag en hané a gomzé anehoñ. Seul gweh ma tislégé sorbienn en débrouer-ueiù a Bloué hag a oé é yeg a dreuz, é tarhé en dud de hoarhed é hwéled beg Fransoé eùé é voned d'un tu, hag haval a vezé ged en dén gwéled Gwidéliz (lesanùet « Yahohed ») angoulet ged o roñsed vraz, doh en em gaved ar en hent hag é houlen unan ged en arall, ged taol-mouéh Gwidel : « Yah oh ? — Tammigeù ; na hwi ? — Nag er marh ? »

Bihannoh a oé Fransoé éged é vreur, med paket ag er mod koh, kaloneg ha hir é anal : fonnaploh é té er berr-anal d'er gorollerion éged d'er sonér.

Matelin ne oé ket ken lirin na ken larour-kaer. Med ur biniaouér ag en dibab a oé. Ne oé nemetoñ hag a hellé heuli é vreur, ken dihaod én é donieù ével ma oé én é gomzeù. A pe gerhé é anchenn a féson, Fransoé a zidonié forh éz hag a hadé taoleù-tead skañù én tonieù anaùet, ken ne grédé genoh kleved un ton neùé, med heb lakaad er gorollerion d'en em dremotein (fari) ged paz en dañ.

Ar en dachenn-sé éh oé dispar sonerion er rummad koh. Silein a hrent o éné én anchenn hag haval a oé, doh o selaou, éh oé er bombard un ad-ézél reit dehé de zivêzein o ijin...

Ged er vreuder Fléjaou é helleh boud disoursi a-féd en tonieù hag er hourz d'o hoari épad ur fest. Boud o-doé un ton évid dégemér er présanteù, rérall évid kerhed, évid moned doh taol, évid er soubenn, er rost, er hatèu, er soubenn-lèh, hh... Goud a hrent bebeilein er horolleù ged er bal, en hanter-tro hag ur « lariden » bennag, daousto de honna boud kentoh gloèu neuzé, fresk arriù ma oé ag er vro gallaou. En ur gér, tud a vichér a oent ha duah énni.

A pe éhanent a son, é krogent de lavaret kaer, de ganal. Ken stank a oé o sorbienné hag o sonenneù ével o zonieù. Péhed é n'é-neus gellat hañni dastumm, kurz eroalh, o sonenneù hag o sorbienné. Evid en tonieù bombard, kaset em-oé Moris Duhamel d'o notein. Ne houian petra zo bet groeit geté.

Deit ar en oed, arsañet é-noé en daou vreur a voned de son. Fransoé neoah a vourré hoah, dré beb diù weh, lakaad é vombard de zassonein, beteg en dé ma timéas é verh. Neuzé siouah ! é-noé soñjet er ré yaouank ne oé ket jaojapl d'o zad hoari ged ur benùeg hag a oé ar en hent de voud disprizet tost d'er hêriéu. Hag o-doé kuhet é vombard dohtoñ...

N'em-eus ket vennet neoah ma vehé bet ankounaheit tré er vreudér Fléjaou. Setu perag em-eus skriüet er pennad-ma. Ged en heveleb soñj em-moé lakeit o anù ém lévr « Dasson ur Galon », hag a vo moulet un dé bennag mar plij ged Doué.

(Tennet ag er lévr diembann : « Glaou ru é-mesk ludu »)

(Ardro 1950).

Strong a baotr

ged Franséz KERLU

Eh oé pedèr ér é son é lein en tour. Komans e hré en dé tioé-laad. Er gouiañu e oé, a pen dé hirran en noz.

En un taol é tigoras dorieu ti-skol er baotred; un nasad krennarded e frammas ér méz, én ur huchal. Er ré pellan e oé herr arnehé arriü ér gér kent en toél, ha, « trip, trap », tarheim e hré o boteu ar en hent-praz. Lod e dreméné dré er vorh aveid kemér, é ti er boulanjér, un dorh bara segal de gas geté d'er gér; ar en hent é vezent gwélet é krignad er boulh anehi ged o bizied.

Un nebed neoah, ha mé én o mesk, e gerhé ar o goar, o livreu geté édan o hazal hag o deuorn én o fechédeu. Brabotereh e oé, ha huch.

Kent pell é tegouéham étal prad er Vod, ha dré en toull karr é spiam un poullad deur skornet d'er gouianü. Deit sonj dem hersal on korv ha risklein ar er glérénn. Ha ni ér flourenn. Ne fiam ket ré neoah moned ar er poull. Pen dehé er glérénn ha torrein? Yannig er Fur e dap un drojenn goed, ha geti é tastorn aveid goud ha tiü eroalh é aveid on samm. Harz e hra; komanset en hoari. Lerh-oh-lerh, é ruzam ar er glérénn ged on boteu, hag en tacheu e zo enné e laosk ou ritenneu arnehi. Bourabl é genem, ur voém. Moned ha doned e hram heb skuihein, hag a pe gouéh unan bennag ar é benn ardran é saü goapereh.

Peghed amzér en doé padet er safar? Nen don ket aveid lared. Pell mad ataü, kredan. Rag a pe zas dem arsaü ha distrocin d'er gér, éh oé cherret en noz. Splannein e hré er verleüenn duhont, hag ar er prad é saüé ur vrumenn.

Mall e oé distag enta. Med, kent kuitaad, é tas hoant dein trézein er poullad deur, hoah un wéh. Kemér e hran me lans, hag oll me nerh e zastuman de voned tré ag un tu d'en arall. Tapet é er hreiz dein, hag é kav genein, én un taol, santein, édan me samm, er glérénn é vlotaad, é plégein, é feüein... Skrignereh e gleüan ged me hansorted: ar me houst é hoarhant. Eh on betag men deulin én deur, ha krénein e hran ged en aneouid. Un troed e lakan ar er glérénn aveid doned ér méz. Tarhein e hra hoah, ha mé én deur ur wéh ohpenn. Me hansorted e skrign ataü...

A pe oén bet tennet ag er poull goudé boud kavet en dan anehon t'ér pé pedèr gwéh, ne oen ket braù de wéled. Lan e oé mem boteu a zeur, glub teil me loreu, ha goleit me lavreg a volfang. Daù e oé bet dein kemér ur goutell de rahein er lousteri, ha turel me loreu d'o goaskein aveid divér en deur anehé.

**

Ar en hent d'er gér, éh oé me spered lan a néhans. Pé degemér e vehé bet groeit dein ged me mamm? Un dressad ag er ré doemman e oen éngorto de gavoud. Petra gobér aveid trohein én é raog? Labourad e hré me 'fenn; klask e hré penaoz kuhed, aveid en nozéh ahoel, er péh e oé arriù genein. Un dra vad ma ne oé ket krann-baotr erbed arall a gér ér skol!

Setu mé é ti me zud. Nen dé ket hoah er goleu ar en daol, ha gwell arzé. Tan en oéled hebkén e daol un tammig splannédér. Ema me mamm éh aléj koén.

— Emén éh oh hwi chomet arré hiziù? » émé hi.

Ne laran gir. Ne fian ket tostaad d'en tan naked ged en eun ma vehé bet kouéhet hé selleu ar lousteri me lavreg.

— Ké fonnabl de rein bouid d'er houniffled, ha kaset ur vréhad plouz d'er hreù aveid er filaj. »

Ha mé sentet dohtu. Benn éh oé groeit me zamm labour dein, é splanné er goleu én ti. Red e vehé dioall. Ar men goar é tostan de doull en nor, hag a pen dé troeit hé hein d'em mamm, é framman ér sal, hag éh an de azé doh penn en daol, én tachad tioélan.

N'em boé ket laret kalz a gaer épad er pred. Béh ma cheleüen doh me zad ha me mamm é tiviz. Ne oé ket dinéh me spered tamm erbed. Eun em boé ma vehé bet laret dein seüel de glask un dra bennag ha gwélet me stad trueg. Hiraeh em boé d'er pred d'achiù aveid téhoud avazé.

Oeit é on koén, a pe gleüan er « bonseur » Jaked é tiskenn dergei hé zi aveid moned de filaj d'er hreu. Komans e bra me mamm distern en treu diar en daol. A pe wélan éma durheit hé 'fenn de gavouid en oéled, mé tapet me livr katekiz ha redet ér méz èl un tenn devad er « bonseur ». Setu mé dinéh aveid un herrad ataù. Gwir é éma red dein diaoll doh er boufam, rag n'hé devehé ket manket a houlenn petra e oé arriù genein, ha flatéet marsé d'em mamm. Med ar benneu men deulin, me livr ar mem harlenn, ne oé ket diéz dein kuhed garreu me lavreg louz. Ha labour eroalh hé doé ged hé rod de néein hag hé gloan. Laret em boé enta me hentél katekiz heb danjér erbed. Neoah yein sklas e oé me zreid ken ne harzen ket geté.

El bamnoz é tas me mamm de filaj d'er hreù ar un dro ged un nebed moézi arall. M'hé hleüas é toned ér penhér; tostaad e hré... Mé oeit prim ér méz, degouéhet geti doh toull en nor, laret « nozéh vad » dehi, hag achapet d'en ti.

Ne oé ket mui me zad anhont. Un tamm labour bennag en doé d'hobér ér hranj. Kouchet mad e oen. Abenn é krapan ar en oéled de doemmed ha de séhein doh er gohad tan. Kent pell é tivogedé me lavreg ha me loreu.

Skaotein e hren doh er selam a houdé un herrad a pe zas dein kleüed dor er hranj é cherrein ha me zad é toned. Ne oen ket hoah séh mad. Mall e oé dein difré. Mé diskennet a mem brech, diwisket men dillad hag em silet ém gwéle...

N'hellen ket cherrein lagad erbed na doned de benn a doemmed. Med, un ér devéhatoh, a pe zas me mamm ag er filaj, éh oé seblant ur housked ponnér arnon. Dirohal e hren mar a wéh. Neoah digor braz e oé men diskouarn d'en distéran trouz. Me gleüé me mamm é troiellad dré en ti, hag a pe pasé étaldon, é tosé me halon fonnaploh ged en eun é vehé bet devalet hé selleu ar men dillad... Na hiraeh em boé ma vehent bet oeit de gousked o deu!

Siouah! deulagad ur vamm e zo luemm ha spiz. A pe sonjen bihannan, kouéhet men dillad diar er gadoér, hag arriù me mamm d'o seüel. Doublein e hré me halon de bilad doh é hleüed é tastornad me zreu:

— Hennen e zo ur strong ar baotr alkent! Bamdé ur sord! N'arsaüan ket a gannein dehon... Mechal émen éma bet ean oah é cherrein en toullad fang-man. »

Ez é kompren, ne sannen grik, ne fichen ket. Me santé selleu me mamm arnon aveid goud ha dihun e oen pé petra. Me 'fenn édan er linséliu, en deur ém deulagad, gortoz e hren er gohad. M'hé hleüé bepred é tornatad men dillad, hag é varbotad un dra bennag.

Trugèré Doué ha Santéz Anna! ne ziskargas ket hé halonad. Skañtioh e oé ma halon. En noz en devehé bet distañet d'hé hounar, sur e oen a gement-sé.

— Kén named teil anehon! » e laré me mamm étal en oéled, ha m'hé hleüé é skarhein er fang a mem boteu hag é lakaad ludu énné d'o séhein. Hag éh as de gousked.

Pell e oen bet doh em glask. Nen dé ket er housked dein, kaer em boé troein ha distroein. Krénein e hren ged en aneouid. En trenoz éh oé bet red huchal t'ér pé pedèr gwéh arnon aveid men dihun. Dillad fresk e oé bet rein dein, hag ur paüad pé deu.

D'anderù-noz, éh en d'em gwéle ged en derhian.

Franséz KERLU.

Er vuoh vihan

Ur vuoh vihan em boé prénet.
Brih du ha gwenn e oé merket.
Me zad laré: « Me merh youankan,
Hwi e hoarno er vuoh vihan.

Hi zo ur vuoh a ras breton,
Hi rei leah dous eid er galon;
Hag er vuoh vihan goarnet mad,
Ma nen dei ket ar er bléad. »

Er vuoh, Bihan oé bet anüet,
Ha d'en tiad hé doé plijet.
D'er gouianü pe vezé piliad
Treu mad nezé ér ranjotad!

Er vuoh vihan oé ul lon dous,
Biskoah ne skoé, trankil ér plouz.
Mar bezé héol, é lèh breskenn
Bihan e yé d'er hoaskadenn.

Bihan en devoé bet ur lé
Brih du ha gwenn éldi eüé.
Ne oé ket, alas! un annoér
Ha gwerhet oé bet d'er bosér.

En amzér-sé, 'oén mé youank-flamm;
Setu mé deit de voud boufam.
Maruü é me mamm, pell zo me zad,
Ha Bihan zo kouehet a blad.

FILLOREZ SANT PIER.

Brezoneg beo ar bobl

Psalm

Perag, o va Doue, em horv tech ar pehed?
Perag 'ta va spered a gorr a zo gwisket?
Mar kouezan er pehed, ma 'z on labour ho torn
Grêt a 'fallagriez, ma halon a zo skorn.

Em 'fark pa labouran, ' teilad ha skuilh' an had,
Me houlenn ho sikour m'am bezo eun eost mad.
Ma labour zo mouget gand al louzeier fall
Ha ma eostan nebeud, ha bez' on da damall!

War ma hent e kavan, stummet dousig ha flour,
Kaerra perlez an Eva, a vrilh evel an dour.
Perag n'hellan-me ket kemer va 'flijadur
Gand ar vleunienn hadet e liorz an natur?

Petra 'ta eo an den p'e-neus lezenn ken striz?
Perag a-zioh va 'fenn eur hleze a gostiz?
N'hellan ober, en hent, morse eur paz a gleiz.
Pardonit, va Doue, ennoh me am-eus feiz.

Pa 'z in d'ho Paradoz, roit din eur horn douar.
'Vidon vefe ivern, e-kreiz ho prasa gloar
M'am-mefe tra d'ober a-hed an amzeriou.
Roit din 'ta eul liorz da hada deoh bleuniou.

Y.-Y. BIS, labourer-douar
e Keriven, Beuzeg ar Hab.

An ebeul kollet

Eiz deiz a zo emaan o sevel en noz evid diwall va hazeg prest d'ober ebeul. Mond a ran gand va letern d'ober eun dro beteg ar marchosi.

Chomet on mantret. An nor a zo digor. Ar gazeg a bilpas war ar pavez. Selloud a ra truezuz ouz he mestr. Grinkal a ra. Al loan bihan a zo ganet. E peleh e vefe? Kaer am-eus furchal er hraou, ne gavan netra.

Ha me da glask sikour. Toud re an ti d'zavas en eun taol-spont. Leterniou, kantolorou, lampou-elektrik, netra ne vanke.

Deom d'al lenn, e goueled al liorz! Roud ebed! Trouz ebed nemed ar rodo hag ar ranniged o kana. Kemered e-nefe an hent braz? 'Velato ne vefe ket ken link-se. Koulskoude hini va amezeg a oa bet kavet beuzet er mor, fas da Vorgad, '-kichen an Tri Mën Don. « O bugale, ' lavar an tad-koz, ankeniet, d'am zoñj n'ema-eñ ket pell deuz outom. Klaskom dreñv ar berniou plouz, dreñv al loch koz. »

Ha kerent e klevom Mari o helver e gorre ar porz: « Amañ ema-eñ, pasët dre an drailh spenn hag èt e loch an amezeg! » Setu toud ar familh dirag ar paour-kêz loan. Krena a ra war e vemprou dinerz. Mond a ra '-benn d'an oustilhau. Ober a vez grêt dean bale da zond da gaoud e vamm, pehini n'eus ket ehanet da hrinkal.

Toud re an ti a zo oh adori an ebeul da zena. Sehed e-neus. « Loskom aneo! » a lavar an tad koz. Kafe d'ar merhed brema, hag eur bonne stard d'ar baotred.

Y.-L. LE THEO, Penkêr, Terrug.

Eur vuoh speredet

Va zud o-doa, n'eus ket gwall bell hoaz, eur vuoh anvet « Bretonne ». Seurt buoh-ze ne vez ket gwelet ken war ar marhajoù. Brudet e oa e meur a barrez tro-war-dro.

Va zud a oa gwall goz ha ne zalhent ken nemed ar vuoh-ze, eur vuoh vihan, du gand tammou gwenn, evel ma vez gwelet kalz e Bro-Gerne. Lêz hag amann a roe kement ha kement. Mez ar pezh a leske an oll sebezet e oa o weled penaoz « Bretonne » he-doa doujañs ouz va zad hag e gare. Speredet e ranke bea.

Va zad a zigouez dezañ beza gwall zalhent en e zivesker. En eur vale goustadig gand sikour eur vaz e yê bemdez da ziwall ar vuoh. Homañ, daou baz war e lerh, a heulie anezañ giz-tal e skeud. Biken n'he-dije grêt eur paz muioh pe buannoh eged an tad, ha ne glasse rei eun taol teod nag a gleiz nag a zehou. Chom a rê an tad a-zao, e chome ivez; ober a rê eur paz, e rê eun ivez.

Em gavet er park, pa veze tomm an amzer, va zad a yê dindan eur wezenn da lenn e « Delegramme » pe da ober eun ae. Ar vuoh, pa neze ket c'hoant peuri, pe pa veze leun he hov, a yê en e-gichen da hourvez. Hag o-daou evelse e c'hortozent mare an distro.

Lavared a rê an dud o weled kement-se: « N'eo ket Cheun a zo o tiwall ar vuoh, ar vuoh eo a zo o tiwall anezañ. » E gwirionez, hini ebed ne zivalle egile, ar vuoh-ze a oa speredet ha ne felle ket dezi ober poan ebed d'an den a oa ken mad outi. Karoud a rê anezañ ha mond a rê d'e-heul evel eur hi mad warlerh e vestr.

Koulskoude eun devez an traou a jeñchas. An tad a erruas d'ar gêr heb ar vuoh. Giz-tal d'ar chatel all e oa deuet c'hoant kole dei, hag e leskas va zad evid mond da redeg an hentchou.

Gand va gwreg ha va daou vugel e yên d'he hlask. Pa he havjom e chomas a-zao, he daoulagad o para warnom. Feiz! a zoñjen-me, ne vezo ket diêz da baka. Ya 'ta! Pa oen digouezet deg paz outi, e lakeas he 'fri war an douar, he lost en èr hag e sellas ouzin o tostaad, liou ober goap en he daoulagad. Pa lavaren deoh e oa eur vuoh speredet! Astenn a ris va dorn war-zu he hernel, pa welis anei oh ober eul lamm a-gostez, ha mond da hortoz ahanom ugent paz pelloh, he 'fri adarre war an douar etre he daoudroad araog, hag he daoulagad briz o para warnom. Gortoz a rê ar mare diweza, pa edon o vond da lakaad va dorn warni, evid ober adarre eul lamm a-gostez ha mond d'ober memez tra ugent paz all pelloh.

Va gwreg hag ar vugale, o weled kement-se, a hoarze muia ma hellent: « Te gav dit emacout e Bro-Spagn amañ! » a lavare va gwreg etre diou hoar-zadenn. Ar gounnar a zave ennon dre ma tremene an amzer. Erfin e ran eul lamm, pa on erruet daou baz outi. Ya! Ar vuoh he-doa lammet buannoh hoaz, ha mond a ran da flastra war an douar, giz-tal eur zahad kraon. Dirusket va daoulin, fraozet va dilhad, ar cholori-ze a badas hoaz eur pennadig mad, beteg ma kavas d'ar vuoh he-doa grêt goap awalh ouzin.

Neuze e chomas a-zao, tener giz-tal eun dañvad, ha ne fiñve ket pa lakên va dorn warni. Soñj am-oa da lakaad anei da bêa an droug he-doa grêt din. Koulskoude, en eur hoarzin eo e kasen anei d'he hraou. Penaoz ober e giz-all pa welen va gwreg ha va bugale o c'hoarzin kemend-all ma ne oant ket gouest ken da goozeal. Kleved a rên koulskoude : « Biskoaz kemend-all ! Te zo en em faziet war da vicher. Toreador e tleje dit be' grêt. Te zo terruploh eged re Bro-Spagn ! »

Roparz GOURMELON (Aerborz Roazon.)

Diriaou 15 a viz mae 1958

**Seizved
Devez ar Brezoneg**

Per-Yann hag an diaoul

Per-Yann oa oh ober ar beskerez sardin e bae Konk. Eun devez an ekipaj, goude ma oa lodet ar zun, e-noa 'n em lakêt da rouli dre an ostaleriou. Deut ar mare da lakaad da ouel, faie daou pe dri martolod. Kaer oa klask, ne gaved ket 'neo. Droug a yê e Per-Yann : « 'Benn arhoaz, pe vent kaet, pe vent ket, e yafom d'ar mor. Me ' gemero kentoh eur honkar er bourz, ma vank eun bennag. »

Antronoz vintin, tra gweloh. KerKent e tigoueas dirag Per-Yann eun aotrou cheurh, eun tok Prezidant war e benn, dilhad kaer warnañ :

— C'hwï zo o klask eun den 'vid mond d'ar mor, 'm-eus klevet?

— Ya, ' lavaras Per-Yann.

— Kemerit ahanon, me zo dibriz. Gand ma roit labour din, po ket trouz deuz outon. Med arabad lesker ahanon da zihana, petramant me ya gouez.

— Mad-tre. Pignit er vag. Labour ne vanko ket. Dirapit, gwazed!

KerKent toud an dud a 'frape war ar jadenn.

— Lakait da oue!!

Al lien a yê d'al laez.

— Terki!

An drisou a zraske. Per-Yann oa war veilh. Selled ' rê dirazon 'vid mond e-mêz ar porz.

— Labour! ' houle gand eur vouez rust an aotrou 'n eur ziskragnal e zent.

— Pign e laez ar wern. Me gav 'nei re deo. Moana 'nei eun disterra.

An aotrou ' bignas e bleñch ar wern ' giz eur haz-koad. Planta ' rê e zent er penn hag 'n em leske da ziskenn 'n eur ziskolpa ar wern gweloh 'vid eur rabot. Ha d'al laez en-dro! Ha d'an traon! Ar skolp a strinke 'tre e zent, ar wern ' voanê buan.

— Trawalh! lavare Per-Yann 'barz ar fin, gand aon da weled e wern o tond 'giz eun alumetezenn.

— Labour! houle adarre an aotrou, 'n eur bara e xaoulegad ruz-tan war Ber-Yann.

— Me ' garfe, ' lavaras hemañ, e vefe digaset chadenn eor ar vag da lintra 'giz eur jadenn vontr.

An estrañjour a gemere eur gourhed chadenn, a basee 'nei 'tre e zent, ha kerKent e lintre 'giz an argant. Eur gourhed all ' basee heb dale, eun all, hag eun all hoaz. An eor oa diblusket amzer touch.

— Labour! ' houle 'vid an deir gwech poatr e dok gand eur vouez spontuz. Per-Yann ne ouie ket mui petra lavared deñ. « 'Mon kollet an taal-mañ », ' zañje deñ.

Mez ar mousig bihan, eur pootrig deg vloaz, a lavaras deñ goustadig e toull e skouarn:

— Lavar deñ skarza ar mor deuz « babord » da « dribord ».

— Skarzit ar mor deuz « babord » da « dribord » gand ar bogel (1) a zo aze.

Eur skrijadenn a reas neuze an aotrou:

— Chañs ' teus bet eo deut ar mousig bihan da chikour ahanout. Paneve-se oas daonet. Me eo an diaoul.

Distaga ' reas eur mell taal pao-marh gand ar vag, ken a yeas e strad ar mor, hag eñ a dehas kuit e-touez eur vogedenn hlaz hag a flêrie deuz kant paz.

Per-Yann hag ar mous oa deut en-dro war an dour. Kaet o-doa eur vatrienn 'vid diwall 'neo war vor. D'an abardaez oent bet savetêd gand eur Gelveneger o tond d'ar werz.

— Ha fei!... lavare Per-Yann pa oa deut d'e stad, morse mui ne gemerinn estren ebed war ma bag.

Dastumet e bro Pont 'n Abad gand
Marsel DIVANACH

(Troidigez halleg e « Contes du vieux meunier breton », page 89).

LODENN ar re YAOUANK

Tan Sant Yann

« O noz dudiu! », ton anavezet ar « Basketerien Perlez » gand Jord Bizet a drote e-barz va 'fenn. Ne oa ket eun digouez. Oll-gaer e oa an noz. Skrin voulouz glaz-du an oabl, broudet gand begou diamant warnañ, en em adserre goustad war an douar evid kuzad e gousk. Sioul ha klouar e oa an er. Goustadig eh huanade ar mor war an drézenn 'fresk. Youhadennou diweza ar charretourien o kas d'ar gêr ar 'foenn a varve tamm ha tamm, ha sioulded an noz a oa trubuilhet gand skriagnadennou pistiguz ar grilhed, al levezeg ganto ivez en noz kaer-mañ. Skleur ar preñved-glaz a vroude amañ hag ahont geot gwer-du ar hleuziou. Ar waz vihan, hi, evid mired da derri ar sioulded-se ne roe mui da gleved heh hiboud, hag en em roe da gousked en he gwele bihan, kinvi a beb tu dezi. Merzoud a rên kement-se en eur ziskenn etrezeg Ti-Losket.

Edo ar bevar warn-ugent a viz mezeven hag heb dale flammou uhel ha sklêr tan Sant Yann a elumo talbennou an tiez-soul koz. Bodet e oa an dud dija en-dro d'ar bern keuneud. Gortoz a rënt Gwilherm koz. Hemañ a zigouezas, gantañ e verh hag e vab bihan. En eul lestr bihan a zalhe en e zorn e soubas eur skoultrig beuz hag e taolas war ar heuneud meur a verad dour benniget. Tostaad a reas eun alumetezenn danet ouz ar bern, hag ar flamm a zavas sklêr en noz glaz. An dud en em dolpas en-dro dezañ. Neuze, heñ, e zaoulagad savet etrezeg an oabl, a lavaras gand eur voutez pouezuz ha kreñv: « O Aotrou Doue benniget ha trugarezuz, bez trugarekêd evid kement tra az-peus grêt evidom. Ra zavo an tan-mañ sklêr en noz sioul, evel merk on eneoù glan ha laouen o pignad etrezeg da Berson Peurbaduz. »

Trouz pell ar mor a zeblante beza eun ograou oh eila ar bedenn-mañ. Ar grasou lavaret en-dro d'an tan, e oé goude tro ar hoariou hag an dañsou da vond en-dro. Troiou war doniou koz; an dud a ziskane ganto: « Ankou-nahaom on oll brederiou, a lavarent, kanom, korollom, soñjom el levezeg bremañ! »

Skeudou fñvuz ar gorollerien a lakee da veva mogeriu an tiez-soul koz. Mervel a reas an tan tamm ha tamm. E-kreiz al leur e chomas eur bern glaou beo. Neuze pep hini, dorn ouz dorn, a lammas a-zioh an tan o vervel, hag an abardaez a echuas, diwezad en noz, en eur gwir glaou a 'fulennou.

Strakit taniou laouen e klouarded an noz!
Yenet eo ar Breton evid e vro zivrell.
Astommit e galon dizeur, distur ha kloz,
'Vid ma welo e vro gand daoulagad all.

Jord HALLEGUEN, Marok, 2-58.

(1) Boged: bailh koad gand eur gorden.

Danvez-pried ar martolod

Deut eo an abardaez. Eun abardaez hañv, klouar. An eol o kuzad a ruz an dremwel. Ar brug a gemer liou an oour. Eun avelig-vor, o tegas d'an douar c'hwez an holen, a dremen a gouadou skañv hag a bleg ar bleuniou el liorzou. War an tevenn e sav menhir Lost-Marh. Sioul eo ar mor hag e nij oriaved en oabl. Goloet eo an erinou gand eur geotenn lemm warni eun nebeud deñved o peuri hoaz, dibreder. Keriadenn Lost-Marh a zo stardet he ziegeziou an eil ouz egile. Dirag eun ti, eun den koz azezet war eun bank koad a gont marvailhou d'ar vugaligou kluchet war an douar en e-gichen. Eur vaouez, o kerhad he zaout d'ar gêr, a gerz goustadig. Trouz he boutou-koad a dregern war vein an hent. En eur vodenn e komañs an eostig da gana. War-du ar mor e yud ar gouelaned hag ar skreved. Pell du-ze e klevet trouz eun dumporell o tond en-dro d'ar gêr en eur storloka war an hent digompez.

Hent don Kernalegen a ya etre ar gwex dero, pallennet gand kinvi ha brinsad seh a strak dindan an treid. Yann Kerfant a heuilh goustadig an hent-se, a jom a-zav hag a azez war eur skod e-pad eur vunutenn pe zjou, hag adarre en e zav. Dihabask eo... Med setu unan bennag o tiskenn gand an hent. Trei a ra Yann e zellou war an tu-ze. Eur plah yaouank eo a zo o tond.

— Nozvez vad, Marivonig! Deut out henoz?

— Ya, deut on 'vel m'az-poa goulennet diganin. Bez' e hellan gouzoud perag?

— Bremaig e ouezi.

Mouez Yann a deuas da veza boud.

— Eo! 'Vid lared dit eun dra 'm-eus c'hoant diskleria dit pell' zo. Gortozet em-eus. Gortozet beza distroet deuz ar zelvij ha beza gounezet eun tammig arhant. Bremañ em-eus danvez awalh ha goulenn a ran diganin beza ma 'fried... N'eo ket red dit respont raktal. Lezel a rin ganit eur miz 'vid ober da zoñj, mar karez.

Yann a davas, nehet... Kerkent e savas mouez Marivonig, laouen.

— O Yann, Yann! N'eus ket ezomm da hortoz. Ma c'hoant brasa eo dimezi ganit.

Sklêrijennet oll eo he dremmig gand an eurusted. He daoulagad a sked gand al levenez. Ha Yann, euruz eñ ivez, a houlen hoaz:

— Gwir eo? Asanti ' rez?

— Ya, da bried e vin, Yann.

Promesa a zo bremañ etre Yann ha Marivonig. Disadorn e vo grêt an dimezi. Kempennet eo bet ti Yannig. E gerent a zo êt da veva en eun ti all o-deus e Kertangi, eur geriadenn tost. Goude e zevez labour e ya Yann da gerhad Marivonig evid mond d'ober eun droig war an tevenn. Euruz int. Pemp deiz hoaz hag e vint dimezet.

Diriaou. E Lost-Marh emañ Marivonig oh ober war-dro ar gegin. Paouez a ra gand he labour beb an amzer evid soñjal e Yann, a zo êt da besketa war e vag « Mari-Janed », daou vartolod all gantañ. « Mari-Janed » a zo ar gwella e-touez bigi Morgad hag eur moraer euz an dibab eo Yann. Setu e zevez labour diweza a-raog an dimezi, rag warhoaz e vo deiz an aozadurioù. Goustadig e kerz « Mari-Janed », pouezet gand eun avel hlan. Sioul eo ar mor, o vranskellad goustadig ar vag. Brao eo an amzer hag ar besketerez a ya mad gand an tri den. Yann a zo o levia ar vag, e-pad ma taol e vartoloded ar rouejou. Euruz eo Yann.

... A daol trumm e houyenna an avel. Koumoul a zired da aloubi an oabl. An arne a zo o tostaad. Red eo teuler evez. Kreñvoh-kreñva e c'hwez an avel. Ar mor a rusta. N'eo ket eun arne, med eur barr-amzer, a zo o tond. O weled an amzer o wasaad, Yann a hourhemenn kapeal. Ar mor a zo rustoh-rusta, uhel e sav ar gwagennou. Emañ Yann peg er stur, o levia ar vag er gwall-amzer. Diêz eo merdei e-kreiz eur seurt barrad, ha koulskoude e red « Mari-Janed » etrezeg bae Douanenez. Beg-ar-Hoor a dosta : eur miltir hoaz hag e vint savetêt.

Pemp munutenn a dremen. Ar baotred a zo enkrezet. Ken uhel e sav an tarzou-mor ma ne weler mui an douar. Yann a rank levia diouz demvezoud. An tiz a laka « Mari-Janed » da zirouda war-du an hanternoz. Tost-tre e tle beza an douar bremañ.

Setu an douar!... Kant metr ahann. Med ar vag he-deus kollet he hent. Beg-ar-Hoor a zo bremañ daou hant metr war-du stribourz. Red eo mond etrezeg ar hreizteiz, pe e tarzo « Mari-Janed » war ar herreg... Savet eo ar vag gand an tonnou divent. Yann a bouez gand e oll nerz war ar stur, sikouret gand ar vartoloded. Med ar herreg a dosta, daoust d'o hrogadou... Ugent metr... deg metr... daou vetr... Kraak... Echu eo gand « Mari-Janed ».

Yann e-neus kroget gand eur garreg, hag a zalh gwella ma hell. Unan euz ar vartoloded a zo êt d'ar strad, egile a glask tizoud ar garregenn. Gloazet eo Yann, torret e har dehou, ha n'eo ket evid padoud pelloh. Eur zoñj diweza e-neus evid Marivonig, a-raog beza dibradet gand eun tarz-mor ha kaset d'ar goueled. Ar martolod all a zo beuzet ivez. Ne jom nemed tammou koad, taolet distailet ouz ar herreg gand ar mor.

Diskennet eo Marivonig e Morgad. Ema-hi war ar zav-mein o hortoz distro Yann. An eil goude egile e teu ar bigi en-dro, med « Mari-Janed » ebed. Pignad a ra Marivonig beteg tour-tan ar Gador, evid gweled abretou Yann o tigouezoud...

Pa oe deut an noz e yeas Marivonig da Graon. En iliz e taoulinas war eur gador hag e pedas: « O, ma Doue! Sikouret Yann d'en em denno euz ar mor. N'eo ket maro! N'hell ket beza maro! »

Sioulêt eo bremañ ar mor... Peñseou « Mari-Janed », hag ivez korvou Yann hag e vartoloded a zo bet kavet. Pa oe klevet ar helou mantruz gand Marivonig e chomas-hi pell da ouela. A-benn ar fin e sehas he daerou hag e laras: « Bolonte Doue ra vo grêt! Planedenn ar vartoloded eo beza sammet gand ar mor da n'eus forz pe oad. »

J.-P. LORIN.

(Roazon, Kerzu 1957.)

Notennoù ar Furcherien Goulennoù ha Respontoù

Danvez da studia anioù an dud hag al lehiou e Breiz

3. — E peleh e vez kavet danvez da studia anioù brezoneg an dud hag al lehiou? *Eul lenner euz ar Marok.*

*

(3) Respont. — Eur gudenn hir da zirouestla; da lavared eo ne vezo ket kavet e BRUD ar respont klok an dro-mañ, marteze.

ARBOIS DE JUBAINVILLE. — a) Recherches sur l'origine de la propriété foncière et des noms de lieux habités en France. Paris, Thorin, 1880-1890.

b) Les noms propres francs et les noms propres bretons du Cartulaire de Redon. *Revue Celtique*, II.

c) Quelques noms de saints bretons dans un texte du *xr* s. *Revue Celtique*, III.

d) Noms de lieux en France. *Bulletin des Antiquaires de France*, 1886.

ARVOR (kasetenn). — Roll anioù lec'hioù e brezhoneg hag e galleg. 29 a viz du 1942, h. a.

BROÏSE P. — Les noms de lieux du pays de Vannes. *Le Clocher Breton*, janvier 1914.

COUFFON René. — a) Toponymie bretonne. La forêt centrale. Les plous. *Société d'histoire et d'archéologie de Bretagne XXVI*, 1946.

b) Recherches sur les églises primitives de l'évêché de Saint-Brieuc et Tréguier. *Mémoires de la Société d'Emulation des Côtes-du-Nord*, 1946.

c) Recherches sur les églises primitives des anciens diocèses de Léon et de Cornouaille. *Bulletin de la Société Archéologique du Finistère*, 1951-1952.

DAUZAT Albert. — a) Les noms de personnes. Origine et évolution.

b) Les noms de lieux. Origine et évolution.

c) Dictionnaire étymologique des noms de familles et prénoms de France.

d) La géographie linguistique.

(Red eo studia ar pevar levr-mañ.)

DELAPORTE. — An anioù tud : « *Gwalarn* », N^o 144-145.

DUINE F. — a) Catalogue des sources hagiographiques de l'Histoire de Bretagne jusqu'à la fin du *xix* s. Paris, Champion, 1922.

b) Inventaire liturgique de l'hagiographie bretonne, 1922.

DYEVRE H. — La toponymie des côtes de Basse-Bretagne. — *Onomastica*, 1948. (Gand skoazell an ao. Dyèvre, ijnour meur « Service Hydrographique de la Marine », eo bet moulet war an « Annales Hydrographiques » studiadennoù diwar-benn anioù-lehiou moriou Breiz, ha goude-ze ez eus bet savet leirigou gand ar studiadennoù-ze. Setu amañ o roll.)

CUILLANDRE J. — Toponymie de l'archipel Ouessant-Molène. Paris, Imprimerie Nationale, 1949.

GUILCHER A. — Toponymie de la côte bretonne entre Audierne et Camaret. Imprimerie Nationale, 1950.

DUJARDIN L. — Toponymie de la côte bretonne entre Le Conquet et Argenton, 1953.

GUILCHER A. — Toponymie de la Rade de Brest et de ses abords, 1954.

TERS F. — Toponymie de la côte du Goëlo (Le Trieux, Bréhat, Paimpol), 1955. (Diwar bluenn an ao Ters — n'ouzon ped ano aozet a oa bet implijet gantañ araog rei e wir ano — e veze beb sizun moulet eur pennad war « La Presse Paimpolaise », 1952 : « Pourquoi les noms de lieux changent et comment ? » Plijuz kenañ da lenn, ha kenteliuz.)

BERNIER G. — Toponymie nautique de la Presqu'île de Qiberon, 1956.

FALC'HUN F. — Histoire de la langue bretonne d'après la géographie linguistique. 1^{re} Vol. : Texte. — 2^e Vol. : Figures. — Rennes, 1951.

GAUTIER M. — La Bretagne Centrale. La Roche-sur-Yon, 1947.

(E diwez al levr ez eus eul « Lexique toponymique de la Bretagne Centrale ».)

GODU (DOM) ET P. LE ROUX. — Une liste de noms brittoniques. *Annales de Bretagne*, XLV.

GOURVIL F. — Daoust hag e-neus Fañch Gourvil arboellet en eun tu ben-nag ar pennadoù bet skrivet gantañ diwar-benn an anioù, hag e brezhoneg diwar an danvez-se? N'ouzon ket. Eur mellad bern avad a veje anezo.

Alia a ran da lenn da genta : « Langue et littérature bretonnes », unan euz leirigou an dastumad : « Que sais-je » (Les Presses Universitaires). Ha goude-ze klask : « L'Union Agricole de Quimperlé », 1918 h. a. — « Mouez ar Vro » (Montroulez), 1919-1921. — « La Dépêche de Brest », 1921-1923. — « L'Ouest-Eclair », 1931 h. a. — « La Bretagne à Paris », adaleg 1949. — « Stur », 1934-1936.

Les noms celtiques de saints, de familles, de lieux. « *Annales de Bretagne* », XXXIII-XXXIV.

La composition des noms de lieux en Bretagne. « *La Bretagne Touristique* », 1923-1924.

Prénoms bretons d'autrefois. *Nouvelle Revue de Bretagne*, 1948.

Sellit ouspenn ouz roll ar pennadoù savet gantañ war « *Onomastica* » hag « *Ogam* ».

GRAND R. — La question des lieux en Ac en Bretagne. « *Mémoires de l'Association Bretonne* », 1925.

HALGOUET (DU) ET L'ESTOURBEILLON (DE). — Collection des Inventaires des Châteaux bretons. (Daoust d'ar jaziou eilskriva a zo el levriouze, ha n'int ket niveruz, talvouduz eo bet kenañ din, unan anezo da vihana, da anaoud istor Goueled-Leon.)

JOURDAN DE LA BOISSARDIERE. — Topologie des paroisses du Léon. « *Echo paroissial de Brest* », 1910 h. a. Advoulet e « *Revue de Bretagne et de Vendée* », labour boulhet ha chomet a-zav.

(Desket braz e oa De la Boissardière ha dastumet e-noa paperiou koz Bro-Leon. N'on ket deut a-benn da lakaad an dorn warno goude distrujadeg Vrest.)

LARGILLIERE R. — a) Les Saints dans l'organisation chrétienne primitive dans l'Armorique bretonne. Rennes, Pihon, 1925. C.R. « *Revue Celtique* », XLIII.

b) Six saints de la région de Plestin. « *Annales de Bretagne* » XXV. « *Revue Celtique* » XL.

c) Le Minihy-Briac. *Mélanges offerts à M. J. Loth*, 1927. « *Revue Celtique* », XLV.

d) Etudes de toponomastique bretonne. « *Mémoires de l'Association Bretonne* », 1928-1929.

LAVENOT P.-M. — E kambr (e kalatrez kentoh !) levriou kloerdi bihan San-ter Anna Wened, em-oa gwelet, da vare Bleun-Brug 1954 eun « *Dictionnaire étymologique* » 493 p. dezañ, savet gand an ao. Lavenot, person Kamors, 2 juillet 1895. Evid gwir n'em-eus ket e studiet.

LE CLERC L. — Notes de géographie linguistique; p. 233 eil voulladur « *Grammaire du dialecte de Tréguier* ».

LE GONIDEC. — Noms de baptême bretons. (E diwez an « *Dictionnaire français-breton* », 1847).

LE MENN R.-F. — a) Noms propres bretons commençant par Ap ou Ab. « *Revue Celtique* », II.

b) Toponomastique générale. *Mémoires de la « Société Archéologique du Finistère »*, 1878-1879.

LE ROUX. — Chronique de Toponymie. « *Revue des Etudes Anciennes* », 1932.

LOTH J. — a) Chrestomathie bretonne. Paris, E. Bouillon, 1890. (Bet moullat da genta war an « *Annales de Bretagne* », 1886 h. a.)

b) L'émigration bretonne en Armorique du v^e au vi^e siècle de notre ère. Paris, Picard, 1883.

c) Noms de lieux cornouaillais. « *Revue Celtique* » XLVII.

d) Les noms de saints bretons, 1910.

e) Les noms de lieux en Ac. « *Revue Celtique* » XII.

MEVEN MORDIERN. — a) Anoiou lec'hioù ha tud. « *Gwalarn* », Nn 132.

b) Notennou diwar-benn ar Gelted koz hag o sevenadur. Nn XII embannadur kenta an Notennou.

PEYRON P. — Actes du Saint-Siège concernant les évêchés de Quimper et de Léon du xiii^e au xv^e s. « *Bulletin de la Commission Diocésaine, Quimper* », 1912 h. a.

POUILLES DE BRETAGNE. — (Anoiou parrezioù Breiz er xv^e ha xv^e kantved) e « *Cartulaire de Redon* », pp. 455-588.

QUENTEL P. — a) Toponymie. (4 bennad war « *Le Télégramme* », Meurz, Ebrel ha Mae 1955).

b) Lumières nouvelles sur l'histoire bretonne.

d) Pennadou e « *Ogam* ».

QUILGARS H. — a) Dictionnaire topographique de la Loire-Inférieure. Nantes, Durance 1906.

b) La toponomastique en Ile-et-Vilaine. *Mélanges offerts à M. Joseph Loth*, 1927.

ROSENWEIG. — Dictionnaire topographique du Morbihan. Paris, Imprimerie Imperiale, 1870.

RUSQUEC (H. DU). — a) Etymologie des noms de lieux et des noms propres bretons. *Société des Etudes Scientifiques, Morlaix*, 1884. *Revue Celtique*, octobre 1887.

b) Nomenclature des communes du département du Finistère avec la signification étymologique de certains noms de famille de la Basse-Bretagne. Morlaix, Chevalier, 1903.

SEBILLOT Y. — Les noms de baptême en Bretagne. Paris, 1904.

SOUILLET G. — a) Géographie et Toponymie. Université de Rennes. Cinquantième anniversaire du Laboratoire de Géographie. Volume jubilaire, 1952.

b) Chronique de toponymie. « *Annales de Bretagne* » (abaoue 1902).

TALDIR-JAFFRENNOU. — La clef des noms. Paris, Heugel, 1934.

TALHOUARN. — Les noms de baptême en Bretagne. *Le Clocher breton*, juin 1904.

TREPOS P. — a) Les saints bretons dans la Toponymie, 1955. (Bet moullat da genta war an « *Annales de Bretagne* » LX, 1953.)

b) La notation des toponymes bretons. « *Annales de Bretagne* ».

FRERE F. UGUEN. — Pennadou niveruz diwar-benn mammenn an anoiou-lehioù er « *Courrier du Léon* » ha « *Progrès du Finistère* ».

VENDRYES J. — a) De la toponymie bretonne. « *Bulletin de la Société Linguistique* », XLIII.

b) Une liste de noms bretons du x^e s. *Etudes Celtiques*, juin 1938.

✱

ARCHIVES DEPARTEMENTALES. — Dreist-oll re Vreiz-Izel (Séries A et B).

CARTULAIRES. — Savet em-eus roll an diellou meneget enno anoiou brezoneg. Kavet e vezo ar roll-se amañ eun devez bennag.

KAZETENNOU. — D'an neb a 'fell dezañ studia lezanoiou hag anoiou an dud o chom bremañ e Breiz, e kuzulian lenn deb sizun « *La Bretagne à Paris* ». Kaoud a reer enni « *Etat Civil* » eun toullad parrezioù.

NOMENCLATURE DES HAMEAUX, ECARTS, LIEUX DITS. — 1^o) Liste alphabétique par commune. 2^o) Liste alphabétique départementale. (Daou levr evid peb departamant. Ragskriz talvouduz gand P. Trépos.)

OGAM. TRADITION CELTIQUE. — Er gelaouenn-mañ e kaver kalz pennadou war an anoiou, savet gand Gourvil ha Quentel dreist-oll.

ONOMASTIOA. — Sellit ouz roll ar studiadennoù hag hini an dozerien. Da skuer : F. Falc'hun. Une enquête toponymique en Bretagne Celtique.

REVUE INTERNATIONALE D'ONOMASTIQUE. — Da skuer : Gourvil. Les mots latins dans l'anthroponymie bretonne.

COMPTES RENDUS DES CONGRES INTERNATIONAUX DE TOPONYMIE ET D'ANTHROPONYMIE. — Gourvil. Noms bretons de famille en Ab, Ap, fils de (3^e Congrès.)

✱

Pedet eo al lennerien da zifazia ha da glokaad va 'jennad.

L. LOK.

AMAN HAG AHONT

« Le Vocabulaire breton de L'Hôpital-Camfrout », gand Charlez ar Gall.

Tennet euz *Annales de Bretagne*, Tome LXIV, année 1957, fasc. 4. N'eus bet embannet ar wech-mañ nemed an hanter euz ar roll, betek al lize-renn M. 202 ger, gand skweriou niveruz da zeski o implij en trolou-lavar. Setu aze eur studiaden euz an dibab, klok ha piz. Talvezoud a ray al labour-ze da binvidikaad ar geriadurioù.

Un texte breton inédit de Dom Michel Le Nobletz, gand F. Falc'hun.

Annales de Bretagne, Tome LXIV, année 1957, numéro 4. — Dornskrid Dom Mikael An Nobletz (1577-1652), « Disclaration eus ar carte hanvet lizeren Pythagoras », a oa chomet diembann e manati Landevenneg-Kerbenead. Kavet e vo bremañ moulet gand eun droidigez halleg hag eur studiaden diwar-benn an doare-skriva implijet gand an oberour. Hervez F. Falc'hun e-neus bet sur awalh ar skrid-mañ eul levezon war an Tad Maner, d'ar mare ma oa oh aoza reizadur doare-skriva ar brezoneg.

Pemped kenstrivadeg brezoneg Yann Sohier. — Savet gand « Oberenn

al Leoriou-Skol Brezoneg », digor eo Pemped Kenstrivadeg Brezoneg Yann Sohier n'eo ket hebken da oll vugale ha tudou yaouank ar skolioù dindan-Stad, hogen d'an dud er-méz ar skolioù, forz pe oad int ha pe vicher eo o hini.

Danvez ar Henstrivadeg a zo sevel eur pennad-skrid o tezevella eun dro fentuz pe souezuz c'hoarvezet gand eun aneval bennag.

Teir Gevrenn a zo e Kenstrivadeg ar Skolioù : A) Skolioù an Derezh kenta; B) Liseou, Skolachou (dindan 15 vloaz); C) Liseou, Skolioù-Mistri, Skolioù-Micher (tudou yaouank 15 vloaz pe ousspenn). Eur gevrenn all a vo evid Studierien ha Studierezed ar Skolioù-Meur, ma vez unan bennag anezo o kas skridou.

Evid an dud er-méz ar skolioù, ez eus ar Henstrivadeg-Pobl.

E peb Kevrenn e vo 5 Priz kenta : 6.000, 4.000 (2), ha 2.500 lur (2); leoriou a vo kaset d'an oll re o-devo paket eun notenn en tu all da 10 war 20 : 1 leor evid an notenn etre 10 ha 12; 2 leor evid an notenn ousspenn 12. Eun dibab leoriou brasoh a vo evid an notenn 15 hag en tu-all.

5.000 skouerenn euz niverenn ispisial « Ar Falz », a zo bet kaset en oll skolioù-Stad Breiz-Izel. En niveren-ze o-deus kavet ar gelennerien

folennou da ingala etre o skolidi; war beb folennig ez eus, ousspenn danvez ar Honkour, eur bajennig e brezoneg, moulet e liou ruz. Evl e vo bet lennet brezoneg gand eur 15 pe 20 mil bennag a vugale pe a dud yaouank da nebeuta. Dre ze e tiz Kenstrivadeg Yann Sohier eur pal a-bouez-braz : rei brezoneg da lenn er skolioù.

Meur a gant pennad a hortozom reseo evel warlene. Danevellou koant on-eus resevet dija a-benn bremañ, kaset gand bugale skolioù zo, en o zouez skolioù ha ne vez ket kelennet ar brezoneg enno. Eun Oberenn euz ar henta eo eta Kenstrivadegou O.L.S.B., war dachenn ar « Bruderez ».

Evid kemer perz er Henstrivadeg-Pobl ha digemered Niv. 1 bis 58 « Ar Falz », skriva d'ar gelaouenn : 71 bis, rue J.-Guesde, Brest. Kaset e vezo evid netra kemend a skouerennou ha m'ho pezo implij.

Eun niverenn ispisial a zo bet embannet evid bro-Wened.

Diskouezadeg « Brud ar Brezoneg ». — D'ar merher 26 a viz meur zo bet digoret diskouezadeg « Emgleo Breiz », e Mirdi an Arzou-kaer e Roazon.

Bet e oa an Diskouezadeg-se, kentoh, en Naoned, e Montroulez, hag, en hañv tremenet, e Kemper.

Danvez istor ar brezoneg. — Emañ or henlabourer L. Dujardin o lakaad skrivereza peder studiaden :

1. Les œuvres en langue bretonne du Père Maunoir.
2. Les « Cantiquou spirituel », 1642, sont-ils l'œuvre du Père Maunoir ?
3. Le recueil de prières et cantiques de M. du Botmeur (1700) peut-il s'intituler « Les Heures bretonnes du Père Maunoir ? »
4. Bibliographie de la vie et des œuvres du Père Maunoir (40 articles).

Ne vezo ket kavet al levr-se da brena er staliou-levriou. Kaset e vezo d'ar re o-devo pêt en a-raog 400 lur da : Dr Dujardin, Saint-Renan, Finistère, C.C.P. 14.123 Rennes.

Roll gerioù an ao. Guivarc'h (Rosporden). — « Lennet am-eus roll ar gerioù dastumet e Rosporden gand an ao. Guivarc'h hag embannet ganeoh e niverenn diweza BRUD (Nn 3, p. 101). Setu, d'am meno, ar pez a heller displega diwar-benn ar gerioù-se :

Demain : n'eo ket dres « benn c'hoaz », a vez laret, « ben arc'hoaz », ne lavaran ket. Emañ ar pouez-mouez avad war c'hoaz, ha setu perag ne vez ket klevet atao an « ar- ».

Ar ger-mell : n'eo ket « am » ez eo. Ar ger-mell a zo evel evel dre-oll ar, pe an, pe al, hervez ar ger a zeu warlerh, med ousspenn am dirag eur P pe eur B (am prad, am brug). An a vez distaget peurliesha 'n.

Brouette : d'am meno, ar ger a vez, evid gwir, distaget « raouz », pe gentoh « raouz », a die beza ar ger « kravaz, ar hravaz ».

Ba (pega ba) : ba = e-barz, a vez implijet evid e.

Y. SICARD.

Le Pluriel Breton, gant Per Trepos. Emgleo Breiz. B.P. 17 Brest. 1957.

Roll al levriou embannet gant Emgleo Breiz a zo pinvidikêd gant eul levr a bouez, **Le Pluriel Breton**, 304 p. tezenn doktorelez P. Trepos. Kudenn al liester e brezoneg a zo studiet amañ piz-kenañ ha sklerijennet gant kartennoù dibabet e « Atlas Linguistique », P. Le Roux. Diskouez a ra an oberour penaoz eo bet stummet al liesteriou ken niveruz en eur yez veo, ar brezoneg, lezet ganti ar frankiz d'en em astenn ha d'en em drei anezl he-unan, heb beza bet skoilhet gant reolennoù ar grammatdegourien. Setu aze eul levr hag a denno muioc'h c'hoaz evez an dud desket war dalvoudegez ar brezoneg e-keñver studi lezennoù ar zoniadourrez.

C'hoariva Brezoneg

DIOUZ KOSTEZ AN OBERENNOU LAIK

GRONVEL

Setu amañ kelou all diwar-benn Strollad C'hoarierien Groñvel, kavet er gelaouennig vrezoneg « Laboused Groñvel » :

« Savet eo bet, gant tud an « Amicale Laïque », eur strollad c'hoariva, ken e galleg hag e brezoneg. Pevarezeg c'hoarier on-eus. C'hoarier a zo bet :

— e miz meurzh 1957: « Gwreg an Toer », gant Tangi Malmanche; « An dachenn fobal » ha « Brill brein », gant Per Helias;

— e miz mae 1957, on-eus c'hoarier a-nevez ar peziou-c'hoari evid kenstrivadeg an U.F.O.L.E.A.;

— e miz gwengolo 1957: « An Douger-Tan », gant Per Helias, da geñver Skol-Hañv « Ar Falz »;

— e miz genver 1958: « An Douger-Tan », e Plougernevel;

— e miz c'hwevrer: An oll beziou-ze e Langonned;

— e miz meurzh: e Groñvel, « Daou lapous » hag « An Hini all », (« Egile »), gant Per Helias.

Darn euz ar peziou meneget a vo c'hoarier heb dale e Paoul.

Kinnig a ra Strollad Groñvel mond da c'hoari brezoneg en oll gomuniou tro-iar-dro.

Eul labour breizeg all a vez kaset da benn, e brezoneg ivez na petra 'ta, gant C'hoarierien Groñvel: savet e vez ganto nozvezioù « Kan-ha-Diskan », evel hini ar 15 a viz meurzh tremenet, hag a reas berz braz.

Eur bladenn (1) a vo embannet heb dale e ti an Ao. Wolf, e Kemper a roio eun tañva euz ar hanaouennoù niveruz a oe klevet er Fest-Noz-se. »

SIZUN

Evel peb bloaz, e miz meurzh, c'hoarier eo bet eur pezh-teatr brezoneg e Gouel an « Amicale Laïque », e Sizun. Ar wech-mañ e oa bet dibabet: « Eun den maro ha ne goll ket e benn », savet gant Per Helias hag embannet gant « Ar Falz ». Ar c'hoarierien a oa Ivona Marhic, F. Eliès, Y. Cann. Plijet kenan eo bet an oll zelaouerien gant an istorig fentus-se.

(1) « Fest-Noz e Groñvel » a vo ano ar bladenn-ze.

BRO GERNE

Eur hornad-bro a anavezom e Bro-Gerne ha n'eus sizun ebed, koulz lavared, ma ne vez ket c'hoariet eur pezh-c'hoari pe zaou gand eun toulladig mistri ha mestrezed-skol. Eur bemzeg bennag a beziou en eun arvest int gouest da hoari heb beza red dezo adgweled ar hom-zou... ha meur a wech o-deus displeget evelse 5 pe 6 diouz renk!...

Piou a zo gouest da ober kemend-all?

BRO-WENED

War a glevom, eo bet c'hoariet eur pezh-c'hoari, nevez zo, e Prijag. A-hend-all, goulennou peziou on-eus digemeret euz Bro-Wened: pa n'eus bet embannet, e yez Gwened, nemed nebeud-tre a beziou-c'hoari diouz an doare a houlenner diganeom peurvuia, e ranker trei e gwenedeg arvestou Per Helias. Kemend a verz a ra ar peziou-ze e bro-Wened hag er horniou all.

*
**

Azgoulenn a reom adarre ouz on oll vignoned digas keleier deom diwar-benn ar peziou-c'hoari displeget en o horniad. Red eo rei brud d'an oll dud a ra war-dro ar C'hoariva brezoneg.



EMBANNADURIOU "EMGLEO BREIZ"

BARZONEGOU :

1. - Barzonegou*Reunan Ar Mougn..... 200 lur franco
2. - Gand Red an Dour, gand Ropars Broudig. . . 200 " "
3. - Bleuniou Arvor, gand Mab an Dig. 220 " "

DANEVELLOU :

1. - Geotenn ar Werhez, gand Jakez Riou..... 385 " "
2. - Ar Roh Toull, gand Jakez Kerrien 385 " "

MOJENNOU BREIZ :

1. - Ar Mor, gand Per Helias..... 305 " "

BREZONEG GWENED :

1. - Dason ur Galon, gand Loeiz Herrieu 670 " "
(embannet gand skoazell "Emgleo Breiz").

KAN :

1. - Kanom Uhel (Emb. Kendalc'h) 170 " "

KELENNADUREZ :

1. - Komzom, Lennom ha Skrivom Brezoneg, gand an Dr Tricoire..... 285 " "
2. - L'Orthographe Universitaire de la Langue Bretonne, gand F. Falc'hun 190 " "
3. - Geriadurig Brezoneg-Galleg ha Galleg-Brezoneg, gand Stéphan-Séité 335 " "
4. - Cent Textes Français à traduire en Breton, gand P. Trepos 285 " "
5. - Breiz Hor Bro (Emb. Kendalc'h) 170 " "
6. - Deskom Brezoneg, Stephan-Séité 700 " "
7. - Le Pluriel Breton gand P. Trepos 1470 " "

LEORIOU SKEUDENNET EVID AR VUGALE :

1. - An Azennig bihan. 235 " "
2. - Ar Honiklig Boudedeo 235 " "

Embannadurioù "EMGLEO-BREIZ" :
Editions "Emgleo Breiz", B, P. 17 BREST
C. C. P. 380-96 RENNES

Imprimerie du Télégramme
- Place Wilson - Brest -

Le Gérant : Dr DUJARDIN



Ar Yez hag ar Vro

- EMGLEO BREIZ -

B. P. 17 BREST